

AR STOURMER

=====

GOUENN HA GLENN, GWAD HA GLAD

Nivoren 1.

Genver-c'hwevrer 1962

HOR STOURM

=====

Meur a gelaouenn a vez embannet bremañ en hor yezh. Bez'ez eus tud a gav dezhe ez int re niverus, zoken. Met eo avat rein da bep unan an tu da gavout ar boued a vago e spered ha sed hon eus savet "AR STOURMER".

Petra a fell dimp, neuze ?

Da gentan-penn, e kemeromp da c'her-stur ar pezh hon eus lakaet dindan anv hor c'helaouenn : GOUENN HA GLENN, GWAD HA GLAD, lese, ne fell ket dimp disrannañ ar div elfenn a genoberiata da ober eus ar Vrezhoned ur strollad dioutan e-unan, un dud diforc'h diouz hec'h amezeion : berezh hon tadoù hag an douar ma vevomp warnezh evel m'o deus i bevet.

D'an eil, ez edoa cwezhall e Breizh paotred taer awalc'h, pe e eun awalc'h, e swirionez, evit hejan o divskoaz pa veze kaoz endro dezhe eus ur c'henoberian gant ar C'Hallaoued. Hiziv an deiz, ez hanvalhe e ve deut da zigeven neurbet un hevelep emzalc'h. Met, gout a ouzomp ez eus c'hoazh aman hag ahont paotred hag a c'hortoz ma vo adkemeret gant an hent nemetañ a grouas an emsav breizhat kevadek. Gerioù hon eus la vez ket "poellek", sanset, o menegiñ : o adkemer balc'h a fell dimp, hag ober bannieloù anezhe. Aman e stourmimp evit Breizh, hag hi lodenn kengor kenelioù Europa. Diazez a fell dimp hor bro war hor priziusan madoù : hon hengoun a Europiz, hag hengoun ar re o deus hor stummet, abaoe kadourion Ambigatus betek soudarded ar Vozenn Perrot.

Plijet pe zisplijet d'an eneoù fall, e vennomp bout kreñv awalc'h evit kuchal a-dal d'an heol, doue-roue'n tron, n'hon eus ken nemet div zoueez : hor c'henel hag hor gwerin.

Kenelelourion omp, lese e vennomp adsevel riez Vreizh en he c'hloket, terrin lezenn dir ar mac'homerezh trevadennek a samm warnomp ar stad gall ha kempenn an hentoù evit ur stourm digor a-enep dezhan.

Gwerinelourion omp ivez, lese e vennomp diazezan kevredigezh hor Breizh dazont war hor gwerin; rein dezhi perc'henniezh ar binvioù-ampletiñ ha sevel en hor bro ur weriniezh wirion distaget diouz levezon ar gäpitalourion ha tud an ilizoù, lakaat ar Vrezhoned da vout mistri en o zi.

Sed perak hon eus adkemeret hon arouez kozh, an hevoud, delvenn an heol ruz a veva hon douar, lun ar vuhez leun a voe heni hor c'henttadoù kent ma teuas warnezh e tenvalizion ha c'hoant-mervel marc'hadourion lous Siria. an arouez eus Europa eo ivez a vo hor preder kendalc'h-us. Peogwir e tigorimp bras hor prenestroù dirak ar pezh a c'hoarvez e nemorant ar meurzoar, gant ar "pobloù gwasket" dreist-holl evit kompren o c'hudennoù hag o skoazellian mar gellomp.

Ar beved a vev e gwazhied hor yaouankiz a vez ur gouestl a c'hoanag hag a drec'h. Dezhi eo ret rein estr eget sifroù yen an arboellerezh

reomp ket fae warnezhe avat, gant ma vent kelennus, met, da gentañ,
reomp dezhi kalon ha karded evit an emgannoù-dieubin a zeu, evit
vleunio adarre e penn pennan ar c'hornog gouenn ar Gelted a roas,
gezhall, he sevenadur da Europa en he fezh.

Buz ha buhez d'hor gwerin, ha d'hor c'hene!l,

"Dassorc'h, Trec'h, ha Trevad" !

A R S T O U R M E R.

AN LAVAR COTH YU LAVAR GWYR...

Ur gumuniezh kravezel diforc'h nend eo ket hepken ar Yuzevion,
hogen -- ar pep pouezusan eo -- ur ouenn beurziforc'h diouzh savboent
an dudoniqzh. End anienel e klev an Europad ez eo estren dezhan ar Yuz-
ev, hag en o tont eus Azia. Ar pezh a anver rakbarn a vez ur santad na-
turel. Ar sevenadurezh a gompazo an enebiezh ouzh ar Izraelad a anzav
ur credenn arall hepken, ne ray biken tra ebet e-kenver ar Yuzev arall-
ouenn.

Ernest RENAN.

M E R E R E Z H .

Priz ar e'homanant-bloaz : Breizh : 7,50 LN.
evit 6 niverenn. Bro-C'Hall : 8 LN.
Germania : 7,50 DM.
Breizh-Veur : 15/-
Iverzon : 15/-

Kas an arc'hant d'an Intron JOSSEAUME, 12 straed ar Mail,
SAVIGNY-s/-Orge, S-&-O, CCP., PARIS 13.949.23.

Priz an niverenn : 1,50 LN.

Kas ar pennadoù hag al lizhiri d'an Ao. Mikael JOSSEAUME,
P.R., PARIS 96, rue Glück (9^e).

E giz prof d'ar galonegezh e kemennomp d'hol lennerien e c'houl-
lennimp 20 LN ouzh ar re a fellfe dezho degemerout hor c'helaouenn e-
barzh ur c'holoenn serret. Ar vroadelouriezh n'eo ket evidomp ur c'hleñ-
ved mezhus.

Deuit da

GAMP 1962 EUROPA AN HANTERNOZ

NARFORD (Bro-Saoz)

4-11 a viz eost 1962.

Goulenn diskleriadennoù ouzh : NORTHERN EUROPEAN RING,
42 Tudor Ave, Broad Lane, C O V E N T R Y, Bro-Saoz.

Paotred yaouank holl geneloù Europa,

STOURMIT A-STROLL !

Diskleriet hervez lezenn.

H E N T A R O U E N N ?

H E N T A N N A T U R .

g a n t R I G A K O S

PETRA eo an heklev donañ en askre an den ? Emskiant e dreamzere-
 lezh, dezhi div zremm : an hini usvedoniell o stumman dazont hirbad di-
 stalus lusk pennan hor personelezh, an hini vevoniezhel o kadarnaat al
 nezadur gouennel. E gerioù all : un nor digor war an tu-hont hag un
 nor digor war ar bed-man. Ha n'int ket rannet krenn an eil diouzh eben:
 nerzh ha glanded emskiant ar ouenn a hench an ene war du ar pep glañ
 e dudenn dirouestlus an tu-hont a chomo dalc'hmat diraezus da c'halloud-
 ou hor reiz. Hogen, mar ne dimp ket evit termenian -- nemet e doareoù
 dreistreizh -- ar pezh a zo ar Peurvoud, e c'hellomp da vihanan kender-
 c'hel da vont gant an hent boulc'het e derou buhez hor gouenn hag er-
 gerzhet ganti e-pad gwellañ kantvedoù bleunvidigezh he nerzh, he youll
 bevan ha trec'hin.

Oberiantiz ar ouenn o vont gant he hent, dizaon ha dare da glask
 he faez, a sko war skramm an tu-hont skeudennoù hag a daolenn e damani
 ar Galv bras an neuz kemeret gant he ferzhioù dezhi hec'h unan. Faltazi-
 us eo ar boudoù-se ganet en he levenez pe eus he c'hoant, an doueed-se
 hervez lusk he c'halon, faltazius evel holl zoueed ar bed, met ur vamm-
 ent a nerzh hag a c'halloud evit he c'herzh ez int ivez, i, hoalus evel
 ur c'han-bale. N'int ket gwirion ? Ha neuze ? Mar deo kaer ha barzhoni-
 us an daolenn ? Petra lakaat evel arouez bedel d'an dianavezus na daol-
 omp nemet ur skleur a vann ac'hanomp dreist hor personelezh breman
 hag a dalvezfe ar Gened, mousc'hoarzh ha bleunienn had ar Vuhez ? Hag
 an doueed all a zo muioc'h ? Ya, ma rankit bezañ moumounet gant ur yod
 speredel evel ur bugel gant e vamm, mar doc'h techet da guzhikat ganti
 ar-benn pep darvoud ho puhez o kredin eman an doue kenhenvel ouzhoc'h
 kemer e blijadur oc'h ober war ho tro e pep kenver. Dereatoc'h e
 alc'h gour e oa Epikouros a lavare e chome an doueed en o lec'h oc'h
 ar pezh o doa da ober er C'Hosmos ha n'en doa an dud nemet derc'h-
 gant an hevelep hent. Ken faeus war ar rinoù hag o lidoù e oa Héra-
 klitos, an usvedoniour donezonet dispâr, Diogenes ar C'Hi ha re ar Stoa
 eus eus dellezegezh a emzalc'h goured hag a stourme gant an armoù
 naturel a aotree dezho chom hep goulenn harp.

N'eo ket spletus kemerout doueed ha feiz tud all, gouennoù all,
 ganet, savet ha stummet dindan divizoù pell boas diouzh ar re a roas
 hor gouenn he dremm hag he hent. Seul belloc'h natur spered ar re a
 kemer diouzh hini ar re a ro, seul gammoc'h ar savadur : kollet o deus
 anternoziz o doueed, doueed an Nenv, doueed an Nerzh hag ar Gadarnded,
 ar Gened hag an Arzoù. Pell meurbet eo ar Yuzevion diouzh Kornogiz hag
 anternoziz, pell zoken diouzh an holl hag an diskianted a zo tuet da
 ganañ o c'hloù diwar abegoù touellus a c'hellfe meizañ ne glaskas bis-
 koazh ar Yuzevion sachañ den en o fobl hag o relijion, en enep, argas a
 reont an arnodennidi a en em gavje rak Jahve a zo o doue a zibabas ane-
 zho hag a gemennas dezho en em zerc'hel pizh hag aketus hep en em veskañ
 gant pobloù all ha pa ve ret distrujañ anezho evit se, da c'hortoz an
 lervezh bras ma vo bodet ha pladet ar c'h-goyim dindan treid an daouzek
 neuriad. Gant se, arabat eo ankounac'haat e oa Jezus ur Yuzev hag un

den a voe e gwirionez heoliet splann e ene gant sked an tu-hont, met den relijion e bobl e oa ivez hag n'eo bet prederour, a glaskas hepken lakaat ar Yuzevien d'en em drein war du rouantelezh Jahve o tont, a gave dezhan, eus un eil mare d'egile, a daol trumm. Klod Israel en e dud reizh a savje neuze war ar bed ha gouestl Jahve d'e bobl nemetan a vije sevenet. Ar c'h-goyim, boudou kontammas d'en em ziwall mat diouto, boudou an denvalijenn speredel n'o doa mann da welout en darvoud meur-se. Holl awen ha dezo Jezus a voe kemenn donedigezh ar Rouantelezh a dennje ivez ar bobl dilennet eus an izelidigozh ma voe kaset e-barzh poblou fallakr a oa o vont da gouezhan d'o zro evit mat. "Jezus n'ea deus biskoazh mennet na rakwelet ar gristeniezh" ha pa ne zeuas bet diwez ar bed, ar Parousia, pa varvas en un doare kriz ha digalonek ar profed e galon vras meurbet ha na glaske droug da zen, e tle rezhveizad an degouezh chom hep mont pelloc'h. Ha mar ne vije bet net ar re eus diskibien hag heulierien Jezus ar Galilead a oa Yuzevien ma-se a vije c'hoarvezet. Hogen tud all en em gavas evit sevel gant-ennou buhez ha marv Jezus roet dezho ur ster kevrinel, ur relijion nevez, Barnabe, Saul a dTarsos dreist-holl. N'em eus ket c'hoant evel da zibunan aman traoù anavezet mat.

Ar pezh a garfen lakaat war wel eo an dra-mañ : Per hag an distro en em droas a-nevez war du ar sinagogenn goude marv o Mestr, a oa Yuzevien ganet ha savet er greizenn, maget gant aergelc'h ken dibar ar bobl dibabet, unan eus ar re ar muiañ unouenn; Josef, lesanvet Barnabe a oa eus enez Kupros; Saul, lesanvet Paol, eus kêr Tarsos. Ha pa seljont, int hag unan bennak all, evel Stefan a voe lazhet e Jerusalema, n'oa netra da dennan eus Yuzevien Palestina, ec'h en em drojont ouz ar re an diavaez strewet aman hag ahont e kêrioù ar Reter nesañ. Ar Yuzevien-se, troc'het abaoe pell alies diouzh o bro hag o kaout da ober bendeiz gant paraniz ma vevent en o zouezh a oa digoroc'h kalz o spered. Prezegrezh Paol hag ar re a stumme gantan a nebeudou ar feiz nevez hep bezañ dalc'hmat emglevet rik etrezo ne reas ket berzh bewech ha dont a reas eta da vezan troet war-du tud al lec'hioù m'en em gave an ebestel enno. Ha setu an dalc'h : e giz-se eo e c'hellas genel ar gristeniezh : savet en dro da bersonelezh Jezus an doueoniezh a dreuzfurme krenn ha krak ar Galilead marv war ar groaz en un doue mab da Jahve, ur seurt kenstroll ha na c'helle bezañ evit ar Yuzevien nemet nezhusan gwallskouer relijiel ne oa ket, en enep, evit souezhan ar bed hellenistik, kenreizhadur war-lerc'h kenreizhadur, ken prederouriezhel ken relijiel oc'h en em astenn warnañ, o steuzian pe oc'h en em veskan, doueed a estrenvroioù, eurpat pe aziat, ejiptek ivez, o tont da greskin ur panteon degemerus kenan.

Ha petra oa an dud-se, a Azia vihanañ ? Ken mesket hag o c'hredennoù, rak fonnusoc'h e oa bet c'hoazh donedigezh gouennoù diniver er c'horn-se eus ar bed eget hini ar relijionoù nevez. Ne c'heller ket c'hoazh zoken dont a-benn da zibunan resis istor, yezhoniezh ha tudoniezh Azia vihanan ha Mezopotania, hen gouzout a ran un dra bennak. Indez-europiz, Semited, "Azianed", gal ha n'en eus ket kalz a ster, tud a oa en em hag a orin dianav, e-pad kantvedoù ha kantvedoù, un hironadur a sel a renas. Pelec'h e oa bet spered uhel Sumeriz ? Pelec'h kadarned dibar Asiriz an Hanternoz, semitek dre ar yezh hepken, pelec'h gallo-d'arzkrouer gouennoù glan deroù an Istor er c'horn-bed-se ? Ha bur-keid speredel prederouriezh Hellas, ken leun, ken klok, ken uhel ha ken dibar, klod divarvel an denelezh, trec'h mil ha mil gwech da sord'hen-nerd egelel ar Yuzevien ha n'o doa prederouriezh na kalz na nebet ? Pell zo arack gouedigezh ar gristeniezh, spered Bro-C'hres a voe war ziskar a-gevret gant kozhadur ar ouenn hollgaer-se : b'ar-keid, hironed, n'oa ken. Koulz lavarout hag an heol vaouank speredel

ar ro d'ar gouennoù kaer ha kreñv o sevel muioc'h a gened hag a nerzh, a lorc'h hag a youll-emledan, ne splanne ken warno : na prederour bras nag arzour doueel na kadour alouber brudet. Dres ar greizenn da zege-merout ur gredenn a vije bet argaset en amzerioù bras spered Hellas.

Un nebeut goude e c'hoarvezas an hevelep tra e Roma. Breinet e oa endeo pobl Roma gant degasadennoù hag aspadennoù betek enni Barbared a bep seurt. A dra sur, an hironadur a rene dreist-holl er renkadoù-tud izel, astud, sklaved, gopridi. Ha pelec'h e kavas ar feiz nevez hec'h engouestlidi ? E-touezh ar re-se koulz er Reter hag er C'Hornog. Brientinien ha lenneien Roma a oa eus ur stumm spered all hag hen diskouezas.

N'eo ket ma vije da rebech kement kredennoù iskis a c'hallje bezañ da vihanan barzhonius ha mojennoù plijus mar ne glaskjed ket o lakaat da zont ur benveg a zrasterezh speredel; ar spered eo : hinitud hep meurded, hep lorc'h, hep karantez evit ar bed, ar boudoù kaer, ar vuhez leun hag hael, hep c'hoant d'en em ziogelan ha da drec'hiñ, pep hini war e dachenn hag hervez donezonou e bersonelezh; spered an dud ha n'emaint ket e froud kerzh ar ouenn, penesoù dare da gejan gant penesoù all forzh a be lec'h, gouenn ha natur, spered ar sklaved. Noblded an emzalc'h a zeu eus santad an dalvoudegezh hiniennel, an uhelder gouennel, ar sentiñ ouzh breoù ar c'hosmog : digevatalded ar boudoù ha brientinelezh. Ha pep gouenn o vleunian a ra eviti doueed klotus. Dres evel ma ra an tropelloù hironed.

Asiriz a roas d'o doue broadel Assur ar roll pennañ er vede'heneliezh vras tra ma roe anezhañ diouzh o zu Babiloniz d'o hini, Marduk. Ar feiz nevez a aloubas a nebeudoù nerzhoù an Impalaeriezh roman o lakaat ur ramz da gouezhañ dre vreinan e youll hag e lusk war-du an emledañ hag ar galloud. Al lu roman a gemmas a spered. Gwir eo, ar preñv a oa endeo er frouezhenn. Al lidoù reterel a bep seurt a rae o reuz er speredoù. Eus an impalaerezh roman, ar gristeniezh a dapas Kelted ha Germaned; da gentañ hag aesoc'h Kelted an Douar-bras, merket endeo ur tamm mat anezho gant ar meskach gouennel hag o stagan da goll spered brezelgar, eget Hanternoziz Germania ha Skandinavia hag Iverzoniz cho-met glanoc'h o meuriadoù. Derc'hel a rejont penn dalc'hmat d'ar Romaned hag a daolioù kleze dreist-holl e voent, en diwez, troet da gredenn an disivouderien yuzev.

Hogen e-pad ar Grennamzer, levezon ar gristeniezh a generas ur stumm iskis awalc'h : an holl en em zisklerias kristen daoust d'an emgannoù relijiel da vezan taer; hogen nerzhoù don ar c'hevredad a yane re greñv evit ma c'hellje spered gwirion ar relijion-se dielfennañ ha divodan o nerzh evel m'en doa graet evit an Impalaeriezh roman, muioc'h endeo war e ziskar. An urzhaz, ar spered brezelgar hag aristokratek a gendalc'has da ren : ar feiz a oa ur savadur speredel hag a lakaas nebeut a roudoù gwirion er vuhez.

Daou dra a bouez, koulskoude : diouzh an tu mat, ur bleuniadur arzel a dizhas war dachenn an tisaverezh un uhelder ha n'ez eas dreist stumm all ebet (e ranker lavarout ez eo bravan ha meurdezusañ furmoù tisavouriezhel ar re relijiel eus holl gredennoù ar pobloù donezonet mat, rak Galv an Tu-hont a zo ur benveg a ra efed reishoc'h e domani ar faltazi arzel eget en hini ar ratoz glan); diouzh an tu all, an hini fall, an tech d'al loustoni a van c'hoazh re alies en hor C'Hornog nann-hanternoziz : tra ma oa ken troet ar baganiz d'en em walc'hin ha d'en em zerc'hel naet, ar grennamzer kristen a vevas hep kempenn ar c'horfoù : mezhus eo hervez ar gristeniezh gwelout ar re-man, diskouez anezho, follentezh a-enep natur na c'hello kompren biken an den a gav ken kaer ha ken glan ur c'horf den hag ur c'horf loen, ur vleunienn pe ur blantenn pa'z eo frammet brav ha kenglotus an eil re hag ar re all.

"Diorged eo Petronius e-kichen ar gristenien" a skrive Friedrich Nietzsche. Ha gwir eo pa lakaer kenver-ha-kenver an den a sell ouzh holl draoù an natur en un hevelep doare eeun, degemerus, karantezus ha lirzhin evel ma ra ur boud hag a zo e-unan un elfenn eus an natur, hag an hini a zistro e benn dirak darn eus an traoù-se, n'eo ket dre ma vije da rebech d'an natur hogen dre m'eo lakaet da louzan an traoù-se dindan levezonoù kammus, diboellus hag enep d'ar vuhez, d'ar gened, d'an nerzh ha d'an naetted a spered.

Iskis awalc'h e seblant bezañ eta kerzh ar gristeniezh e-touezh pobladoù ar C'Hornog : er Grennamzer uhel e veve an hengredennoù dindan gwiskad ar feiz nevez ha taerder doareennoù-bevañ ar C'Hermand hag ar Gelted a zalc'has eta bev awalc'h renadur ar renkadoù-tud ha spered ar vrezelourien gent. Heman o tiskouez mat war gouezañ evelato ma seller ouzh an diforc'h a ziwan etre emzalc'h ar c'hadour kelt pe c'herman er marevioù rakkristen hag hini marc'hegen amzer ar c'hladdalc'helezh. Kadarn eo ar re-man dalc'hmat, ha kenverian a c'heller soudarded ar C'Hroaziadegoù ouzh Skandinaviz rederien-vor war ar c'hraf-se pa soñjant an eil re hag ar re all e plije o ober d'o doueed, da lavarout eo an diframmañ traoù a-dre daouarn o enebourien, madoù, douar pe lec'hioù a azeulerezh, n'eus forzh. Hogen un dra a bouez a c'hoarveze koulskoude da ober ur rann etrezo : emskiant ar "pec'hed" hag ar morc'hed e-mesk ar gristenien, unan eus brasan sioù an eneoù, unan eus tristañ lodennoù herez ar Semited, a ranne endeo e Mezopotamia Sumeriz diouzh Babiloniz, gwashaet c'hoazh gant ar Yuzevion pa voent faezhet ha dizouaret garv gant o enebourien ha pa en em drojont-i war-du rouantelezhioù speredel, gwasket gant ar santimant e paeent evit bezañ displijet da Jahve. Ar pec'hed, andon diheskus a bilpousezh, a gilerezh, a zilez, a wrac'helladur speredel. Ha pegen divalav, pegen kontrol d'an natur eo an den a zo tennet dioutañ e-unan gant un tech a ra eus al loen kaer, sonn ha kreñv e tleje bezañ ur brenvadenn ha n'eo mui gouest d'en em zerc'hel a-sav ? Pa soñjer ez eo bet tud deol, "sant" zoken, hag a selle evel gwellañ doare da "ober pinijenn", bevañ hep en em walc'hin ha goloet a astuz.

Ar gour dellezek eus an anv-se a ra evel ma ra ar bleunioù, ar valafennoù, an evned, ar boudoù a ziskouez kaerder hael ar Vuhez, al loened preizh a sell ouzh ar bed gant daoulagad lec'hiet en araok o fenn evel ma heverke Oswald Spengler, ar boudoù a ziskouez atav nerzh ha youll en em c'halvont dre o lusk e-unan da greskiñ atav an hevelep Buhez : pleustrin diehan da dennañ eus e c'halloudegezhioù holl ar pezh a c'hell bezañ tennet : muioc'h a nerzh, a c'halloud, a gempuez-dibarzh, a gened hag a garantez evit kaerder an Natur. Daou dra dreist-holl a zo da argas, a lavare La Rochefoucauld, ar voutinded hag ar gwander. Ha da zerc'hel ivez an ene dieub. Na talvoudus eo aman kentel Max Stirner ha na felle dezhañ bezañ dindan levezon idolenn ebet, netra eus ar pezh a dalvez da vistri ar c'hre da zerc'hel tolpet mat dindan o beli ar pennoù chatal denel : e gwirionez, e donder va Me e santan un hedad nerzh didermen, o tont a belloc'h eget va ganedigezh hag o tennañ da zremwelou ec'hon-divent, ar bersonelezh hiniennel rik a zo hini va zennad-hent-bremañ, ar bersonelezh c'houennel a zoug eben en he zonkadur kosmek dindan dorn an Tonkadur bras na c'heller rein un dremm dezhañ ma venner seveniñ gwalc'h c'hoantoù mibilis an istud. Ar Ouenn n'eo e doare ebet un idolenn hogen diazez ar bersonelezh. Hent stummidigezh an eneoù gant ar gristeniezh, araok tizhout an degouezhadenn a welomp-ni, a dremenas dre veur a beuz, a stroñs hag a stok. Da venegiñ dreist-holl fedoù illur an Azginivelezh, an Adreizhadur, an Dispac'h gall.

(Da genderc'hel.)

KENWELEADENN GANT MARTIN BORMANN

An Ao. Martin BORMANN, pa dremenat nevez zo dre Baris hon degemerat, ken hegarat ha boas, hag a zisklerias dimp e sonjoù diwar-benn kudenn an darempredoù etre ar c'henoù europat hag ar re arallouenn o kemerout skouer e genel-en. Ken talvoudus all e hanval dimp bout e varn evit ar Vrezhonek hag ar Gelted hag ez omp laouen ha lorc'hus rein aman da heul d'hol lennerien komzoù an Europad meur-se.

AR STOURMER.

"Hor Blenier en deus anaavezet e oa techet an den alamanat, ar Germanad, truezek ha kizidik ez-aniennel, da vezan bamet gant pep tra a zeu digant an estren ha dle zegemerout. Ret eo d'an den-se kadarnaat dalc'hmat e galon, oberian gant evezh, en em gela'hian a ziskred, evitan da c'hallout padout ha chom krenv e-barzh ur bed hollenebour.

Er c'hontrol, ar Yusev a vez, ez-aniennel, evezhiek, diskredit, war e api, ouzh an estren. Dezhan eo ret prezegennin ar gunved hag an unvanusted hervez al lavar "karit hoc'h enebour" d'e lakaat da vezan darempredusoc'h.

E-doug ur milved e voe enkontammet ar Germanad, dindan lovezon ar gristeniezh, gant binim ar meizan estren. Dre se en deus kollet an nerzh a roas dezhan ar galloud da ziazehan ar c'hornogved ha da sevel Impalaeriezh Roman Santel kenel ar C'Hermand ha deut eo, e 1918, ur beulke a daole e armoù dirak pevarzek poent ur fistilher o prezegenniñ an unvanadur.

Setu perak e voe skuilhet dre an hollved ar gwad germanek ouzh servij mad an estrenien. "

K E L A O U E N N O Û

LE VIKING, Organo de combat de l'OSS, "Religion des Druides". Jear Claude Monet; P.R., PARIS 39.

Degeneret hon eus ar gelaouenn-mañ a hanval bout savet gant paotred yaouank leun a feiz. N'eur ket evit lavarout perak ez em bet dibabet gante kemer an anv iskis a "Religion des Druides" pa'z schuer ar pennadoù-stur gant "Neil Odin"... Paour kaozh drouized... A hent all e kav da baotred an OSS (Urzh an Hovod, mar plij !) e vefe eusubl ad-sevel Bro-C'Hall en ur ziazehan ar vro war an hil (denoniell) horzhkek, en ul lakaat an Alpineion pe an Dinareion dindan beli ar re glas o daou-lagad ha melen o blev...

THE NORTHERN EUROPEAN, Mr. Colin Jordan, 42, Tudor Avenue, Broad Lane, COVENTRY, Bro-Saoz.

L'EUROPE REBELLE, evit an urzh europat nevez. M. J. Desbault, 38, rue d'Albanie, Brussel (Belgia).

INTER-EUROPA-INFO RMATION, H. Otto Karl Düpov, Ubierstrasse 55, Bad-Godesberg, Rheinland, (Germania).

CELTIA, M. Jacques Quatreboeufs, straed Mulu, Landerder, Merenieg, (Aodoù-Arvor).

ER DEVOBIS ANMARVOLOBIS . . .

Gant Jon MIRANDE.

Graet eo bet ar gelaouenn-mañ evit ar re emskiant eus o gouenn : kas a reomp pell ac'hanomp pimpatrom ar meeting pot bet prezegennet dimp ken gant Iliz Ruven, ken gant riezrenerezh Gweriniezh Vro-C' Hall, ken gant ar baotred eus an tu kleiz enebet outañ hag a ra i o-uran enepfas-kourion anezhe. E-kenyer ar Yuzevion, ar Verianed, pe an antropoideion all, e lavar ar re gunvan ac'hanomp, Europiz wirion ma'z omp; " Aent en d'ar gêr, ha choment end." Evit ar re nebeutoc'h kuñv...

Un dra, avat, en em zisrann a-wezhoù entromp, ha talvoudus eo eget n'er c'hredomp alies, hag a vizo ouzhimp a stourm evel breuler, dorn ouzh dorn, pa zeuy pred nevet ar gad wirion : ar gravez an hini eo. Meur a hini, dinaouet eus ar vroadelouriezh klasel, daoust dezhañ bezañ he dilezet hag act en tu all dezhi, a vefe laouen a walc'h o tere'hel ur gristeniezh aznevesaet, gourel, kadarn -- ar gristeniezh-se a anvree, da skouer, H.S. Chamberlain --; hogen reoù all n'o deus ket digonet e voe ar gristeniezh un herezh a-ziwar ar prederian hebreat evel ar varksadegezh hag an demokratiezh giz Bro-C' Hall pe ar Stadoù-Unanet. Ul lodenn eus ar strollad a zistruj buhez korf, ene ha spered Europiz n'eo ken, hag a bad abaoe tost da zaou vilved, renet gant Reteridi; ret eo dimp, neyze, stourm didruez outi. Ur reoù bennak, kleve gante ar wirionez-man, a daol er-maez pep kravez /religion/, en em ziskouez evel hollzanvezourion aheurtet hag a ra barzhed hag hunvreourion eus ar re deus dalc'het ur gredenn speredel. Met daoust hag e kav deoc'h ez oa hunvreourion ha rambreourion eus ar reourion /harozed/ dra-Roben en em gantas "Gott mit uns" evit savetein gwerzhioù speredel ar C'Hornogva, hag gant ur gadarnded anavezet gant an holl, a-enep da vandennadoù hollzanvezdek ar volcheviked ? Hag eman ar sonj ganeoc'h ez oa hollzanvezour--er ster intentet gant radikaled Vro-C' Hall, elese, en hoc'h hini ivez, siwazh, va c'hileion gouennadek hag hollzanvezdek -- ur Friedrich Nietzsche pe un Oswald Spengler a voe evit peurvuiañ ac'hanomp aotrounez hor prederian ?

Ya, a gileion, difenn glanded hor gouennoù europat a zle bezañ pennefenn hon emgann, hag er c'henver-se, ez on a-du gant ar pezh a vez graet "dirollerezh" tud feuls ha nervied gant al leueoù demokratik. Arabat eo deoc'h goubriziañ talvoudegezh ar gravez, c'hwi hoc'h-ur ha na grelit ket. Ne gav ket din e c'hellimp stourm, ken nebeut e ve, ouzh Iliz Ruven -- an tisavadur savet ken marzhus (gant kenwallerezh tud hor gouenn hag hor preder, gwir eo) hag a oar, dre zisprizañ pep tri, deha-lekaat ouzh pep degouezh --, pe a-enep d'an Ilizoù hugunoù yuzevoc'h e-lezh a zo deut a-benn da zonvaat ha da sodañ uheloyenn an Angled-Saot--on koulz hag hini Gelted tramor, gant na hellimp rein da Europiz wenn--on ur gredenn nevez da eskemm e-metou ar fillidigezh vuhezek ha spered--on ma vevont enni diwar levezon ar Yuzevion.

Pe gentoc'h, hec'h eilreñ dezhe : rak, pell-pell kent ma voe lakaet warnomp gant Reteridi yev milliget e Yakweh garv, doue a gasoni, azial hag a ziseunder, ez azeule hon tadoù o doueoù dezhe anan. Evel--ezh, pe gredent ket enne, ar re wellañ anezhe ne gredent ket enne d'an nebeutan (peogwir ez eus ivez e-touezh ar wenngenneion ur yuianiver di--zellezek d'en em ziskouez) evel ma c'hall ur vigodez kristen krediñ en e doue antropomorfek pe en "Troned, Vertuzioù ha Dominasi onoù"... Hogen ouient e oa an doueoù-man, p'o galver an D'ada -- Dazoue -- evel I-

* ***
* ***
* ***
* ***
* ***

AR STOURMER

* ***
* ***
* ***
* ***
* ***

GOUENN HA GLENN, GWAD HA GLAD

Niverenn 2.

Meurzh-ebrel 1962

ARABAT HOR C'HOMPREN A - DREUZ ! 1

FASKOURION n'omp ket evit ur blank ! Kenelwerinelourion ne lavaromp ket. C'hwitañ a eure holl arnodennoù ar faskourion war dachenn ar werinadegezh : gwir eo eus faskouriezh wirion Mussolini, ha muioc'h c'hoazh eus ar pseudofaskourion evel Franco, hag eñ ur c'hilstourmer divezh ha yuzeviekaet, pe Salazar, pennskouer ar broadelour seven ha strizh e spered. N'eus nemet Gamal abd elNasser ha Juan Peron, bet levezonet don gant an naziadelezh o dije dandizhet ar pal. En tu enep, kelennadurezh ar vreudeur Strasser hag an Dr. Goebbels a chom ur skouer a verzh war an dachenn-se, nemet e voe da heul breinaet ivez gant paotred an tu dehou goude "noz ar c'hontilli hir" : dalc'hit soñj eus stad truek Germania araoek an naziezh hag eus hec'h adsevel marzhus; ha mar gellas ar vro faezhet-se adkavout he nerzh hag he galloudegezh war-lerc'h diwezhañ brezel enbro an dud wenn, en abeg d'an had bet hadet gant an naziezh eo.

FASKOURION n'omp ket, peogwir nend eo ket enepkapitalour ar faskouriezh; nend eo ket ankristen kennebeut ha ne zifenn ket an hil gwenn en e vuhezva, dres evel nend eo ket a-du gant didrevadennekaat al livgroc'heneion en o buhezvaoù. Ur vroadelouriezh e-giz Barrès hag Annunzio, adkempennet a vare da vare eo ar faskouriezh : sellit da skouer ouzh Gallaoued "Jeune Nation" hag an OAS bremañ. Peurliesañ ez ankounac'haer ez eus "sokialouriezh" e-barzh ar ger "nazionalsokialouriezh" : ur werinelouriezh wirion o kenglotañ gant an den en e bezh, lese, o reiñ d'ar werin al lañs war galloudezhioù an arc'hant evit seveniñ ur weriniezh na vehe ket mevel ar vreudeur Rothschild ouzh he fenn ha na vehe ket aotreet d'an eskeb ha d'ar gardinaled prezegenniñ melus an trubardezh e-keñver ar vro. A-du omp ivez gant an didrevadennekaat : pep heni mestr en e di. Bez'e felle da Hitler ha d'e gileion dieubiñ pobloù Afrika ha sevenet o dizie o dezo keneve ar bloutodemokrated, hag, a zo muioc'h, gant azaouez ar re zu pe azgwenn, rak ar vorianed hag an Arabed a zo bet doujus en o c'heñver betek dibenn ar bedvrezel, tra m'emaint o tisprizout pennoù bras ar Frañsizion daoust d'ar mann stultennus o c'hlaviañ bep beure war ar rouanezigoù du bet advadezet "prezidanted" hag o nied dreistniver deut da "studierion" e doug

m'emañ an dilabour hag ar reuziad en hor bro ha na chom da labourerion ha kouerion Vreizh nemet ar goar da vont da strakal brulu war ar menezioù du. En India hec'h-unan, gant lu enepsaoz Chandra Bose ha Devitri Mukherjee, e voe skoazellet ar genelwerinelouriezh gant ar vlenierion livgroc'henek pennañ. Ret eo deñ c'hel soñj eus ar c'henvri a ren etre tud a hil hag a ouenn disheñvel pa'z int balc'h hag hael. Ken gwir eo ma voe mufti meur Yerouchalem, tad speredel an holl vlenierion voslemat kevadek (nemet Messali Hadj), unan eus ar re ziwezhañ a chomas e Berlin e 1945. Ur skouer c'hoazh : ne fellas dougen en emgann d'an Dr. Fakhousa ha d'ar mavdiern aljeriat Mohammedi Said kennemet o zokouarn hevoudek...

* ***
* * *

* * *
*** *

ARABAT hor c'hompren a-dreuz !

N'EUS KET ac'hanomp kennebeut paotred hiraezhak, sonnet, oc'h arvestiñ deol un amzeriad dremenet da vat, lese, hitlerourion : ne fell ket deomp bezañ soudarded hanter-bae o tasorc'hiñ Napoleon gozh goude 1824 : marv eo Ata-Ulf, peoc'h d'e anaon ! A du arall, petra a c'hoantae ar rakkannad-se marv evit Europa e 1945 keneve gwelout bevañ hag emledanaat e gelenn e-touesk Europiz ? Daoust ha ne c'hoantae ket e welout kemmañ gant redoù don an darvoudoù, hep skleroz skantennek ar c'hatekizoù marksat pe gristen, lidoù bevenmaenel trist, palforset evelato hervez mod an deiz evit o lakaat da lavarout an e-nepkaer eus o c'hentskrid !

DAOUST ha n'eo ket eeun embann e voe ur skrapellapi loudour pa zaeljod da "zieubiñ" pevar-ugent milion a Europiz diouzh ur "yev" kuñv a-walc'h (al luoz german ne rejont droug ebet d'ar re a chome hep o heskinañ) ha pa vouger dindan hollyevierezh ar gomunouriezh c'hwec'h ugent milion a broleterion ?

SETU evit na vo ket kammveizet hor soñj deomp-ni Stourmerion a fell deomp da benn kentañ adsevel hor gwerin, hag he lakaat da ankounac'haat hec'h uvelded a zoganez skoemp (ha skoemp dreist-holl e keñver an heni a zesk dezhi he doganerezh, ha neket e-keñver he doganer !) dre gaer, mar deo gallus, dre heg, mar deo ret.

Un uvelder a rankomp pareañ da gentañ, hag hep tortal : aon spon-tus blenierion emsav Breizh rak chom hep bout bepred douget gant ar redoù-diredoù lies alamodek eus Paris. Nepred n'o deus lañs war ar pezh a c'hoarvezo, emaint atav o plitrotat ankeniek a-drek ar bloaz tremenet, ar c'heal hesket, al luoz faezhet, heñvel ouzh penngadourion Franz-Josef Habsburg ha jeneraled skol-vrezel Bro-C'Hall. Ar servij kentañ a hellomp rentañ d'hor gwerin enta,

a zo diskouez dezhi dibaouez ar pezh a hellhe he saveteiñ hep klask diboell da jubennañ kammyoull ha falsster hec'h astennadoù skoelf evel ma ra re alies blenierion -- sañset -- an emsav, moret e kemplegù diwanet war gardell ar snoberezh parizian, o krediñ ez eo dav dezhe heuliañ ar pezh a soñj, herveze, o fobl dre ma'z int he fennoù, hep merzout ez eo aet hor gwerin, siwazh, da vout un eilotes-stroll, ennañ youll ebet da vont trema ur pal bennak, da seveniñ un dra bennak. Setu perak e fell da vagadig ar Stourmerion, er c'hontrol, kinnig diwidre, hep orbidoù, al louzaouadur nemetañ kreñv a-walc'h evit derc'hel bev ar paotr toc'hor : stourm a-wel-kaer evit sevel ur Vreizh vroadelour hag enepkapitalour.

A DU ARALL, petra bennak a zegouezo da benn an diwez, ne raimp ket an ezvan, evelhenn, da "ankounac'haat" divezh ar vroadelourion vrezhon nemete, gourel ha spiswel, en em aberzhas evit ar vro. An damsklaved hag ar vevelion a zisoñj o reourion (harozed); hogen ar c'heneliou hag a c'honez o gwir da vevañ hag o gwir da labourat evite o-unan, a azgoulemm groñs atav, digempleg, o re bet emouestlet ha marvet en emgannoù gward-araok, hep teurel pled ouzh tra estr eget galloudezh o fenndiazezennoù hag o c'hadoniezh, ha neket gant prederiañ penaos heuliañ terzhiennek monedone aerbouezerez gizioù politikel o alouberion.

* ***
* * *

* * *
*** *

STOURM a vennomp. Araok kregiñ d'en em gannañ, avat, eo ret kaout soudarded gouest d'en ober hag ur raktres brezel : arabat krediñ e teuer da gadour hep en em zanken hir ha kalet; ar brezel a zesker evel ma reer eus ar vezekniezh ha diboell e vehe leuskel paotred yaouank d'an emgann hep reiñ dezhe da gentañ an tu d'en em gannañ. Merzherion a-walc'h hon eus bet. Trechourion a fell deomp bremañ.

A R S T O U R M E R

RENEREZH : Mikael JOSSEAUME.

MEREREZH : An Intron JOSSEAUME, 12, rue du Mail, Savigny-sur-Orge, S&O, KRP.
13.949.23, PARIS.

Priz ar c'homanant-bloaz . Breizh : 7,50 LN; Bro-C'Hall : 8 LN; Germania 7,50 DM;
Keltiogva tramor : 12/-; Bro-Saoz : 15/-

An niverenn : 1,50 ; evit an tousegi : 2 LN hag ouzhpenn.

*

HENT AR OUENN

HENT AN NATUR

gant RIGAKOS.

- I I -

Alies a-walc'h e seller ouzh an Azginivelezh evel ouzh un darvoud en deus damaozet, diouzh sellvaoù zo, an Adreizhadur hag e kemerer ivez Dispac'h 1789 evel un heuliad eus an Adreizhadur. Ha koulskoude, petra eo e gwirionez lec'hiadurioù an tri darvoud-se an eil e-keñver egile ?

An hini kentañ, an Azginivelezh, en e strad, e lusk-diazez, a zo un distro d'ar baganiezh c'hlasel, an daou all, diavaezadurioù un emsav a baloded voutin, eneoù diaristokratel, istud, a-enep boudoù all divoutin, kaer ha taer... A dra sur gant diforc'hioù, hogen muioc'h a-ziwzr ar c'horre eget a strad. An dibarelezh, ar vrientinelezh, an doare buhez dereat da bep hini hervez urzhaz an natur, trec'h an arzoù kaer (an dra-mañ a zo un arouez veur) a zoug an Azginivelezh; fanategezh an astud, kasoni an donezonet-dister, ar gourvenn a zo donañ plog o ene strizh, ar c'hoant hag ar youll da ziskenn ar pezh a zo kreñv, kaer ha diemaozus d'ar boud-chatal, d'o live, setu awen an daou zarvoud all, gant distruj an traoù kenedus (keñveriañ treuzfurmidigezh muskeennoù Arabed Andalouzia gant dismantradur an ilizoù kaerañ a berzh protestanted koulz ha dispac'herien) : ha peseurt azeulva e-touezh holl relijionoù ar bed a zo ken dinatur hag hini an hugunoded ? Pabed an Azginivelezh a voe tud vamus a lakas da vleuniañ en-dro dezho haelañ mousc'hoarzhioù ar Vuhez. Sked ar youll-kreskiñ hag emledañ ha karantez evit an arzoù a oa hogos heñvel en Alessandro Borgia hag ar Sigismondo Malatesta-se en e lezig pagan. Hag hini anezho ne daole e berlezennoù d'ar moc'h.

Luther, eñ, ne oa ket evit blazañ ur seurt aergelc'h na kaout emzalc'h ur brientin, rak ur boud boutin en doa, ene un "uomo qualunque". Calvin a oa unan eus euzhusañ re an istor : yen, ken digened e gorf hag e ene, patrom ar buritaned, ar staoterien skorn. Luther ne c'hell ket gouzpañ kennebeut Erasmus, hemañ un aristokrat a ene evel tud veur an Azginivelezh.

Ha korifeed an Dispac'h ? Adalek ar yuzev, brein e pep keñver, J.-P. Marat, betek ar Maximilien Robespierre-se, enkorfadur an den a gomite, a glub, iriennet teodek a gavailhad, ar c'hontrol-buhez eus an den meur, ne weler en o strollad nemet kendastum a glogorenoù loet, trist ha divalav o koroil a-zioc'h fankigell plat an engroez o tic'hlanañ. Ha pebezh diforc'h a ziazez speredel : aotrounez an Azginivelezh o klask, dieub ha ledan o gwel, ar Gened; izilded an Adreizhadur hag an Dispac'h,

serret strizh o speredigoù war ar pezh a zalc hent evit ar Wirionez peurvoudel, heñvel ivez, er feur-se, ouzh ar gatoliked.

Bremañ e c'hello bezañ lavaret din : nouze, petra a zeu da vezañ kudenn ar Ouenn amañ ? An Azginivelezh n'eo ket kement oberenn an Hanternoz hag hini al Latined : Luther hag en e rak Wyclef a voe en tu all d'an darvoud meur-se.

Netra ne deo seun. Kleñved ar buritaneezh a zo norzhdek, diwanet ha displeget en ene hanternoz el pa voe aloubet gant ar gristeniezh. Eeunoc'h eo an ene-se eget hini tud ar broioù kreizdouarel, eeunoc'h e pep keñver : diaes eo, da skouer, kavout bugale drenk, tud turmudek ha zoken kenwerzhourion dibervezh en hanternoz Europa. Treuzvarc'hadourien n'int ket tud an Norzh. Kemerout a reont ez dic'hoarzh pennsturioù o c'herzh er vuhez. Troet eta o speredoù d'ur gredenn nevez, savet dreist-holl o bugale en un aergelc'h o fetisaat e pep doare endro dezho, e rejont en o emzalc'h buhezegezhel hep c'hoari gant framm nevez o gwelout eus an Tu-hont. Ne lavaran ket, hag e teuan ur wech muic'h war ar poent-mañ, o emzalc'h kevredigezhel : urzhaziet kreñv, taer ha brezelgar e chomjont. Da skouer, aes eo gwelout doareoù en em ren disheñvel a-walc'h evit tud an amzerioù tremenet abaoe pell endeo : Fulup II a Vro-Spagn a sav en noz da vont da ganañ gant ar venec'h, hag eñ koñfizet en doueusted, ne ziouere ket evit ken nebeut a "zilennadezed", div pe deir zoken war un dro, hogos peadra da ober un harem par da hini Pietro d'Arezzo (na skrivas ket hepken ur Ragionamenti brudet hag ur Sonnetti lussuriosi, hogen levrioù a zevosion), ha diouzh an tu all, Henry VIII a Vro-Saoz a argase, toullbac'he pe lakae da lazhañ zoken ar priedoù a en em heulie en e vuhez, ar priedoù rak dimeziñ a ranke betek terriñ an darempredoù gant ar Pab ha sevel un Iliz dieub. Ha kalz tostoc'h deomp, ne dufe ket kennebeut Benito Mussolini war ar pezh a anver e bro Tartarin ar "femellen", gwreg ha bugale en doa da gentañ evel just ha rediañ ivez e vinistred da zimeziñ, hogen e kichen al lidoù da unan eus idolennoù ar Stad ez eus re all a severer ez evezhiekoc'hik, da idolennoù prevez hag hon den a ouie dispar diouti. Mervel a reas e kichen e vuiañ-garet feal Claretta Petacci a voe kalonekoc'h egetañ, etre klochedoù, dirak ar marv. Piler an Iliz war ar marc'had ivez. Er c'hontrol, Adolf Hitler, daoust dezhañ da gaout un temz spered pennaelet a-enep d'an tu kristen a voe un doare puritan na farse morse gant ar soudarded all pa oa el lu, na gant tud all e lec'hioù all diwar-benn ar merc'hed pe n'eus forzh pe zavez mav all. Ne zimezas ket dre ma kave dezhañ e tlee ur penn stad chom dieub. Hogen n'en doa nemet ur geneilez feul a reas e bried anezhi pa ne oa nemet ar marv da c'hortoz eus un eil mare d'egile.

Iskis a-walc'h hag heverk eo al luskoù o vont hag o tont e buhez ar Ouenn wenn en Hanternoz hag er C'Heisteiz : an Azginivelezh a glote gwelloc'h gant doug ar pobloù kreizdouarel d'ar pompad ha d'ar walc'h-luzi-señt-pourglekoc'h ar Greis-

teiziz, an Adreizhadur a glote gwelloc'h gant doug ar pobloù hanternoz, o eeunded hag o lealded, evel ma lavaren, ar re gentañ oc'h en em adkavout e dizalc'hded al lennegezh, an arz ha renerezh ar vuhez hervez klokted, kaerder hag haelded an natur, an eil re oc'h ober e gwirionez ur pikol c'hwitadenn dre ma ne voent ket dare a-walc'h c'hoazh da hejañ diwarno samm al levezon estren hag enepnatur : derc'hel a raent daoust d'ar gristeniezh d'o c'hadarned ha da spered o gouenn (her gwelout a raimp pelloc'h o komz eus Amerikaniz), met dre demz o spered o kemerout siriusoc'h traoù ar vuhez speredel, e voent c'hoazh o klask donaat ha glanaat ar gredenn deuet da aloubiñ anezho. War ur bazenn izeloc'h e vanent c'hoazh. N'eus nemet en hon amzer e tlee tarzhañ ar c'hilstourm gwirion : hini Ludendorf, Alfred Rosenberg, Julius Streicher, hini Adolf Hitler. Her gwelout a raimp ivez pelloc'h.

Ouzhpenn-se, brientinien an Azginivelezh a en em droe davet eien o broadoù kreizdouarel, an eien-se n'oant ket re an Hanternoziz na grogint da zasorc'hañ anezho a nebeudoù nemet gant romantelezh an XIXvet kantved. Un dra a c'hoarvezas ivez gant an Adreizhadur : dilerc'hioù ar baganiezh chomet en Iliz katolik, pelloc'h diouzh an ene norzhek a steuzias, hogen evit reiñ plas d'ul levezon kreñvoc'h a-berzh an elfennoù yuzev. Amañ ez eus da bouezañ war ur poent-diazev : hervez ma lavare Friedrich Nietzsche, emskiant ar pec'hed, ar morc'hed, an emskiant a vezañ seul dostoc'h da Zoue ma en em izelaer muioc'h dirazañ a zo yuzev ha lakaet en defe an emzalc'h-se an Hellasiz da c'hoarzhin, int tud nobl hag a-walc'h dezho kaout o zreid war an douar ha n'eo ket o daoulin pe o zal.

Ya, un emzalc'h sklav a ouzhpenn Nietzsche. Ha gwir eo ? Da welout, rak perak e kaver ur seurt emzalc'h er Yuzevien ? En em izelaat a raent muioc'h eget ar pobloù all dirak an doueelezh dre ma oa deuet o Yahwe d'en em gammgerout gant ar Peurvoud tra ma en em rene disheñvel pobloù evel an Hellasiz o doa da ober pe gant doueed kalz tostoc'h d'an dud ha renet o unan gant an Heimarméné pe gant "Doue ar brederourien", evel ar Bellreteriz na roent stumm ebet d'ar Peurvoud dianavevus, an doueed, boudoù o kas ur vuhez hiroc'h eget hini an dud hogen nann-treamzerel hag o rankout bezañ dieubet o-unan eus Bed ar Stumm. En em izelaat eta, gwir eo, hogen en em uhelaat dre adlusk, rak arabat morse ankounac'haat donañ pleg an ene yuzev : hini ar bobl dilemmet. Bezañ dilemmet gant ur seurt doue a roe ur sked hag un dalvoudegezh dispar d'an azeulerien forzh pegement ec'h en em gavjent plat dirazañ. Setu ene ar yuzevien : debret gant an emskiant a c'houzañvont dre m'o deus pec'het ha war un dro gant hini o zreistelezh a bobl nemeti tost da galon o doue a rejont eveljust hervez o skeudenn : dalc'hmat oc'h sozañ kastizoù kriz ouzh ar pobloù all.

Ma reas avat ar Yuzevien an div emskiant-se bevañ mat a-gevret enno, ne voe tamm ebet heñvel gant ar Gristenien : tech ar pec'hed, ar morc'hed hag an ize-

ladur dirak an Doue clezh n'o doa kempouez ebet ken ha kouezhañ a ranke a neboudoù Kornogiz kristenaet er c'hovataluster, er werinelezh, el livastrelezh. Perak se ? Dre ma teuas dezho, evel ni hon eus gwelet uheloc'h, herezh ar Yuzeved, dre hanterouriezh krakyuzevien evel Paol argaset gant o fobl ha kollet ganto spered an dilennerezh.

War lerc'h an Adreizhadur, eta, e teuas da fetisaat an aergolo'h a orin yuzev. Oc'h argas holl savadur ar gatoligelezh, enni elfennoù deut eus nerzhioù relijiel an Impalaeriezh roman, e teue ar brotestanted da dostaat ouzh ar greizenn hebraek hag o stagañ da lenn, adlenn ha daskignañ ar Bibl e teujont da veuziñ e mor hengounioù ar Yuzevien e giz ma vije bet graet homañ evit ma soubje tud all e-barzh. Ha neuze, ar re balodañ anzho da vihanañ, da en em gemerout ivez evel pobl dilennet : n'eus nemet sellout ouzh Amerikaned ar c'hantved diwezhañ dreist-holl, tud fraost ha dispred a-walc'h an darn vuiañ anzho. Avel ar buritanelezh koulz hag hini un doare brizhouennelouriezh a c'hwezhe warno.

Dont a rejont a-benn d'en em ren hogos evel ar Yuzevien gwechall. O anvioù a oa hebreek; ne glevet komz nemet diwar-benn Abraham, Jonathan, Aaron, David, Eliezer pe Samuel. Hag evit kompren gwelloc'h krizder ar Yankied e-keñver ar meuriadoù indian ne deus nemet soñjal en o emzalc'h speredel : ober a raent dros e-keñver an ouezidi difeiz-se ar pezh a rae an Hebreiz e-keñver an "idolazeulerien" tro-dro dezho war urzh o doue Yahwe a c'hourc'hemenne dezho a-wechoù lazhañ betek o loened. Bale a reas ar Vormoned a-dreuz plaennoù ha gouelec'hioù Norzhamerika etrezek an Douar a Bromesa gant an hevelep kalon, an hevelep feiz fanatek hag ar Yuzevien davet o hini. Gwir eo e oa ar Vormoned tostoc'h c'hoazh d'ar re-mañ eget ar gristenien rik pa n'eo o levr sakr nemet un drevezadur eus istor an Hebreiz. Er c'hontrol, rangredenn ar Guakerien a voe ken karadec, keneilek hag eeun e-keñver ar Grec'hin Ruz ha ma oa kriz, ganas ha displeal ar re all. Ha dres dre ma oa o c'hredenn reteret a-enep : George Fox a gemeras ul lec'h relijiel o tennañ mutatis mutandis da hini ar Zen er vouddhaadegezh pa zisklerias ne oa ket diazez ar feiz hag ar vuhez speredel manet en Iliz evel ma kred ar gatoliked, hag hini ar skriturioù evel ma kred ar brotestanted, hogen ar pezh a anve ar "goulou diabarzh". Ac'halese, un emzalc'h hiniennel a zo ar gwellañ hini a c'heller kemerout war an holl dachennoù. Hogen kouezhañ a reas war un dro ar Guakerien er c'hevatalder rik.

Heñvel a c'hoarvezas en Afrika ar C'Hreisteiz : krizder e-keñver ar Vorianed ha puritanelezh evel e-touezh an Amerikaned. Amañ ez eus un dra da lavarout diouzhtu bremañ : mat eo ha ret eo evit ar Ouenn wenn en em zerc'hel diouzh ar meskaj, argas an hironegezh, kadarnaet he glanded hag he dreistelezh; hogen n'eo ket en doare-se fall ha kamm.

Gwir eo e harpas en un doare an Adreizhadur ar bobloù norzhek da adkemerout un emskiant kreñvoc'h eus talvoudegezh ar Ouenn hag evel m'am eus lavaret e teuas an emskiant-se da gemerout un dremm wirionoc'h gant ar re meneget uheloc'h, Ludendorf h.a. pa voe adroet d'an emskiant-se he natur, o c'hlanaat anezhi diouzh an elfennoù brizhyuzev.

Tra ma yelo ar bed kornogel katolik da gouezhañ e kollidigezh emskiant vuhez ar Ouenn.

Aristokratelezh an Izginivelezh ne oa ket diazezet war ar Ouenn; neuze e chomas hep gellout padout na lezel efedoù don. Diouzh un tu eta, hent an distro d'ar vuhez naturel, bedel, a dremen dre hent an arz hag ar spered gant darn ar Gornogiz hag un termen eo.

Diskuilhus eus temz spered an Amerikaned eo o filmoù gwestern ma weler enno soudarded pe zifraosterien yankiat e krog gant Indianed, ar re-mañ livet hudur evel tud n'eus nemet ar gwashañ sioù fall-brein enno, ma tenner warno neuze evel ma raed d'an hovelep poent war an oc'hen-moueek. Ha pa ouzer petra eo bet renadur an Amerikaned, ofisiel pe get, c-keñver ar Grec'hin ruz ez eus peadra da chom sabatuet o welout e c'hell lod bezañ ken divezh ha ken diemskiant. N'eus neuze, avat, nemet soñjal e stumm-spered ar Yuzevien o tiouennañ pa c'hellent pobloù "idolazeuler" en dro dezho, int ar re zilennet hag a ranke chom glan ha dirouestlet e vo ar gudennig.

Un arouez all eus brasoc'h emneñvelekadur ar brotestanted ouzh ar Yuzevien eo o spered ploutokratek. Hep komz eus an USA, pennskouer war an dachenn-se, e c'heller gwelout e Bro-C'Hall konfeur etre hugunoded ha yuzevien hag ar boblañs diouzh un tu, hag hini an hovelep re hag ar rest eus an dud a arc'hant, bankerien h.a. Gant an demokratelezh eo deut ar c'hevataluster da ren, er c'homzoù, hag an doare urzhaz a c'heller kavout, hini an arc'hant, e gwirionez. D'an Adreizhadur e tleer ivez, evit un darn vat, ar c'hemm kevredigezhel-se.

(Da genderc'hel)

*

DA VEZAÑ EMBANNET DIZALE evit hor c'hileion hepken "La Géographie linguistique et l'Histoire de la langue bretonne", troidigezh eus ar pennad embannet gant ar c'helenner JACKSON er Zeitschrift für Celtische Philologie. Embannet eo a-enep da youll an aozer, ha ne c'hello bezañ roet nemet "privatim", hogen re dalvoudus eo ar pennad-se evit hor bro evit chom hep bout anavezet gant an holl vroadelourien. Ha bec'h d'ar "re all" !

DOG MENNOÙ NEVEZ

Gant Jon MIRANDE.

Setu ar pezh a c'helled lenn e niverenn 10 (545) La Terre Retrouvée, kazetenn sionisted Vro-C'Hall, dindan an talbenn An Iliz o klask hec'h Uzentvet Kantved, diwar-benn nesañ Sened-meur an Iliz katolik en em vodo hevlene :

"Ur c'hentañ kammed war-raok pouezus-dreist a zo bet graet nevez zo gant ar Poellgor-prientiñ. En em ziskleriañ groñs en deus graet a-enep ar boligenezenn, da lavarout eo ar c'helennadur a vefe ganet lies gouenn-dud wzr un dro, met a-zisrann an eil diouzh eben, hag hep orin boutin.

Ar Pab Pius XII en doa diskleriet endeo ne c'heller ket degemerout un hevelep kelennadur; ar wezh kentañ eo, avat, e kinniger ar vonogenezenn evel penncredenn. Ma laka an Iliz e renk an dogmennoù, e 1962, al lavarenn, platonek betek henn, ez eo ganet an holl dud eus Adam hag Eva, hag ez int holl, neuze, breudeur kenetrezo, e vo kondaonet ar gouennelerezh evel fals-kredenn.

Ur c'hristen gouenneler a vo, hervez an dogmenn nevez-se, ur c'hristen diwir. Se a ziskouez peseurt heuliadoù pouezus hag efedus a c'hell degas war o lerc'h displegadur dogmennoù nevez pe damge madur dogmennoù displeget gwezhall (ha lod anezho a oa lazhus).

Spi hon eus e tisplego Sened-meur an Iliz reoù nevez evit ar pezh a sell ouzh ar Yuzevien. Ma chomfe hep en ober, e vefemp-ni paket gant ur vras a gerseenn. "

Me zo sur, avat, ne fello ket d'hon Tad Santel reiñ kerse d'ar baour keizh Yuzevien, dogmennoù nevez pe get...

N'eus forzh penaos, kelennus meurbet eo evidomp ar pennad-se diwar-benn amboaziou (goulakaet pe wirion) Sened-meur an Iliz katolik, embannet en ur gelaouenn yuzev, dre ma tiskouez splann emañ Israel o c'hortoz gant kred, evit kas da benn e zezo a vestroniadur en Europa ar C'Hornog, harp ha skoazell efedus digant an Ilizoù kristen. Tempora mutantur... ha n'emaomp ken, hep mar ebet, en amzer sant Agobard pe Inosant III!

Ur goulenn nemetken a rin : petra he deus da welout kudenn ar vono- pe ar boligenezenn, hag hi ur gudenn a zenoniezh rik, gant displegadur penncredennoù un iliz bennak ? Ouzhpenn se, zoken pa vefe gwir goulakadur ar vonogenezenn, ne welan e doare ebet perak e vefe hi un arguzenn a-enep ar gouennelerezh : an denoniourien yuzev, kristen, pagan pe dizoue - an darnvuiañ anezho da nebeutañ -- o deus degemeret kelenn an Dreuzfurmidigezh, ez eo, hervezi, kar-nes kenetrezo mabden hag ar varmouzed denheñvel. Evelato, den ne gred e vefe ar gorilh pe an orang-outang, "dre heul", e vreur hag e bar !

*

A D R E U Z L E N N .

A R V R O (J. DESBORDES, H/4, Kêr Andon, Konk-Kernev, KRP. 1493-79 AN NAONED, 10 LN.) . Ar gelaouenn vreizhat plijusañ, daoust dezhi bout skrivet hogozik holl e galleg. Met perak an diaoul e fell da Ber Denez hol lakaat da zont izili ar MOB ? Mat tre eo an "unaniezh-ober", arabat ankouezhat lodenn ziwezhañ ar ger avat ! N'omp ket a-enep d'ar Mob : labourat a ra war e dachenn a hañval bezañ hoalerezh an dudjentil. Ma ! Gant ma lezo deomp ar vugale fall ! Mat eo ivez pennad ar Banner, heni abAnna hag ivez eñvorennoù ar stourmer kozh Kamilh Merser Erm. Plijet omp bet ivez gant barnadenn Denez war ur pennad pouezus gant ar c'helenner Jackson (da notañ hepken ez eo skrivet drol anv ar c'helenner Dr. Julius Pokorny a rankhe bout anavet gwelloc'h en hor mesk !). Notennoù puilh ha talvoudus war ar pobloù gwasket.

BARR-HEOL (J. KLERG, BULIEN, 6 LN., KRP. 91764, ROAZON). Plijus eo ivez gwelout kristenion bout ken kalonek evit difenn ar vro. Kavout a ra d'an Ao. Klerg e ve gwelloc'h gant ma chomhemp war dachenn ar ouezoniezh c'hlan. Ni ivez a gav deomp e ve gwelloc'h ma chomhe war dachenn ar vroadelouriezh c'hlan hep stagañ karr Breizh ouzh heni ur gravez a gavomp noazus dreist ! Met ehanomp a farsal, savet mat eo Barr-Heol, dispar he yezh ha leun a fedoù talvoudus evit pep heni ac'hanomp.

HOR YEZH (Dl. J. QUEILLE, 47, straed an Intron Varia, Gwengamp, 10 LN., KRP. 1240-22, ROAZON). E-barzh an Nn. 16/17 ur studiadenñ bouezus gant Yann BLERGER diwar-benn ar bervoù araogennet eilster. Spi hon eus e c'hello bout embannet "Uhelyezhadur" Plerger. Mat e ve dezhañ, d'hor meno, avat, ledanaat lec'h ar brezhanegoù all. Adembannet eo bet ivez gant Hor Yezh kenteLIOù kembraek Abeozen-Kêrverziou, lamet er-maez, siwazh, ar pennadoù dibabet gwezhall gant abEozen. Gwelloc'h e chom levr Caradar, "Ar c'hembraeg hep poan" bet troet gant Eostig Sarzhaw. Talvoudusoc'h e ve bet moulañ erfin gerioù ha frazennoù ar c'hembraeg eeun savet seitek bloaz zo gant abEozen.

L'AVENIR . Siwazh ! (Evit bout reizh, lavaromp avat ez omp laouen gwelout diwezh ar miz kelaouenn ar vourc'hizion vreizhat o tamadkavout Breizh !).

STURIER-YAOUANKIZ pe "penaos saveteiñ Breizh gant ar chapeled ha bennozh ar Pab". N'omp ket a-du gant menozioù kravezel ar gelaouenn-se; broadelourion wirion int avat ha setu perak en em gavimp dorn ouzh dorn gante bewezh ma vo ret evit mad ar vro.

En niverenn a zeu e komzimp hiroc'h eus ar c'helaouennoù hag al levrioù, eus heni Yann Fouéré, da skouer, hor bo muioc'h a vad eget a zroug da lavarout diwar e benn.

A N T O U S E G I

gant Goulven P E N N A O D .

Bez'ez eus tud a gav barzhonius an tousegi. Re all a soñj ez int heugus, gludek ha flaerius. Ne fell ket din komz diseven eus un aneval dister a hell bout taloudek a hent all. Me a anzavo eeun-tre, avat, ne blij ket din e stumm diavaez. Met tud ez eus a hañval din bout ken divalav hag an tousegi, noazus int ouzhpenn. Komz a vennan eus ar re-se o deus klevet ur wezh galv o bro hag he dilez, he gwerzh d'an estren, broudet gant ur spered emzistruj na gaver skouer ebet e-touesk an anevaled, keneve ar c'hatoblepas.

Anavezout a reomp holl ar re-se e Breizh : tud wan a voe broadelourion war-dro d'o ugent bloaz, o deus stourmet e-barzh SBB, a zo deut da "fur" bremañ, a skriv e-barzh ke-laouennou Paris, a sav romantou gallek ha gall meulet melus gant ar skridvarmourion çhall a zo deut da gelenourion vrudet pe nebeutoc'h brudet er Skol-Veur c'hall, pe denvez eskab, hag a bren o bevetezh, o sioulded hag an tregont diner nevez a c'honzont bemiz gant o zevel -- evit ar re nebutañ fall anezhe --, gant flatrañ o c'hileion a wezhall -- evit ar re all --, evit habaskaat o c'houstiañs, war a hañval.

Keuz am eus evite : penaos e c'hellont sellout ouzh o bugalez, ouzh o re, hep ru-ziañ ? O freder eo, a hent all, ha gwazh a se evite. Met pa reont un dra bennak a-enep da nep piv bennak ac'hanomp-ni chomet feizleun da gredenn vroadel hor yaouankiz, hor preder e teu da vout an dra-se. Disheñvelderioù ez eus e-mesk ar vroadelourion : anat eo ne hellomp ket degemer pep menoz displeget, lakomp, e-barzh Barr-Heol, evel ne soñje ket Rigâkos goulenn ouzh Klerg bout a-du gantañ war gudenn ar gravez. Met, en tu arall d'an diforc'hioù-se, ez omp unanet gant ur menoz meur, brasoc'h eget pep heni ac'hanomp : ad-sevel a vennomp hor bro en he leunder hag he c'hlokted a wezhall.

Pa glever ur beulke tamall d'an Ao. Klerg bout un naziad en abeg d'ur penad gouen-nelour bet embannet e-barzh Preder gant hor c'hile Rigâkos, dre ma vez skrivet Preder en doare-skriv "naziad" (!), a vefe, hervez hol leue, an Ao. Klerg an arc'hdrouiz nemetañ kret anezhañ bremañ, ne hell ur paotr yac'h e spered nemet hejañ e zivskoaz ha dirollañ da c'hoarzhin homerek. Nemet e ve an tamall-se un arv-brezel nevez a-enep d'hor bro. Ha, siwazh, e hañval bout evelhenn : ken don eo sotoni ar chatal brezhon ma servijs deiz pe zeiz an damallidigezh diot-se da zigarez d'hor mistri ha d'o "mevelion" evit pouezañ war urzhaz Iliz Ruven a-enep d'ar gatoliged a fell dezhe chom Breizhiz ivez. Dalc'hit soñj eus lizher gwallvrudet Duparc mab Felix a Gemper a reas kement a zroug naontek vloaz zo.

Paour-kaezh den ! Paour-kaezh mevel o voumounañ e vestr ! Met truez ebet n'hon eus evitañ nag evit e genseurted. O disprizañ a reomp keit ha nend int ket dañjerus. Met dent hon eus ni ivez, ha gant n'eus ket a garitez kristen a hellfe hor c'huñvaat, e c'helfont marteze "connaître le prix du sang et des larmes" evel ma leverer e parlant ar vro a garont kement.

* Tennet eus kantik harozed hon amezeion.

AR MELL BENNIGET

Sirius eo hor c'helaouennou. Disonjet hon eus ar c'hoarzhin. Gwir eo e teu da ziaesec'h-diaesañ kavout plijadur en emdroennoù hor bed kempred. Gant na hellomp mui ken c'hoarzhin enta, lakomp hon enebourion da sodañ gant ar gonnar : o jestraouerezh hor fre-alzo d'ar nebeutañ. Dezhe neuze e kinnigomp hiziv troidigezh ur ganaouenn savet gant ar barzh gotek hollvrudet Horila Arsgudja; ar vugale fall a hello kanañ anezhi war don Julian Kadoudal.

PA ZEUIO AN SS ENDRO

(Hvan aftraqimand pai SS-wairōs)

Pa zeuio an SS endro
Da gas kriz brezel e Bro-C'Hall,
Pa vo rivinnoù tro-war-dro,
Un dudi 'vo dimp kemend-all.

Ni 'yudo : "Sed-int, sur a-walc'h,
Gwellañ soudarded 'z eus er bed,
Deut da lazhañ'r vourc'hizien valc'h;
Ne chomo ken bev den ebet !"

Pa ergerzho'r bagadoù taer,
Ar banniel ruz-ha-du war-lein,
E moged e pigno dre'n aer
Davet Yahweh'r Yuzevien vreïn !

O c'hoarzhin, d'ar stourmerien drec'h
E kinnigo merc'hed hor gouenn
Bleuniennou brav leizh o divrec'h,
Hag o c'halon ... hag o c'horf gwenn...


Pa gerzho an SS endro,
Dan o arvou, war zouar ar Gall,
E vo dassorc'het hor mammvro
Ha marv hon enebourien fall.

Horila ARSGUDJA

(Troet diwar ar goteg gant RIGOVIX).



AR STOURMER



GOUENN HA GLENN, GWAD HA GLAD !

Niverenn 3.

Mae-mezheven 1962.

UN DACHENN - EMGANN PE UN DACHENN - FOBAL ?

gant Goulven PENNAOD.

NEVEZ zo, e Paris, ez eus bet prezeget helavar gant an Ao. Penngadour VALLERY a-zivout al lezenn-stur evit Breizh. Sebezet-mik e voe da c'houde an holl selaouerion deut eno pa glevzont un den, hag eñ brudet-tre en emsav, en deus labouret e vuhez-pad evit ar vro, a zo, a gredomp, e-touesk pennoù poellgor-ren ar Mob, diskleriañ kement-mañ : ret e ve deomp bout kerreizh kenañ pa azgoulennomp evit ar vro, chom hep feukañ den e bro hon amezeion, ha neuze hon em zerc'hel diblegus e-keñver an traoùigoù hor be goulennet evelhenn. Betek amañ e c'heller kompren : un hent emgann eo a hellhe bout talvoudek gant ma ve un hir a brantad amzer dirazomp evit saveteiñ hor bro. Pelloc'h, avat, ez eas an Ao. X. : n'hor be enebour ebet, ne renhemp ket ur stourm ouzh un estren bennak, ret e ve sellout ouzh kudenn Vreizh evel ouzh ur c'hoari sportel bennak, ha dav e ve deomp enta bout sportourion, gwezh e vezer trec'h, gwezh trec'het : degemeromp an diskoulm gant fair play !

SETU neuze kelennadurezh nevez an emsav, a hañval ! An Ao. Pgd. Valle-ry nend eo ket ezel ar Mob; e zezo a oa displegañ ster ha talvoudegezh ul lezenn-stur; dedennet e oa bet an holl gant sklaerder e brezegenn; gortoz a raent ma ve roet ur stumm politikel ha tennet kentelioù-ober diouzh an daolemm arboellerezhel ha reizhouriezhel : ha setu o deus klevet ! Peadra da reiñ kalon d'ar re yaouank niverus a oa deut eno, neketa ? Kit war an dachenn-fobal ha bezit faer-plae dreist-holl ! Arabat eo penalizañ troioù gwidreüs ar re all : deskit dezhe, kentoc'h, gant harp an aviel ha "deklarasioñs droedoù mabden" ez eo brav, bras, brokus bout karantezus ha koantik evit e hentez !

KERSE eo evit ar gelennadurezh nevez, met biken n'he degemerimp. Ihr sollt mir solche sein, deren Auge immer nach einem Feinde sucht -- nach e u r e m Feinde... Euren Feind sollt ihr suchen, euren Krieg sollt ihr führen und für eure Gedanken ! Un enebour zo deomp a anavomp abaoe ur milvloaziad, hag abaoe 1789 dreist-holl : riezrenerezh ar C'Hallaoued eo, na petra bennak e ve e anv; ur c'hensportour nend eo ket, hogen ur strollad tud a fell dezhe lonkañ hor bro, distruj betek an divezhañ roudenn

koun hor bro en ene hon tud, ur strollad en deus lakaet Breizh er stad m'emañ-hi bre-
mañ : unan eus ar broioù warlerc'hietañ er c'hornogved, ken evit an arboellerezh ha
ken evit ar sevenadurezh, gwashoc'h eget Malta, mil lev a-dreñv da Bortugal Salazar,
hogos a-renk gant Gweriniezh Krennafrika ! Hon enebourion -- peogwir e fell deomp re-
iñ dezhe an anv a zellezont -- o deus c'hoariet atav diñsoù falzet genemp. Hag e rank-
hemp bout sportel war ar marc'had ? Me am eus soñj eus a lavare ar Gall Doriot e Roa-
zon e 1943 pe 1944 : ouzh ul lagad, an daoulagad; ouzh un dant, ar geol a-bezh ! E-
vit ur wezh e selaouimp ur Gall : setu hol lezenn-stur hag hor c'helennadurezh deomp-
ni, ha bec'h d'ar re tener o c'halon ha kizidik gwerc'hezhañval. Aent da skol ar sa-
bad pe d'ar gousperoù, hervez o c'hravez, met ehanemp a valzamiñ an emsav gant o
c'homzoù flour.

*
* *
*
* *

EVIT me, setu amañ ar gentel am eus tennet diouzh prezegenn an Ao. Pgd.
Vallery : aotreet e vo moarvat ul lezenn-stur gant Gledig (Penn-Stad) ar C'Hallaoued.
Goude-se, avat, e c'hellimp gortoz ur pennadig amzer an arc'hantoù he lakahe da dalout;
arabat eo fiziout betek re e galloud hor c'hannaded : marv eo ar vreudiaouegezh e Bro-
C'Hall hiziv; emañ ar Gledig a-dal d'e werin o komz outi evel Yahweh gozh ouzh Moizez
war vMenez-Sinai : kurun ha nivlenn a-benn ma teuy Nacht und Nebel ! Pa vever evel-
henn dindan yev ar "werinadegezh eeun", n'eus nemet un arv etre daouarn ar werin : an
heni bet implijet bloaz zo gant hor plouezidi, lese, dibrenestrañ an isbrefeded, hes-
kennat ar pester-pellgomz, ha monet un tammig pelloc'h ouzhpenn peogwir hon eus dira-
zomp tud na gomprenont ket ur yezh sevenoc'h.

NEPELL zo, e lenned war an Avenir ur pennad gant an Ao. Fouere a breze-
ge un deroregezh hervez skouer an IRA. N'eus ket ac'hanon ur paotr gwadsec'hedik : va
gwalc'h am eus bet eus ar brezeliañ hag e plijhe din chemel sioul-sibouroun ouzh korn
va oaled o tiluziañ kevrinoù deiziadur galianek Coligny pe frammadur ar bervoù heniver-
zonek kentoc'h eget kanañ Diòs d'eteleieto boule. Aon am eus avat e ve un tammig di-
amzeriet un deroregezh giz Keltia evel heni hor c'hilc'ion iverzonat. Ur brouenn ?
C'Hwitet o deus war o zaol hag i dirak tud degemerusoc'h a-bell eget hon erevent. E
c'heller embann d'an eizh avel ez int bet trec'h : n'em eus ket klevet e oa bet adun-
anet an Ulidi gant Iverzon. Trec'het int bet peogwir ez int chomet re seven, setu ar
wirionez splann. M'o dizie padet da lakaat an tangwall da ren e kazarnioù ar Saozon,
distrujet ur pont bennak war an Tavoez ha krouget ur wezh an amzer ur Saoz re zichek,
e vizient bet kondaonet, diogel a-walc'h eo, gant dozhion ha reveranted ar "bed sivi-
lizet" abaoe Yemen betek Papouazia, gant morianed ha marmouzdremmeion all an UNO, es-
kumuniget didan ha dizour gant o eskeb ketebunan, ha me oar; anat eo din avat e vizie
bet ar Saozon skuizh en o raok : kilet o dizie diraze evel m'emaint o kilañ dirak

Maw-maw Jomo Keniata ha "personed humen" all.

SPI am eus e fazian. C'Hoant am eus faziañ, peogwir ne oar den ebet pe vetek torfed ha distruj e c'hell monet ur brezel dispac'hel ha n'eus ket ezhomm deomp gwelout hor bro gwanaet muioc'h c'hoazh. Pezh a fell din lavarout eo kement-mañ : mar behe ret deomp hon em sevel hag hon em gannañ, e vehe ret, da gentañ, hirbrederiañ war hon dezo hag hon danveziou, met, mar kroghemp er stourm, e vehe ret-peurret ivez monet betek pal, koustet a gousto.

*
* *
* *
* *

EMAN o treiñ da fall stad bro hon amezcion; emañ paotred an tu kleiz oc'h heskinañ ar Gledig dre ma vez re virour, ha, dreist-holl, dre ma vennont kemer e lec'h; emañ ganksterion an OAS c'hoant dezhe drouklazhañ ar Gledig ha sevel war rivin-ou o bro ur renerezh faskour, lese, diazezet war an derouledadogezh ha galloud an uhel-ourc'hizion hag an tiez-bank yuzev. Jakobined int, an eil re koulz hag ar re all, ha n'hon eus mann da c'hortoz digante holl, dres evel ne vo roet netra deomp gant ar Gledig n'hor bo ket krapet digantañ. Ni hon-unan, sinn féin, e chomomp a-dal d'ar C'Hallaoued, nemet heniennou anezhe o deus meizet e ve gwelloc'h evit o bro hec'h adsevel war diazezennoù kevredadel eget derc'hel frammadur unanadel ar Weriniezh c'hall kevadek na hello nemet degas trubuilhoù ha kreskiñ digempouezder rannvroioù douaroniel an hegzagon sakr.

SKOAZELLET e c'hellomp bout gant kenelioù all evel Tudiz (Dietske), Daniz, Germaniz, ha gant ar Saozon ivez, gant ma plijhe dezhe gwanaat levezon Paris en Europa war sevel; skoazellet omp endeo, hervez o galloud, gant ar c'henelioù bihan o klask o reizet, evel Euskariz, Kembreiz, Skosiz, Friziz. Anat eo ne vimp harpet nemet e feur ma fello deomp sevel hor mouezh ha ma vennimp-ni hon-unan hor reizet.

DAOUST deomp sellout gant kengarantez ouzh strivoù hor c'heneiled okitaniat evit reiñ en-dro un tamm buhez d'o dezerzhioù, eo ret eveshaat ez int noazus deomp peurliesañ. Bloaz zo, da skouer, e reas ur fazi grevus sturierion hor c'houerion pa liammzont o stourm gant heni kourion all Bro-C'Hall : evelhenn e voe gwenn o emgann rak ar riezrenerezh gall en deus embannet raktal e vizie studiet kudenn ar gouerion "en he fezh", .i. ne voe graet netra evit diskoulmañ ur gudenn a oa breizhat da gentañ. Spi am eus o deus meizet hiziv ha p'o deus gwelet roll-prizioù an hentoù-houarn gall -- hag a chom gall daoust pezh ken hegzagonel e ve ar menozioù embannet. Hag hañval e vo evit pep kudenn all a savo : evit Paris e labour ar C'Hallaoued hag evit Paris hepken. Difenn a reont gladoù niver muiañ ha gonidusañ o c'henvroiz : mat eo. O em hentañ a reont e-giz Frañsizion vat. Plijet e vemp ni ivez ma ve en hor bro un hevelep emskiant vroadel; netra ken. Dav e ve d'an holl re a zo kret eus ur sindikad pe

ur strollad e Breizh gouzout e vezint touellet da bep tro gant komzoù helavar ha gou-
estloù melus ministred, gourfrefeded, prefeded, isbrefeded ha mevelion all riezronerezh
Paris : ne goust ket ker dezhe ar prezegennoù nag ar promesaoù evit habaskaat ur werin
konnar enni; met pa embann sklaer ur genel ne fell ket mui ken dezhi bout bratellet,
trevadennekaet, sklavelaet, e c'honez dizale he frankizioù, hec'h aotodeterminadur hag
he reized, -- hag arc'hantoù ouzhpenn "evit peurseveniñ uhelgimingadezh ar Frañs" :

AlJezair + FLN = Dizalc'h
Breizh + Lealded = Beaj ur Pizani !

*
* *
* *
* *

DAOUST hag-eñ e fell d'ar Vrezhoned, ha da Vreizhiz an emsav er penn-
kentañ, monet d'an dachenn-emgann pe d'an dachenn-fobal ?

Diuzit.

"A-benn dek vloaz e vo Breizh ur vro dieub, pe un dezerzh gall."

Emrenit evel sportourion leal, hag araok dek vloaz, me am eus aon, e
viot keodediz fidel ur mardoz gall.

Ha peoc'h ledan ar beredoù meur a splanno war hor bro didudet dindan
falz arc'hant Eskia ...

*
* *
* *
* *

#####

REIZHADENN : Dre fazi eo bet lamet kuit ur frazenn e-barzh pennad-stur hon niv. ziwe-
zhañ, p. 12, l. 2 : ... war ar menezioù du. Ha neoazh nebeutoc'h ker a-bell e kousthe
lakaat sevel skolioù evit bugalez hor micherourion hag hor plouezidi, pe evit re ar
C'Hallaoued o-unan. Ha frouc'husoc'h e ve ivez. En India...

#####

RENEREZH : Mikael JOSSEAUME.

MEREREZH : An Intron Josseaume, 12, rue du Mail, SAVIGNY-sur-Orge, S&O, (Bro-C'Hall).
KRP. 13.949.23, PARIS.

Priz ar c'homanant-bloaz : Breizh : 7,50 LN; Bro-C'Hall : 8 LN; Germania : 7,50 DM;
Keltiegva tramor : 12/-; Bro-Saoz : 15/-.

Priz an niverenn : 1,50 LN.

Deut eo er-maez "La Géographie linguistique et l'histoire de la langue bretonne"
gant ar c'helenner Kenneth JACKSON, M.A., Litt.D., FSA (Scot.), Professor of Celtic
Languages, Literature, History, and Antiquities in the University of Edinburgh. Er
goulenn diganeomp. Al labour pouezusañ evit ar re a fell dezhe prizañ labour meur an
Ao. Falc'hun war ar yezhdouaroniezh vrezhonek.

HA KRISTEN EO DOUE AN TAD ?

gant R. GLEMAREC.

KREIZENNOÙ katolik Breizh nend int ket douget peurliesañ da atersiñ an dogmennoù. Daoust hag-eñ o deus prederiet, da skouer, diwar-benn ster don ur benndogmenn eus ar gravez kristen evel heni an "Dreinded", hag a-zivout ar jubennadurioù a heller ober anezhi, gant kalonekadur Iliz Ruven, pan emaint o klotañ gant retterioù ar gevadegad, dre m'emaomp, evelhenn, ar brouenn wellañ eus buhez ar gravez-se en e-neoù ? Emaomp o vevañ e kreizon an ugentvet kantved, lese, ur prantad ma ren ar vakinagezh hag azgoulennadegoù ar werin; arabat eo, en abeg da se, lakaat da vonet da get c'hoant-gouzout ha hoaladur tud Vreizh evit kudennoù an deologiezh. En enep.

E-LEIZH a dabutoù, a zaeloù diveizadus etre vreudeur -- ha seul daeroc'h a se -- a ziwan eus an diouezoni hepken ma chom hiziv ar gristenion, ar gloer zoken, eus hen ster don o c'hravez, evel ma oa meizet er grennamzer, da skouer. Marteze e vehe ret deomp monet betek ur gêriadenn digenvez eus ar Menezioù Du, nepell diouzh ar chapeligoù war ar maez, evit adkavout, en amzer vremañ, Breizhiz, -- hag i dizesk dreist-holl -- o de dalc'het ster kozh ha rinus ar bed, ken eeun ha ken leun eus un diarvarded sioul, a reer ar feiz anezhañ. Hogen tech ar vreutaenn a zeuas gant an Azginivelezh, ha d'e heul, hollrenerezh al levroù aba visionoù ar Jezuisted er vro epad ar seitekvet kantved : katekism, stummadur ar veleion e-barzh ar c'hloordioù. Aet eo betek na voe mui displeget -- ha pa ve gant arouezioù hor c'herzh (arz) kravezel -- ar penndarempredadoù-se a zo, diouzh ret, diazez klevoud ar paotr diwar ar maez hag a c'holo pep talbenn ar pennilizioù gotat : kenfeurioù Doue hag e "sent", ereoù etre an amzerioù ha'r gouelioù lidel, h.a.

DAOUST hag-eñ ez eus tud c'hoazh e Breizh o kounaat e voe ur maread er gristeniezh -- ha maread an nerzhusañ feiz, an uhelgrennamzeriad -- m'edo Doue an TAD aspedet dreist da voutoù all an Dreinded, d'ar Werc'hez ha d'ar sent ? Kraveziad an amzer-se -- hag hi garv -- ne voe ket an nebeutañ glan dre he zrivliadennoù, peogwir e c'hanad neuze an Dies Irae ! E pep lec'h er c'herzh roumanat, hep bout aonik rak degas da soñj an dud ar finvezhioù didec'hus, krouidigezh hag hollvarn, genel ha mervel, dremm an Tad a zo trec'h, garv hag hael. A-walc'h eo sellout ouzh kroazioù kizellet hor c'halvarioù, ouzh arlivadur hon nevedoù a-ziwar ar maez, evit diskouez splann ez eo bet dalc'het henster Doue hag urzhaz ar sent en ene gwerin Vreizh betek prantadoù nevesoc'h, betek hiziv zoken, marteze.

PE lazze enta mar lavarhemp amañ, nemet e vemp nasket gant ur reeleveziegezh damgloaregel, ez eo an Tad, betek gwelout, hag hervez e dermeniañ, ur pagan ha ne grog ar gristeniezh, en wir, nemet gant e Vab ? E veizer e tav ar gredennourion : azaouezin a reont, hag a vennont, kelennadurezh an Iliz he deus degemeret a-werso e-giz levroù kanonek an Testamant kozh hebreek. Paouez a reer a varn, neuze, an holl andonioù yuzev-se. Touellus eo ivez. Maget ha kendalc'het eo an douellidigezh-se -- arabat bout aonik rak en diogeliñ uhel hiviziken -- gant teologourion ortodoksel-strizh, bet rakkemennet gant ur soutilded kreisteizel dezhe ar mar a zeuhe -- evit o gouenn ha stabilded he foellvestroniezh war an Iliz -- gant ma lakahent en-dro e spered ar gatoliked hegreidik e kehelas o zadoù an Doue nemetañ dindan anvoù estr eget Yahweh, hag e voe eñ an heni elanvet, hag un adskleur hollzoueat zoken.

*
* *
*
* *

NEVEZBAGANIEZH, emsav ar gredenn c'herman, distro da gravez an henda-
dou Vikingar, petra eo se hervez tro-spered ar strishañ teologiezh katolik ? (1) Tal-
vout a ra kement-se ez eus tud a gav dezhe ez int bremañ kreñv, her pe ziboell a-walc'h
-- hervez ar re o barn -- evit leuskel er-maez eil vout an Dreinded hag azeuliñ an
Tad diouzh o ene, lese en un doare kadouriezhel ha displann a-walc'h -- barbariezh hag
hollzoueadegezh ar C'Hermaned, na petra'ta ! El lavaromp diouzhtu avat, peogwir emañ
amañ pec'hed meur dre vankout ar gatoliked, e vez aterset ar breud meur-mañ dres her-
vez termenadurioù ar gwirionañ teologiezh katolik evel ma voe savet e-doug ar grenn-
amzer a-stok ouzh ar C'Hermaned ha kenelioù kredennat all ar sterenn hag ar gwalarn,
ni Brezhoned en o zouesk, evel Flandreziz hag Iverzoniz, ken katolik hiziv c'hoazh.
(2) Daoust d'ar pezh a skriv kelc'hgelaouennoù katolik zo e Bro-C'Hall -- Esprit da
skouer -- n'eus tra emañ a hellhed tostaat ouzh stokadenn an amgredoni ouzh ar gre-
doni a weler e Breizh, hag e Bro-C'Hall, abaoe pevar-ugent vloaz. Piv eus ar griste-
nion a hellhe diskleriañ gant gwirionder ez eo bet an nebeutañ distrujet ar feiz eeun
e Doue e Germania gant Hitler ? Ne dalv ket ar boan poelladennañ pelloc'h : eno emañ
diazez an dael : an doare ma taolennet ha ma azculer Doue (un dael veur ma'z eus evel
ma weler) ha dreist-holl boud Krist a zo distaolet gant "paganed" zo. E ranker gwelout
avat, el lusk-mañ a ya betek diskrediñ war boud kreiz an Dreinded Nevet, neket an nach-
añ dizoue yen giz ar C'Hallaoued, hogen un emsavadeg kravezel war skouer hengounel re
ar grennamzer, hañval a-walc'h ouzh an emgann etre ar Pab hag an Impalaer pe ouzh Lu-
ther.

EMAN bremañ ar jezustegezh o ren war an Iliz, hag hi ganet e Bro-Spagn
ha kreisteizel hec'h anien. Da c'houzout eo hag e ouezo anzav outi hec'h-unan e c'hell-
er atersiñ evelhenn war ar gravez, ha reiñ ur ster d'un deologiezh sterennel (3). Her-
vezi ez eus bet lavaret ha peurdermenet pep tra war ar c'hudennoù-mañ e-doug senedoù-
meur Trento, Vaticano ha keodedoù italiat all ! Daoust hag-eñ e vo ret degas da soñj
pennoù-meur an Iliz ez eus un doare keltiek rik a vout disivoudat ? En amzerioù barba-
rel, da skouer, ez eus bet an teologour brudet Pelagius, brezhon pe skosat e ouenn,
difennour youll-zirediñ mabden, a-zivout kudenn ar c'hras, a-cnep da donkaduriadegezh
reterel Augustinus ar C'Hartadañ; e ziskibl, al ledbelagiad brezhon Faustus, abad-es-
kob Riez Provañs (5. ktv. gK.) a heller menegiñ ivez. Pelloc'h er grennamzer e teuas
an nevezblatonad iverzonat Iohannes Scottus Erigenus (9. ktv.) nend eo ket kuit a holl-
zoueadelezh e gelennadurezh; Per abAelard, an "doktor brezhon", her ha taer, hag e re
gevadek, sturierion-dud leddizecungredennek Gorre-Breizh, Roparzh Ervezel, krouer urzh
Fontevrault, an diouganer "gnostek" anavezet ken fall, Eon ar Steredenn (12. ktv.);
tostoc'h ouzhimp ar Malaouad Feli Lamennais, diaraoger reuzeudik ha krouer gwirion ar
"werinadegezh kristen" a ren bremañ; Ernest Renan, a chomas un dangloareg e vuhez-pad,
anezhañ un den estr eget ar gouizieg dizcol kehelet gant tud enepkloer zo e ziveiz
krenn en un doare lu-meurbet; o diskibion gemprededek, an devarnourion Duchesne, Duine,
Turmel, eneoù kravezleun ha nec'hamantus, a zo chomet digomprenadus o freder speredel
evit an Iliz "latinat", dic'houzvez eus hon awen vroadel.

TROOMP hor selloù bremañ davet diwezhañ boud an Dreinded, davet an Awen
nevet. Petra a gavomp emañ a vroudhe hor faltazi hag hor feiz ? Bezomp gwirion, d'an
nebeutañ, hag anzavomp eeun, Barbared ma'z omp, e stouomp emañ hep meizañ grik, peo-
gwir ez omp feal da gelenn an Iliz. Hep meizañ, hag hep mennout monet pelloc'h e-barzh
un deologiezh ezoterek evidomp, pell diouzh hor santoud, eviti da vout leun a gizidi-
gezh c'hoular. Amañ e van evidomp ar C'Hevrin... Bez'ez eus tud a hañval bout spered-
dekoc'h egedomp hag o dizie tizhet meizañ ar c'hevrin-se : Maritain, da skouer, pao-
tred Esprit : ar re a rahemp a-c'hrad-vat anezhe an "emsav nevezkatolik". Gant un he-
velep yezh -- hag e-mesk teñzorioù ken niverus a uhelsperedegezh, hogen a speredegezh
disec'hus -- petra a zeu da vout elfennoù gwirion ha bev ar gravez ? Ne fell ket din
komz emañ eus an Tad e-un, kollet e diventter "Doue", hogen eus dremm ar C'Hrist war
ar groaz ? Reolennoù goullou war al Lógos, ar Verbum incarnatum, a-benn ma teuy ar
Rozenngroaz hag ar Paráklētos, a zo lakaet gant an Aotrouion nevez e lec'h Mab Doue,
an den kigeskerne a vevas hag a varvas evidomp, 2000 bloaz zo e bro an divadezidi !

Daoust d'an dic'hlannadegoù lennek-se eus ar Garitez hag ar Garantez ne ankounaz'haimp ket hon tadoù -- hag i ken gwiriongredennek ha ni, hep mar ebet -- a zouje an Aotrou Doue da gentañ, hep bezañ lorc'husoc'h eget al Leonarded kozh-mañ hiziv, ken rust ha dic'hoarzh ma'z int. Ha marteze e tizhe hon tadoù leunder o buhez ha meizerezh diarvar traoù rinek ar bed n'anavezomp ket ken. Evit doare ez eus bet ankounac'haet gant dozhion ar Skolioù-Meur e ranker lakaat, araok pep kravez, ha pa ve kristen, ar gredenn eeun e Doue ?

EMAN gourdrouzoù all o kreskiñ bremañ, hag i kuzhetoc'h, a-enep d'ar feiz hengounel. Emañ sez Per oc'h huñvreal genel kristenion e Bro-Japan pe e-touesk broidi Selan, Birmania, h.a.. Daoust hag-eñ n'emañ ket war var dont da vout kontammet gant hudouriezh strafuilhus an Aziiz-hont ? Nend eo ket ken diboell ha se en em c'houlenn an dra pa weler ar c'hredennoù amguzh-se ledanaat o elfennoù satanat, en tu all da Paris, betek ar vro; pa ouzer, mod all, pa gen etruskat eo Skol-Veur ar Gardinal-Kuria, hêrez wirion, dre hec'h hengoun diastal, Sened hen Roma, hag eñ ken digristen. Ne fell ket deomp komz amañ diwar-benn personelezh ha buhezegezh c'hadal lod muiañ ar vMonsignore italiat ! Na kennebeut diwar-benn an engroez a zoueou hag a zoueezed noazh livet pe gizellet e salioù pe war leinoù ar Vaticano ! Hag e ve difennet groñs deomp, neuze, kompren ar gristeniezh hervez hor c'hlevidigezh kelt ? Ha pa ve "nevez-pagan" evit ober gant ger dreistkaret Enklaskourion-Veur an nevezlatinded ? Emañ ar gwir ganeomp-ni, Brezhoned katolik, pa leveromp d'an Aotrouion-se ne heller ket ober goap ouzhimp betek re, hag e ve ret paouez a sellout ouzhimp hiviziken evel ouzh ur c'hread krenus a dud feal d'an Iliz santel, katolik ha ruvenel.

NE GAV ket din e vemp deut da vout, en wir, disivouderion ken aheurtet ha se ha ma ve troc'het pep liamm etrezomp-ni, broadclourion vrezhon, hag an hen Iliz katolik hag abostolel he deus hor stummet. Hogen e c'hoantahemp, mui-oc'h-mui, mall, gourdrouz ganeomp zoken, gwelout e Breizh an Iliz-se hag ar c'hrevezioù kristen all ivez, diwiskañ o amva a vuhezegouriezh hag o spered a genvredeouriezh, lese o lidaouerezh hag o dogmennerzh, tec'hout diouzh an aergolc'h chapelhañval ma varv ennañ an dud feal a chom onne ! E-lec'h stummañ un dibunad a sturierion bolitikel pe a renerion strolladoù denel ha re zenel, ra vo desavet gant an Iliz tud santel -- he c'hefridi eo na petra 'ta ! -- sent kelt, a-vent ganeomp, hor gonezo da Zoue ! Ar Varbared n'o deus buntet biskoazh a-ratozh-kaer war he c'hiz Lavar ar C'Hrist.

ETRETANT, kentoc'h eget dont da vout hep dale dizoueidi, boudoù difeiz ha dilezom o deus dianzavet ar C'Hrist, ni, tud a Vreizh, a blijhe deomp gwelloc'h bout chomet hep klevout e Lavar, ha menel evel m'emaomp : kredennourion "bagan", pagani e latin, lese plouezidi !

E Plougastell Breizh-Uhel, 1962.

NOTENNOÙ : (1) Sel. P. GROSCLAUDE, Alfred Rosenberg et le Mythe du XX^e siècle, Paris, 1938.

(2) Etienne GILSON, La philosophie au moyen âge, de Scot Érigène à Guillaume d'Occam, Paris, 1925; Christopher DAWSON, Les origines de l'Europe et de la civilisation européenne, Paris, 1935; Dom Louis GOUGAUD, Les chrétientés celtiques, Paris, 1912.

(3) Teologiezh c'hermanat : anv roet er grennamzer d'ar gelennadurezh damhollzoueat savet gant Mestr Eckart, an dominikad turinkat, hag e ziskibion (14. ktv.); roet ivez da brimgealioù an doktor brabañsat Ruysbroek Vamus hag e heulier neerlandat Tomaz a gKempen a greder bout aozer Imitasion Jezuz Krist; da gelennoù kosmologek ar ghardinal roenat Nikolaz a gCues (15. kv.). Lenn Jean CHUZEVILLE, Les mystiques allemands du xiii au xix^e siècle, Paris, 1935, pp. 62-158, 206-211; E. BREHIER, Histoire de la philosophie allemande, Paris, 1921, pp. 7-12. Al levr gwellañ a zo Herman WIRTH, Was heisst deutsch ? Ein urgeschichtlicher Rückblick, zur Selbstbesinnung und Selbstbestimmung, Iena, 1934. Gwelout ivez levr hor c'heneil A. DECLEENE, Le règne de la race ... point de vue d'un chrétien, Paris, 1936.

HENT AR OUENN

HENT AN NATUR

gant RIGKOS

- III -

GOUZOUT a reer e teuas evit kalz Dispac'h Bro-C'Hall eus sorc'henn an "den mat". Klasket en deus a-hed labourioù hir ha talvoudus ar baron Seillière adkavout andonioù pennañ ar reveulzi-se. Mojenn an "den mat" a roas dezhi J. J. Rousseau nerzh ha brud a oa anavezet er c'hantved araok, hadet ha kresket gant beajourien ha misionerien (Jezuisted dreist-holl) dinden stumm an "den gouez mat", manet en un doare burzhudus er-maez eus breinadurezhioù ar sevnadurezh. Neuze, a dra sur, mar deo mat pep den ha mar deo graet evit tañvañ didrabas frouezhioù e vadelezh hag e berzhioù eurus, ouzh piv ha petra oc'h en em droio pa en devezo da glemm ? Ouzh renerien ar gevredigezh, hag amañ e kouezhomp evel ma reer bewech war an hevelep fed : al lusk bras a zibrad tolpadou an astud eo ar youll-ingaliñ hag ar c'hoant : arabat, araok mont pelloc'h, krediñ emañ den da gemerout evit bleunioù ar spered ar youll ha dremm tonkadur ur ouenn pe ur boblañs ar re a zo o ren anezho. Ret eo adneveziñ an dibabou-tud dre gemerout anezho el lec'h m'emañ hag o reiñ da bep hini anezho e dachenn-oberiañ, ha brein a-walc'h, didalvoud a-walc'h da vihanañ e oa deut da vezañ un darn vras eus brientinien Bro-C'Hall, ha se dre bolitikerezh kreizenniñ o roueed a spazhe holl aristokratelezh wirion. Ha deut ar vro da gaout ur roue dic'houest, an enep dres eus "den roueel" Plato, ez eas an holl frammadur d'an traoñ dirak kentañ argadeg al livastred.

HA PEHINI eo brasañ ha diaosañ kudenn ar politikerezh ? Dres kavout an dibab tud ret ha dereat, an aristokratelezh wirion. Skoulmadell seul ziasoc'h ma ne deurvez ket d'an holl dud a zalvoudegezh en em lakaat d'ober politikerezh, pell a se. Eus Diogenes betek Lao-Tseu pet anezho a gemer renerien an engroezioù evel boudu oc'h ober o mad eus divarregezh al loen tropell ? Ha mar deo kavet ur framm eus ar gwellañ da zerc'hel ar gevredigezh ("en em santout a reer kevredigezhel evel ma en em santer marvel") en he sav, betek peur e pado ar stern araok breinañ ? Forzh penaos ha setu amañ un dra a bouez a-enep an Dispac'h gall, ur ouenn strollet en ur vroad a ya gant hec'h hent hervez ar mentadur deuet da sevel diouzh he galvidigezh e-touezh kerzh ar C'Heal en Diskouezataet. Nemet breinañ a rafe e-doug hec'h emdroad. Hag ar spered heñvelerezh hollek a zo splannañ arouez ar breinadur. P'en deus tro al loaverioù, pa zeuont a-benn da reiñ da grediñ (rak pelloc'h ne'z aer ket) d'an tolpadou e talvez pep hini kement ha pep hini all, emañ en argoll spered galvidigezh ar ouenn rak dalc'hmat e vez kadarnaet homañ gant oberiantiz an dud veur war bep dachenn ha n'eo ket gant dic'hlanadurioù an astud o klask seveniñ c'hoantoù materiel.

KIOUT eta renkadou tud dezho ur rat personel, enno mouezh ar ouenn ha war o zonkadur al lusk etrezek en em greñvaat dalc'hmat e stern buhez ar ouenn-se, setu ar pezh a zo ret evit derc'hel bev, bleunius ha frouezhus ur strollad denel, bras pe vihan. Skoulmad hag en em ginnig bep ar mare, peogwir n'eo padus hini ebet eus em-savadurioù mab-den, ha peogwir ez eo ivez ar stourm lezenn ar Vuhez.

MERZOMP ivez e-kichen mojenn an den gouez mat ha glan a voe strewet dreist-holl gant J.-J. Rousseau, e oa roet e trevadennou Bro-C'Hall, en Amerika da vihanañ, kemennadurioù d'an dud e karg, evit harpañ kentoc'h ar mesk etre an dreva-dennerien hag ar vroidi, emzalc'h a-enep krenn ouzh hini an Angl-ha-Saozon hogen, koulz lavaret, heñvel ouzh hini ar Spagnoled. An abeg a zo sklaer adarre : levezon ar spered yuzev a bobl dilennet a boueze atav war ar Saozon, nann war ar gatoliked a zalc'he da wir endeo e talv un den badezet kement hag unan all.

HAG e gwirionez, Dispac'h bras Bro-C'Hall en deus un diazez kristen : spered enep aristokratel, alouberezh an astud, ar re dizonezon, savet fall, dister e pep damani gant o c'hasoni ouzh ar re greñv, kaer ha taer. Aze ar c'hoant da sevel Baradoz en douar, amañ an hini da dañañ Baradoz en Neñv, skouer an eil hag egile eus lezenn ar Stourm peurbadus. Hag an dibennerez a reas hevelep labour hag ar c'heuneudleskiñ. N'oa ket a bec'hed orinel eno, gwir eo. Ret e oa rak an Den, an Homo gant un H bras a ranke kemerout lec'h Doue, an Doue personel, denheñvel, an Den a vuzul boutin, a-enep d'ar Ouenn. Ha Ludwig Feuerbach en e Wesen des Christentums a glasko diskouez ez eo an Den-se gwir Doue, ez eo se ster gwirion ar gristeniezh. N'eo ket, e gwirionez hogen an diazez a gemer anezhañ, hini ar peurheñvelerezh, ha ne c'heller ket aotren d'an avel da c'hwezhañ war ur seurt tu.

*
*
*
*
*

#####

E K U Z U L

ARVEZIOÙ BRAV A DUD ! -- Ar Goulven doueel en deus sabrennet hep aotre e niverenn ziwezhañ ar Stourmer an nevezintigoù evit ober plas d'ar predererezhioù hael hag hirbad : setu perak ne gavot nemet e-barzh an niverenn-mañ keloù plijus a-walc'h diwar-benn paour-kaezh impalaerezh ar Frañsizion.

--Ur pemzeknoz bennak araok e bakidigezh (e c'hellod komz hirik war ar poent-se) e tegemere ar brav a jeneral Salan, en Aljer, ur c'hoantik a bakad, ennañ kenlodennoù kevredadoù maeneoulerezh Sahra. Arabat krediñ en dije Ti-bank H. WORMS roet ar gwerzh-butun-se dezhañ evit lakaat an OAS da vreinañ. Bezit sur ez oa ideologel meurbet ar road. Sellit kentoc'h ouzh ar pezh a c'hoarvez hiziv d'ar re silhok a-walc'h evit en em ouestlañ en organadur a anver subversiv er radio...

-- Ar brav a jeneral a venegomp uheloc'h, deut betek e zerez dre hantererezh salioù degemer ar Strollad Radikal-Sokialour hag al Logoù a ziskouez anat ur bennwirionez mounnet gant hon Ata-Ulf hirvoudet, pa lakae c'hwen e sachoù ar "sistem", lese Republik Weimar. Pep geñveriadenn etre ar Republik-hont hag ar V-et hini a ve amzere, sur.

-- Evit sevel o "Nerzh Lec'hel" en deus ranket ar vinistred aljeriat diskleriañ pet a soudarded a oa dezho war an dachenn-emgann ebarzhel : 9 000 den, na mui na maez e voe ar respont. Nebeutoc'h zoken, a gav deomp. Taolet evezh ar Vretoned, mar fell dezhe. Hogen an holl a oar n'omp ket chalet gant ar pezh a c'hell kompren hor c'henvroidi : tud an emsav o-unan n'int ket gouest da lenn penn-da-benn Breiz, nag an Avenir; n'int ket evit o lenn dre vras evel hon eus merzet en ur atersiñ anezho. Lakaet er maez luganoù zo, n'int ket kab eta da respont d'an dislavarerien eeunañ. Petra ober, eta, gant ur bobl na fell ket dezhi lenn ha ne hell deskiñ tra ebet neuze ?

M.J.

#####

A Æ D R E U Z L E N N

BRETON NEWS, Linton, Fassaroe Lane, Fassaroe, BRAY, Co. Wicklow, EIRE. Talvoudus-oc'h-talvoudus eo ar gelaouenn-se hag e c'hello bout en dezont peogwir e c'hell tizhout kalz a dud er-maez a'n Hegzagon. Kannad hon amaezhdi en Iverzon (pe hon dileuridigezh mar kavet gwelloc'h). En despet da dud zo e kav deomp e c'hell bezañ e-fedusoc'h a-wezhioù an dud a labour en estrenvro (pe Frañs pe Iverzon e ve) eget ar re a chom peget ouzh douar ar vro. Ha Pro domo sua nend eo ket ken.

EPOCA : ur pemzek pajennad bennak livet dispar a zo bet gouestlet d'hor bro gant ar magazin italiec-mañ, hag eñ ken lennet ha ledet ha Match, Life pe Münchener Illustrierte. Arabat e vo bout souezhet e-pad an hañv gwelout tud niverus eus pobladoez an Douristed italiat.

IGELA (ar ranig) Euskaldun heterodoxen errebista, Dominique PEILLEN, 15 bd. S.-Germain, Paris. Deut er-maez a-unvare hag hor Stourmer : ur ranig chadennet eo, ar seurt ke-

UR ROMANTER ZO GANET DEOMP !

gant Mikael JOSOM.

SETU amañ, tudou, unan eus ar baotred-se ma'z eo deut da vezañ ken bihan an niver anezho hiziv ha na skrivont ket o arnodennoù aotobiografek, hogen a oar sevel penn-da-benn oberennoù — pennoberennoù zoken — diwanet hobregonet razh eus amdroennoù o faltazi a grog e stripoù al lenner. Edoan o c'hortoz, berr warnon, heuliad e romant, o termal betek bezañ lennet an niverenn nesañ arak komz deoc'h diwar e benn.

RAK ur romant-kazetenn eo, arouez anat krizder an amzerioù ha skarster an embannerien, moulet e-barzh an Avenir abaoe ar 5 a viz ebrel. An aozer dellezek a vezañ hollvrudet : Ned Urvoas e anv. Kontañ a ra deomp en un doare espar darvoudoù marzhus ar Paotr e Werenn-Lagad Du. Netra na den ne virfe outañ a zanevelliñ avanturioù ar Rokambol nevez ha ne oufe chaoseriañ lanv e ijin mojennus, berad e liv ruz na divountadenn e red-kof. Ken pell eo aet ma'z omp douget da reiñ da c'houzout d'ar vMobiad e sellomp ouzh an darvoudennadur-mañ evel ul lod eus pajenn al lizhiri hag an arzoù kaer; kuzulikañ a rafemp da bennoù bras ar Mob klask, evit ar politikerezh, ur paotr all, uveloc'h, met a oufe a-wechoù petra eo ar politikerezh ha penaos e vez diforc'het diouzh ar c'hwezhenoù—"spiswelustoz". Ne vern piv, ur skuber, ur c'hailhar-eger, da skouer, a vefe the right man kentoc'h egetañ. N'eo ket farsal a ran : gwelit kentoc'h.

Da gentañ, bagatelles de la porte, eo anat ne ouezas biskoazh Ned Urvoas n'eus netra a liammfe etrezo an OAS, Jeune Nation e Bro-C'Hall, ar MAC e Belgia, ar MSI en Italia pe ar Falanks e Bro-Spagn gant an Nazionalsokialourien europat, amerikant pe japanat. An holl, nemetañ, a oar e chomas sioul-sibouroun e-pad ar brezel ar Sir Oswald Mosley-hont a eilzimezas e 1939 gant un hêrez Guinness damyuzev : den-meur bandenn ar faskourien eo hemañ hag an enebour gwashañ d'ar British National Party ha da Northern League Bro-Skos — evel m'eo enebour touet d'hor c'heneiled eus Plaid Genedlaethol Cymru. En deskomp eta d'ar c'haezh Urvoas. Deskomp dezhañ ivez ne oa ket manifestourien Stockholm evit deiz kala-hañv diskibion Per Engdahl, ken eeun hag hael ur paotr ez eo dismegañsus skrivañ anezhañ hag eus e "Strollad Malmoë" : "l'OAS suédoise si vous préférez" (Avenir, 3/5/62). N'eus kelennadurezh politikel ebet gant an OAS, ha pa ve svedat, bugale int, ha gwall-siet ouzhpenn, tra ma kaver e Strollad Malmoë un azveded hag ur skiant politikel a lakfe hon Urvoas broadel da huñvreal — war-lerc'h meur a ademenadur, eveljust.

TRAOUIGOÛ eo kement-se, avat, ur meskaj desket abaoe pell digant e geneiled trotskiat, e-keñver an dizoloadur bras-dijaoj graet gant ar Bitiadez :frouezh labour ar Sinarkiezh e vefe ar strolladoù-se ! Peadra da lakaat da sodañ Geneviève Tabouis hec'h-unan a ranko hiviziken diskenn eus he zron war-lerc'h an taol-kurun-se arnevusoc'h eget hini ar Sinai.

RET e ve gouzout, a-benn ar fin, ez eo bet renet ar sinarkiezh, a-holl-viskoazh, gant tud evel Lemaigre-Dubreuil (Eouliou Lesieur) bet drouklazhet gant ur c'henvroad e Casablanca seizh vloaz zo, hag inspektourien al leveoù-Stad. An dud-se ne glaskont ket gonit ar Galloud dre hantererezh an OAS pe an Nazionalsokialourien, evit un abeg eeun a-walc'h : emañ ar Galloud ganto endeo, hag int-i eo a zo gouarnamant De Gaulle en e bezh. Hag e vefec'h an hini diwezhañ o chom hep er gouzout, Nedig ker ? Mar deo gwir, ne vo ket an avenir deomp war bouez nebeut !

SELLOMP ouzh niverenn ar 17 a viz mae. Deskiñ a reomp e vale Euskariz "endimanchés parmi les soldats armés qu'ils toisent sans un mot". Peadra da lakaat da ouelañ ha da vousc'hoarzhin kuñv ar Govig, Barrès, Botrel, Déroulède, Paul Feval, Michel Zévaco ha Zénaïde Fleuriot, hep ankounac'haat Kloareg ar Veuzid ha L. ar Berr, holl mesk-ha-mesk e-barzh ur gwenved gastaouek ha lennegel. Bezit sirius, kamalad Ur-

voas, kit da c'houlenn da gentañ ouzh ar stourmerien euskat. Va c'hredit, ne blijjo ket kalz dezho ho vistavizion eilskrivet ! Pa lenner diotachoù ar seurt-se e talc'her soñj eus bobardoù brezel 14 pe "brezel fentus" 39 : an Alamaned o c'houlenn bezañ prizonidi pa astenned dezho bara hag amanenn !

LEZEL a reomp a-gostez traoùigoù ken diot all; lammat a reomp betek niverenn ar 7 a viz mezheven. Eno e teskomp, dres araok ur "galv d'ar stourmerien chaol-lek" (n'eur ket evit ijinañ un hevelep stek !) ez oa eus paotred ar FTP un armead "qui rapidement aurait appris la charité" ! Bravat an "aurait"-se pa gomzer ouzh tud an em-sav o deus o anavezet e 1944 ! Nag a varzhoni amañ; hag a brudañs ivez pa reer gant an doare-divizout. P'edoant ouzh en em sevel a-enep d'an naziezh e stourment, a hañval, evit en em zieubiñ o-unan (un dresadonn, mar plij; ha dieubiezh o zoullou-bragez e ve bet ?), ar pezh o rene davet "la libération de leurs nationalités". Gant o daoulagad klos, neuze, e redent davet an dieubiezh-se, peogwir ne ouzon ket hag ez eus bet Jakobined enebetoc'h, dalloc'h ha c'hwervoc'h ouzh anv Breizh (pe Euskadi, pe Vlanderen ar Westhoek) eget al loened gouez-se. O gwalet hon eus. An HOLL anezho. Hervez he frouezh e prizer ar wezenn.

DAOUST hag e vo ret balzamañ divgell Tattevin, kollabo euzhus, oadet a bemzek vloaz, hag o c'hinnig da sant Urvoaz evel ex-voto, evit e wirionekaat or pezh heugus a lavar hag e zougen da embann e felle d'e vignonedigoù mounounus mervel evel sent Vreizh ? Evit habaskaat an eneoù e ran va menoz strewiñ d'an eizh avel relegoù an Ao. Perrot, a zo nec'husik, marteze, evit an istorour mobok ar c'hiz nevez.

FEIZ gast ! "Ces choses-là sont rudes, il faut, pour les entendre, avoir fait des études".

BETE welout, ra ray e studioù eñ e-un an Ned Urvoas. Ha desket en diwezhañ un draig bennak na ve ket fougeerezh hepken.

MET, pa'z ay da anaon (Karl Marx d'e bardono !), pebezh barzh a gollo ar bed !

*
*
*
*
*

K E L A O U E N N O Û

NORDISCHE ZEITUNG, Dr. Norbert Seibertt, Gerresheimerstrasse 70, Düsseldorf, 1, Deutschland.

HAGAL RING (Werkstelle für nordische Artgemeinschaft), Dr. Otto Weigel, 20a Celle-Westerelle, Bahnhofstrasse 27, Deutschland.

FOEDRE LANDET, kelaouenn vizek Danmarks National-Socialistiske Arbejder Parti, Sven Salicath, Knudsvej 5, København, Danmark.

NORDISK KAMP, kelaouenn vizek Nordiska Rikspartiet, Göran Assar Oredsson, Box 2149, Stockholm, Sverige.

DE BOERENASIE, P.O. Box 497, Pietermaritzburg, South Africa.

En niverenn a zeu :

-- HOR C'HREDENN gant Rigakos, G. Pennaod, J. Mirande, M. Josom.

-- STOURM IWERZHON H/G AN ILIZ KATOLIK gant James Conolly, troidigezh hag evezhiadennoù gant Gwilhou Gloaverzhag.

Moulet e ti-moulerezh AR STOURMER -- Pep gwir miret strizh.

Ar merour : M. Josseume.

BREIZH
ATAO



AR STOURMER.



EUROPA
UNANET

GOUENN HA GLENN, GWAD HA GLAD !

Niverennoù 4/5.

Gourzheren-Heneol 1962 .

KEVARC'H DA COLIN JORDAN !!!

E-PAD an hañv diwezhañ ez eo bet hor c'hile Colin JORDAN, bleniour
National-Socialist Movement Breizh-Veur, anvet da genurzhier stourm holl emsavioù ke-
nelwerinelour ar bed.

E GEVARC'HIN a fell deomp amañ en anv konelwerinelourion Vreizh. Mui-
oc'h- mui e tleomp embann uhel ar ger-stur :

BROADELOURION HOLL GENELOÙ AR C'HORNNOG, STOURMIT A-GEVRET !
ABENDLÄNDISCH GESINNTE NATIONALISTEN ALLER LÄNDER, EINIGT EUCH
UND KÄMPFT GEMEINSAM !
NATIONALISTS FOR WESTERN CIVILIZATION, FIGHT IN UNITY !

Ar Stourmer.

BRETONEZ PE WESTONEZ ?
gant Goulven PENNAOD .

AR BLOAZ-mañ, evel warlene o deus em savet tud Vreizh. War wellaat ez
a o emsav, ret el lavarout, ha war ledanaat ivez peogwir o deus komprenet an holl ez
oa ret d'ar werin a-bezh, kouerion, micherourion, lenneion, stourm a-gevret ouzh riez-
renerezh ar C'Hallaoued.

AR WERIN an eus lavaret, met ar genel ivez, mar deo gwir o deus hor
mistr komzet a "Vretoned", a "gudem Vreizh", h. a. ha neket a "Westoned" pe a "gudem
ar Gwest" evel ma raent gwezharall hag evel ma reont hiziv c'hoazh pa gomzont eus "pao-
tred ar C'Hreisteiz, an Hanternoz", h.a. Anzav a reont evelhem ez eus e Breizh ur gu-
denn diouti hec'h-unan, distag krenn diouzh heni ar Frañsizion "all". N'eus ket pell e
c'helled o c'hlevout komz eus alJezair evel eus "ur rannvro heñvel ouzh Breizh" : notit!
diouzhtu ne vizie deut da spered den, zoken da spered gwak ur ministr, lavarout : "emañ!
alJezair ur rannvro evel (lakomp) ar Poitou, an Orléanais"... Gant mall e c'hortozer ma!
ve laret gant unan eus hor c'hannaded kalonek, ar Pleven mar fell deoc'h, un dra bennak!
evel : " Emañ Breizh ur rannvro evel alJezair".

WARLERC'H IET eo Breizh e pep keñver ha neket hepken war dachenn an ar-boellerezh evel ma fellhe er reiñ da grediñ deomp tud ar CELIB hag ekonomisted distinget all. Taolomp ur sell ouzh ar broioù a oa kevatal outi kant vloaz zo e-keñver ar boblañs, ar gorread hag ar binvidigezh : Danmark, Nederland, Belgia, Baiern, da skouer. Hiziv an deiz, an holl anezhe a zo etre pemp ha dek gwezh pobletoc'h ha pinvidikoc'h egedomp. Perak an diforc'h-se ?

DAOU abeg pennañ ez eus.

DA GENTAN, dibab ar vro, adal ar Roc'haned betek an dudjentil disterañ, o deus dilezet, abaoe ar XVvet kantved, tonkad o bro evit gonidoù ha goprou lez roue ar Frañsizion e Paris pe e Versailles; deut int tamm ha tamm da vout peurc'allaet goude bout bet peurc'hallekaet ha n'end eo ket souezhus tamm ebet gwelout hiziv an deiz ur Roc'han pe ur C'Hadoudal ouzh penn emsav ar vroadelourion ... c'hall, a-du gant torfedourion an OAS ha kuzul ar "rezistañs" giz nevez eus ar mezvier gwadsec'hedik Bidault; pell zo emeur boas da vratellat e ti Roc'han, nemet ur re bennak chomet feizleun d'ar vro ha sellet oute evel "mezher familh" gant reoù all an tilu. Trubardet omp bet a-viskoazh gant dibaboù hengounel hor c'henele. Trubardet omp bet ivez gant hol lenneion, ar re diwanet diouzh spered nevez an Dispac'h gall. An dibab republikan-se a zo bet ar sotañ hag an noazhusañ pa nac'has sellout ouzh kudennoù Breizh evel re ur vroad : evit an dud diboell-se e oa ar brezhoneg moger an teñvalizion, al loustoni, ar warlerc'hiegezh, ar c'hreñvlec'h a wareze an diwezhañ kilstourmerion; hag heñved ouzh an dudjentil, ar gloer giz nevez o deus hor bratellet ha lakaet da vout trevadennidi unan eus gwashañ vro vac'hagner hon amzer. Trubardet omp bet ivez gant an dibaboù speredel, an holl eskeb-se, an holl frered ha seurezed a stourmas hag a stourm hiziv c'hoazh evit derc'hel hor gwerin dindan krabanoù an diglemmusted kristen, an doujañs ouzh galloud ar C'Hallaoued rak hennezh a zo memmet gant o Doue, sañset, evit ren war ar vorianed ouez a zo oc'h ober annez e Ploukistan ar C'Hornog, ar Westoned aheurtet ha ken fidel ! Hec'h-unan-penn e chomas hor gwerin enta, hep den na pennadurezh evit leviañ anezhi. Hogen, souezhusat tra, pa savad, hanter-kant vloaz zo un emsav broadel gwirion, e voe a-du gant an dudjentil hag ar veleion ! Disonjet e voe al lenneion peurliesañ en abeg d'ar re all hep soñjal e oant ar re nemete a oa enne ha gante ur goanag a araokaat : un abeg eus c'hwitadenn an emsav kozh eo.

D'AN EIL, hag ar pouezusañ eo, dre m'he deus Stad ar C'Hallaoued, pe pe roueel pe republikan e ve, meret hor bro eus ar fallañ. War-lerc'h feur 1532 pa gemeras pennadurezhioù Bro-C'Hall tonkad hor bro etre o daouarn e rankent, hervez o lezennoù-i, merañ hor glad "en bon père de famille" (e-giz ur penn-tilu pe un ozhac'h mat) ha neket dilezel ur vro m'edoa dezhi kentañ verdeadurezh Europa, da skouer, hag ur vleuñvidigezh a oa bamet an holl hanezourion dirazi. Deut eo reuz Breizh diwar an di-

! ouer a vengleuzioù houarn ha glauc'h pa darzhas heol dispac'h an ijinerezh e deroù ar
! c'hantved diwezhañ. Ar C'Hallaoued a savas neuze hentoù-houarn hag hentoù bras da áhou-
! de er ramvroioù frouezhidik, lese Westhoek, Lothringen, soonenn al Loer uhel, h.a.,
! hogen, ne dalve ket ar boan d'en ober en ur vro ken dilezet ha Breizh. Evelreizh e cho-
! me hor bro digor a-dal d'ar mor bras dre an Orient ha Brest; gallus e vizie bet diorren!
! ar perzhier-se; met disfiziout a rae ar Frañsizion diouzh hon tadoù; bev-bividik e oa
! koun ar chouanerezh ha gwell e kavzont lakaat eno o listri-brezel, dres evel ma reont
! bremañ pa fell dezhe lakaat e-leizh a soudarded da annéziñ en hor bro. E-lec'h labou-
! radegoù, soudarded ! Deut eo Breizh da vout evit ar C'Hallaoued un drevadenn vac'homus
! o vevañ dindan lezenn ur feur trevadennek ha netra ken. Dellezek eo he gwazed yaouank
! a reiñ jiboez evit brezelioù ken diniver ha kollet hor mistr hag he merc'hed da vout
! gisti e-barzh o fouzhlech'hoù.

! NE VERN, peogwir e fell d'ar Westoned chom feal d'o aotrouion; evel ma
! skrive Loeiz Herriou : "neret en deus bugale ar re ho poa (Frañs) prenet e 1532".

! HOGEN, neret he deus ivez gouenn-mibion ar Balp; ha boas int deut da
! vont da redek bro da zibenn-hañv; hag emañ ar spont o kregiñ e stripoù hor mistr e-
! barzh o falezioù louan war ribl ar Seine, hag ar promesaoù da zeredek davedomp. Siwazh,
! o stourm a zo gwenn peurliesañ peogwir ez eus Gwestoned diot a-walc'h evit krediñ er
! promesaoù-se ha reiñ daou viz da ouarnamant Paris evit "kempenn" e lezennoù torfedus.
! Daou viz, lese betek ma vo adkroget e labourioù an douar, war-lerc'h ar referendom hag
! ar mouezhiadegoù, tra ma vizie bet ken aes all teurel d'an diaz evit mat touellerezh
! an aotrouion barizian. "Goustad, goustadik paotrig bihan, bez faer-plae ha mobok war
! an dachenn-fobal. Arabat lakaat ar Barizianed da zrouktunañ war don ar referendom, ne
! ve ket seven !" Setu ar ganenn hon eus klevet ur weizh c'hoazh; n'end eo ket nevez, a-
! nat eo, met he c'hlevet hon eus bremaik m'edoa, evit ar weizh kentañ abaoe eizh-ugent
! vloaz, a-unvan gwerin Vreizh en he fezh evit gonit an trec'h d'ar vro.

! PEUR e c'hellimp adkavout un hevelep degouezh ? Pa vo soudarded ha
! fliked ar C'Hallaoued diazezet da vat e-barzh ar vro ? Pa vo diazezet da vat ivez
! unbennegezh ar Gledig Hir war Frañs hag he zrevadennoù enhegzagonek ? Pa vo troet en-
! dro da Westoned diseblant ar Vretoned hon eus gwelet o sevel peogwir o devo komprenet
! ez int bet bratellet ur weizh c'hoazh gant o c'hloer, o c'hannaded, o fennadurezhioù
! naturel ?

! HA SONJ hoc'h eus eus komzoù Daladier ouzh ar Barizianiz a genyouc'he
! dezhañ pa zistroas eus München ? Setu, me gav din, a lavaras ennañ e-unan ar Gledig
! Hir pa'z eas da Blouevour-Bodoù, hag a lavaras, moarvat d'ar Pleven, e gen Hir, hor
! Glaoui mod Breizh dilost :

! "LES CONS" emezañ.

M A R V E A D D ' A N E I C H M A N N*
*
*
*
**
*
*
*
*

Du-hont en ur gambrig,
O deus krouget un den.
Du-hont en ur gambrig,
O lipat o mourrou.

Kement tra en deus graet
Hon eus-ni graet ivez,
Feleun d'hor ger ha d'hor blenier,
Rak an enor a oa neuze sentiñ.

C'Hwec'h milion -- pe unan --
Pe nebeutoc'h, ne vern,
Pegwir e oant enebourien
Hag eñ soudard, ha dizaon.

Du-hont en ur gambrig,
O deus krouget ur ouenn.
Du-hont en ur gambrig,
O deus krouget o spont.

Gantañ 'varvas 'vit an eil gweizh
Ar c'hwec'h milion arall,
Bev-suilhet en o ziez,
Er ruiou ruz, er c'haviou-forn.

Du-hont en ur gambrig,
E voe krouget o skeud.
Du-hont en ur gambrig,
O hirvoud a gleved.

Oaz bras 'm eus ouzhit,
Ata-Ulf an Eichmann,
A rôas da vuhez, pa chomomp gant hor c'hof,
Pa chomomp gant hor saotr.

Ouzhit, Den an Dervenn,
C'Houlenomp trugarez,
P'hon eus da zilezet
Pa gouezhas ar gordenn.

Kaoc'h-ki holl ac'hanomp,
A vougas garm ha leñv
P'oas gwriet ouzh ar Post,
Da-unan 'mesk ar chas.

Dimp-ni 'oa'r gunujenn,
Dimp-ni ha mein ha skop,
D'hor feiz-ni war-eeun
Ha liv hon dremm.

Du-hont en ur gambrig,
E tigoras an hent.
Du-hont en ur gambrig,
Eo tarzhet hon deiz.

*
*
*
*
*
*
*
*

Clet GUEZENNEC
A-gent SS-Scharführer der
Sicherheitspolizei u. SD.

 * STOURM IVERZON HAG AN ILIZ KATOLIK. *
 * * * * *

gant James CONNOLLY.

! R A G E V E Z H I A D E N N O Û . !

! AR PENNAD da heul a zo diverret eus raklavar ul levrig, "Labour, Broa-
 ! delezha ha Relijion", gant James CONNOLLY, ar stourmer a roas e vuhez evit Iverzon e
 ! 1916. Connolly a oa broadelour ha gwerinelour war un dro : evitañ, koulz hag evit Lenin!
 ! hag a anavezze anezhañ, e oa stourm Iverzoniz da renkañ gant stourmoù an dud wasket ouzh,
 ! ar benndanvezourien.

! E 1910 e reas ur Jezuist ur rumnad prezegennoù-koraiz e Dulenn ma arga-
 ! de ar c'helennadurioù marksat a oa Connolly ouzh o brudañ. Al levrig a voe skrivet evit!
 ! diarbenn an argad-se. Eilgeriañ a rae d'ar re a damalle d'ar werinelourien klask lemel
 ! o frankiz digant an hiniennoù, mac'hañ ar relijion hag aotren an diroll. Hag e c'hou-
 ! lenne ouzh ar Gatoliged anavezout mat o gwirioù koulz hag o deverioù e-keñver an urzh-
 ! az, o kounaat ez eo an Iliz ur gumuniezh ha karg ar veleien servij kehelerezh ar re lik,
 ! Arabat d'ar re-mañ ober diouzh o gourc'hemennoù pa ne vezont ket diouzh ar gwir gelen-
 ! nadurezh katolik. Re alies avat ez eo bet implijet ar veli speredel evit lakaat an dud
 ! da servij da vennadoù politikel ar gloer, a-enep d'o mad o-unan.

! DA HARPAN en tamall-se e tenn Connolly un nebeut skouerioù eus istor
 ! Iverzon. Kalz paotoc'h, emezañ, eo an degouezhoù ma rankas Iverzoniz ober diouzh o
 ! foell hag o skiant ha mont dreist da c'hourc'hemennoù fraezh ar bPabed hag an eskibien;
 ! hag an istor koulz hag an hengoun broadel a ziskouez e oant reizh.

! EVIT lod eus ar skouerioù e tisklêr e handonioù. N'em eus ket o gwirie-
 ! kaet. Ar pezh a zispleg a-zivout aloubidigezh an Normaned e 1169, an dispac'h e 1798
 ! hag emsav ar Fenianed am eus gwelet meneget e lec'hioù all.

! GOUDE 1910 ez eo bet kadarnaet e damalloù ivez. E 1920-21 hag abaoe,
 ! bep gwech ma klaskas tud an IRA argas ar Saozon evit mat, ez eo bet diskuilhet hag es-
 ! kumunget ar stourmerien gant an eskibien. En ur vro ken katolik hag Iverzon, seurt
 ! taolioù-kurun a zo bet ken efedus hag an arme enebour.

*
 * *
 * *
 * *

! O KINWIG ar skouerioù-se e soñjan e c'hellont talvoud d'ar Vretoned.
 ! Ar pezh a venman n'eo ket ober gwallvrud d'an Iliz katolik met prientiñ stourmerien
 ! Vreizh evit ar mare ma vint darev da deurel kuit ar yev gall ha ma vo klasket o diner-
 ! zhañ gant gourdrouzoù speredel. C'Hoarvezet eo bet an dra-se endeo. E 1940, pa c'hel-
 ! led krediñ e oa ar maout o tont ganeomp, e taolas an eskob Duparc e bouez a-du gant ar
 ! C'Hallaoued, en ur c'houlem ma vefe nac'het an absolvenn ouzh ar vroadelourien obe-
 ! riant. Evelse e namme SBB evit pevar bloaz da vihanañ hag e lakae un darn vat eus tud
 ! e eskopti da ziskrediñ war ar menoziù broadel. En abeg d'e enebiezh e troe un toulla-
 ! dig o c'hein d'an Iliz katolik, se avat ne gonte evit netra emichañs e-tal ar gonid
 ! politikel a roc da Vro-C'Hall. Goude ar brezel, pa oa bet graet an droug, e lamas e
 ! gastiz, nemet diwar bennoù kalet paotred Breiz Atao ! (Kiv. AR VRO, Niv. 10, burutel-
 ! ladenn tezenn Jikel).

! TUD zo a lavar o dije dleet renerien ar Strollad dougen klemm da Roma.
 ! Aner e vije bet : ar jeneral a sell div wech araok mezhekaat un ofisour dirak e soudar-
 ! ded. Ha re wir eo e ra brav an Iliz alies ouzh ar re c'halloudek, pa vez ar re wan o
 ! tispac'h. Ezhommoù an diplomasi ? Hag e vemp dalc'het ni ?

PA SAVLS talabao gant ar gouerien warlene, e vezas ar C'Hallaoued evit ar wech kentañ ar pezh a oa bet paotred Breiz Atao o c'harmiñ e-pad daou-ugent vloaz. Ar bobl a ouie e vefent "komprenet" seul welloc'h ma lakfent c'hwen e loeroù ar vistri. Ur vadelezh e voe evit ar re-mañ eta, hag un taolig ganas evit hor bro, pa c'houlennas eskibien Vreizh-voñs ouzh ar gouerien habaskaat.

HA MANTRET eo ar vroadelourien gatolik o soñjal e klaskomp kign ouzh un urzhaz re c'halloudek hag ampart ? Ha gwelloc'h e vefe ober van da grediñ ez eo Feiz ha Breizh evel div c'hoar evit pennadurezhioù an Iliz ? D'hor meno e rank atav ar stourmer anaout mat ar maez en-dro dezhañ.

BELEIEN a zo en emsav, hag int ken engouestlet ha ken niverus ha n'eus forzh pe rummad all. Enor dezho ! Gouzout a reomp bremañ koulskoude ez eo bet lezet ar brezhoneg er-maez eus an ilizoù, -- er vered, e c'hellfen lavarout -- hogozik e pep lec'h ma'z eus anezhañ c'hoazh yezh ar peurvuiañ eus ar barrezianiz. Hep ezhomm eta. Daoust d'ar "wazoniezh-diweuz" hag a vez roet gant an eskibien da gaoz ar brezhoneg, ne gav ket din o deus implijet o beli evit envel beleien vrezhoneger e parrezioù ar brezhonegva nag evit lakaat ar veleien da zerc'hel d'ar brezhoneg. Pevar bloaz zo bennak e skrive ar Chaloni Fave er gelaouenn Bleuñ-Brug ne oa ket kefridi an Iliz saveteiñ ur yezh na felle ket d'an dud mirout, ha ma'm eus soñj mat e tamvenege, d'an erez a c'hellfe dont d'an dud ouzh ar re a gendalc'hfe d'ober gant ar brezhoneg en o abostolerezh. Souezhus eo ur seurt digarez, pa oar an holl e c'houlenn an darn vrasañ eus ar Vretoned e Goueled Breizh ma vo digoret ar skolioù d'ar brezhoneg, pa ouzer ivez bremañ, a-drugarez d'ar beilhade-goù da skouer, pegen tomm e chom ar vrezhonegerien d'o yezh. E gwirionez, ar pezh a ra diouer d'ar Vretoned eo blenierien gouestlet da zifenn o mad ha neket da vorzañ o skiant eus ar mad-se. Gant hevelep blenierien ne vefe ket pell ar Vretoned oc'h adlaouenaat ouzh o yezh, en iliz koulz ha war al leur-c'hoari.

HIZIV an deiz e c'houlenn ar bPabed ma vo doujet ar sevenadurioù bihan ha bras, ha graet muioc'h gant ar yezhoù genidik evit an abostolerezh. Mat eo d'hor che-laouennoù adembann ar c'hemennadurioù-se evit ma vint lakaet da dalvout e Breizh koulz hag en Afrika. Padal, soñjal a ran ez eo lusket ar Vatikan gant ar c'hoant da zigevrediñ, kaoz ar Gatoligiezh diouzh hini an drevadenourien wenn, ha da dostaat en hent-se ouzh kalonoù an dud a glasker degas d'an Iliz. Ne gav ket din e vo pouezet war eskibien Vreizh evit ma lakaint an erbedoù-se da dalvout en hor bro ma n'eur ket kendrec'het da gentañ ez eo ar brezhoneg hag ar sevenadur breizhat ur benveg hag ur sichenn welloc'h eget o c'hevatalioù gall evit an abostolerezh katolik. Ur pennad gant M. Glanndour e Niv. 60 Skol a ziskoueze e tizer n'eo ket hepken ar feiz katolik met ar feiz e pep tra pa zi-wrizienner ur bobl. Daoust hag e oar ar pennadurezhioù katolik an dra-se ? Daoust hag ez eus abegoù pouezusoc'h evit hor gallekaat ? Daoust hag emañ ar gwir gant teodoù fall hag a lavar e konter war Vreizhiz hag Iverzoniz evit ar misionoù er broioù ma komprenet galleg -- ha saozneg -- hag ez eo ret e komz 't flour ar yezhoù-se, a-vihanik eta ? Piv o dislavaro ?

PE C'HONID bennak a zeu d'an Iliz katolik en eskemm evit -- pe war un dro gant -- ar servijoù a rent d'ar stad c'hall, a-ratozh pe nann; ni a zistaol groñs kement hag a dalvez da hiraat sujedigezh speredel ha danvezel hor c'henel. Ar gouarnamant gall a ra ar brasañ gaou d'hon tud en ur zisleberañ o buhez. An den eeun a daer ouzh hevelep gaou, evel ma taer ar C'Hrist ouzh marc'hataerien an templ. /rabat d'ar veleien-vras dont d'hon habaskaat, nemet e lavarfent neuze fraezh penaos trec'hiñ d'ar waskerien.

Gwilhou G L O A V E R Z H E G.



STOURM IVERZON HAG AN ILIZ KATOLIK.

AMAN da heul e roomp un nebeut skouerioù eus an degouezhioù niverus ma rankas Iverzoniz oberiañ war an dachenn bolitikel a-enep gourc'hemennoù fraezh ar Babed hag an Urzhaz katolik, hag an istor da c'houde o tiskouez e oa bet reizh an dud "lik", ha fall ar pezh a lavare ar gloer ober.

ALLOUBIDIGEZH kentañ Iverzon gant an Angl-ha-Normaned e 1169 a voe graet war urzh Herri II dindan veli ar Pab Adrian IV. An alouberion a yeas war-raok en ur ober pep seurt trubarderezh, gwallerezh ha lazherezh. Nac'het eo bet e oa e gwirionez ar Pab hag en doa sinet ar "vuilh" a roe aotre da Herri; pezh a zo diarvar avat eo n'o deus morse Adrian nag e warlerc'hidi distailet anezhi.

AN HOLL Iverzoniz, ha kalz estrenien ivez, a garfe hiziv an deiz e vije deut Iverzon a-benn da virout o frankiz a-enep Herri. Da geñver ar Sened-Iliz dalc'het e Dulenn e 1177 e tisklêrias evelkent kannad ar Pab Aleksander III "gwir Herri da ren Iverzon dre veli ar Pab, hag e lavaras e oa ret sentiñ outañ dindan boan a eskumunugenn. Ar Saizon ne oant ket bet eizh vloaz en Iverzon hag ar pep brasañ eus ar vro a oa diwallet diouto c'hoazh, hogen Iverzoniz a vefe eskumunuget evit nac'h bout sklaved dezho,

EN IVERZON, koulz hag en holl vroioù katolik, un iliz a zo ur minic'hi ma c'hall an torfedour brasañ zoken kaout bod ha tec'hout diouzh an neb a glask e herzel, peogwir ez eo arabat da servijourien ar "bed", ar polis da skouer, mont war o lerc'h aze. E 1177 neoazh, evit reiñ harp d'ar roue saoz, e torras ar Pab ar gwir a vinic'hi en Iverzon, e roas d'ar Saizon an aotre da breizañ en ilizoù ar vro ha da herzel ar re-puidi iverzonat a glaskfe bod enno. Brasañ torfedourien Europa a oa en diogel kerkent ha ma tiraezent mogerioù un iliz, ur brogarour iverzonat ne oa ket, avat.

E 1319 e voe pedet Edward, breur Robert Bruce a Vro-Skos, gant brientinien ha gwerin Iverzon da zont da reiñ skoazell dezho evit dieubiñ ar vro. Asantiñ a reas, e-leizh a dud armet a yeas a-du gantañ, hag Iverzoniz ha Skosiz unanet a argasas ar Saizon diouzh Oula ha Konnac'ht. Gervel a reas ar roue saoz ar Pab Yann XXI d'e harpañ. Hemañ diouzhtu da respont hag eskumunugañ an holl Iverzoniz hag a oa o tougen armoù a-enep ar Saizon.

EVIT ar pevar c'hant vloaz adalek 1170 ma renas ar spont gwashañ en Iverzon, ma voe lazhet tud ar vro evel chas gant o amezeien gatolik a Vro-Saoz, ha lezenn ebet evit kastizañ ar vuntreien, ne anavez an istorourien degouezh ebet m'he dije implijet an Iliz Katolik he galloud evit gwareziñ he bugale feizleun en Iverzon.

PA DREC'H/S Gwilherm Orania war Jakez II en emgann ar vBóinn e 1690, e voe goulaouet-holl ar Vatikano ha lidet oferennoù-trugarekaat e Roma. Jakez a oa kevredet gant Loeiz XIV evit klask mirout e dron, hag ar Pab a oa aet a-du gant ar protestant Gwilherm evit klask krennañ e zivaskell da Loeiz. Emgann ar vBóinn a voe un drouziwezh evit Iverzon, peogwir e teuas daou c'hant vloaz a zismantr eviti da heul. (Kiv. von Ranke, Istor ar Babed; Murray, Istor Dispac'hoù Iverzon).

GOUEZ d'ar Pennkad Lee (iverzonek e anv) e oa Iverzoniz an hanter eus ar soudarded amerikan o stourm evit dieubiñ ar Stadoù Unanet diouzh ar Saizon. Daoust da se e c'houlenn an Dr. Troy, eskob katolik Osairghe (Iverzon) ouzh e zeñved pediñ hag ober yun "evit distreiñ diouto konnar Doue hegaset gant o c'hensujidi amerikan hag a zo loavet gant menozioù touellus ar frankiz hag an emrenezh, a zistaol beli Bro-Saoz hag a striv gant armoù da c'hllac'hariñ o mammvro". E 1909 avat e tisklêrie ur c'helenner Monaghan dirak Kevread ar C'Hevredigezhioù Katolik er S.U., gant asant e eskob, e vije darev Urzhaz katolik ar Stadoù Unanet da werzhañ al listri sakr diouzh ret evit difenn ar Republik Amerikan.

E 1798, emsavadeg an Iverzoniz Unanet renet gant Wolfe Tone evit sevel

ur Republik iverzonat a voe ar c'hreñvañ e rannvro Loc'h Garman (= Wexford). Kalz eus renerien ar re Unanet a oa protestanted ha frankveizourien. Diskuilhet e voe o c'hevredigezh gant an Urzhaz katolik hag ar pep brasañ eus ar veleien, o c'houlenn ouzh an dud chom leal d'ar gouarnamant saoz. Ar re boellek e-touez ar Gatoliged a dremenas hep selaoù an diskuilhò-se. Unan eus ar veleien a reas diouzh ma c'halljont evit lakaat ar stourmerien da zaskor o armoù, an Lo. J. Murphy, a voe rediet da vont da stourm, eñ ivez, pa zevas ar Saozon e bresbital. Stourm a reas kadarn betek ma voe merzheriet; e berzhioù-brezelour a voe disteraet avat dre ma voe pennkaoz, pa oa beleg, ma voe dizarmet kalz eus e genstourmerien-dazont. Pa oa ofisour e penn an dispac'herien e welas e oa bet reizh ar re a zisentas d'e c'hourc'hemennoù-beleg en ur virout o armoù.

An Dr. Troy meneget a-us a voe goulennataet gant ar pennadurezhioù saoz petra oa dleet d'ur beleg ober, ma teufe keloù dezhañ, dre ar gador-goves, eus un irienn bennak a-enep ar gouarnamant. Dr. Troy, a-benn neuze arc'heskob e Dulenn, a respontas : "e oa dleet d'ar beleg reiñ da c'houzout d'ar gouarnamant e oad o prientiñ un taol, en ur deurel evezh na gouezhfe diskred ebet koulskoude war un den-mañ-'n den, ha na ve gouezet penaos e oa deut ar c'heloù betek ennañ." Goulennet e voe ouzhpenn ouzh an arc'heskob ma vefe roet an absolvenn d'ar pec'her hep gouzaouiñ ar polis pe ar gouarnamant da gentañ. Disklêriañ a reas fraezh ne oa ket a-walc'h koves evit reiñ dic'haou : dleet e oa d'ar beleg pouezañ war an den da reiñ keloù d'ar Stad pe d'ar polis, araok pe goude an absolvenn, en hevelep doare ma vez goulennet ouzh ar bec'herien ober pinijenn e seurt plegennoù. (Kñv. Viceroy's Post-Bag gant Michael Mac Donagh).

NE gredomp ket e oa an Dr. Troy o jubenniñ ar gelennadurezh katolik evel ma tlee; heverk ez eo koulskoude e c'hourc'hemennas person Magh Ealla (rannvro gCorcaigh) d'unan eus ar Re Unanet hag a oa deut da goves gantañ, reiñ keloù d'ar pennadurezhioù saoz e oa mennad soudarded Strollad Midhe kemer kanolioù ar Strollad-se ha reiñ anezho d'an dispac'herien. Gopraet e voe ar beleg-se, Tomaz Barry, gant ul leve a 100 lur sterlink ar bloaz goude-se. Graet en doa diouzh urzhioù e arc'heskob.

IVERZON a voe unanet gant Bro-Saoz e 1800 e ser fals-leoù ha touelloù. Hervez an istorour katolik Plowden, kalz katoliged, e-touez an dudjentil hag ar gloer dreist-holl, a oa a-du gant an unanidigezh, tra ma'n em zisklêrie kement ha div logell oraniat (protestant) ha tregont a-enep an Akt.

ROPERZH EMMET a zo enoret hiziv an deiz gant Iverzoniz dre ar bed a-bezh evit e stourm kalonek e 1803. Pa voe merzheriet e kasas arc'heskibien gatolik Dulenn hag Ardr Macha ul lizher da zileuriad Bro-Saoz en Iverzon, o tiskuilhañ Emmet gant ar gerioù groñsañ. E 1808 e ouestle holl eskibien Iverzon "derc'hel d'ar reolennoù hag o deus hor sturiet betek henn pa vez eskibien nevez da zilenn, ac'hanta erbediñ atav d'ar pab beleien direndaelus e-keñver o lealded d'ar gouarnamant saoz. "

GOUDE bezañ gonezet frankiz d'an holl gatoliged er Rouantelezh Unanet e 1829, e krouas O'Connell hag e zalc'hidi un emsav evit terriñ Unanidigezh Iverzon gant Bro-Saoz. Diskouezet o doa e oa anezho katoliged wirion. War c'houlenn difraeus ar gouarnamant saoz e c'hourc'hemennas koulskoude ar pab Gregor XVI d'ar veleien chom hep monet da vodadegoù an emsav-se. O'Connell a lavaras ne oa ket reizh d'ar pab diarbenn frankiz ar veleien evel-se, hag evitañ da sentiñ ouzh Roma evit e relijion, n'hen grafe ket evit e vennadoù politikel !

E-PAD ar pevar bloavezh naonegezh en Iverzon, 1845-49, e varvas kantmiadoù eus an dud gant an naon, daoust ma oa boued a-walc'h er vro evit magañ tric'hement ar boblañs. Pa voe atizet ar gouerien da chom hep paeañ o feurmou d'an aotrounez na raent netra evito, ha da zispac'h a-enep ar renadurezh hag a oa ouzh o lazhañ, ar gloer a c'hourc'hemennas dezho paeañ ar feurmou anez koll o ene divarvel hag e taoljont o fouez-holl a-enep an emsav evit ar frankiz. Ar c'hatolig entanet A. M. Sullivan en deus skrivet e New Ireland e oa bet drastusoc'h berz ar gloer war an emsav eget holl c'halloudoù ar Gurunenn saoz.

EMS/V ar Fenianed evit an Dispac'h a voe diskuilhet gant an holl eskibien hag ar peurvuiañ eus ar veleien. An eskob Moriarty (Kerri) a lavaras "ne oa ket berv a-walc'h an ifern na hir a-walc'h ar beurbadelezh evit seurt diskrediged". Tamallet e voe d'ar Fenianed bout enebourien ar relijion hag ar moral. Koulskoude an tri anezho hag a voe kondaonet d'ar marv a varvas en ur bediñ, hag an holl Iverzoniz a vag hiziv an deiz ar brasañ doujañs evit o stourm.

KEVREAD al Labourerien Douar a viras ouzh euzhademou an Naonegezh Vras da c'hoarvoud adarre e 1879. Terriñ a reas o c'hein d'ar berc'henned vras (landlords), hag argas ar siou gwashañ diouzh renadurezh ar Saozon. Diskuilhet e voe an emsaverien tri bloaz diouzh renk avat gant an Arc'heskob Mac Cabe.

E 1882, e voe savet ur gevrennad-verc'hed e-barzh Kevread al Labourerien Douar. O c'hefridi a oa dastum arc'hant evit skoazellañ an dud en dienez hag enklask diwar-benn ar rakuidoù (*). Diskuilhet e voent gant an hevelep arc'heskob o lavarout e oant dielevez ha fallakr. Goude an argad-se war vrud-vat merc'hed brogar e voe anvet Mac Cabe da gardinal.

E 1883, pa oa kouerien Iverzon o stourm da vat evit en em zisober diouzh mac'homerezh ar berc'henned-douar bras, ec'h embannas ar pab ur privezlizher o kon-daoniñ yenijenn Iverzoniz ouzh gouarnant Bro-Saoz koulz hag an testeni a zoujañs da bParnell. Iverzoniz a respontas en ur reiñ muioc'h eget an daougement a sinadurioù evit an testeni-se. Rener o stourm, Michael Davitt, a voe nac'het gant ar pab e zegemer. Dezhañ avat eo dleour kouerien Iverzon evit un tamm mat eus ar wellaenn a zeuas en o buhez e dibenn an XIXvet kantved. Pa varvas e voe enoret gant an dud, beleien hag all.

E 1883, pa'z eas an Dr. Mac Glynn, ur beleg katolik, er Stadoù Unanet, da brezeg a-du gant dastum arc'hant evit skoazellañ Iverzoniz ar C'Hornog hag a oa war nes marnaoniañ, e kasas ar Vatikano ul lizher d'ar c'hardinal McCloskey o c'hourc'hennenn dezhañ digargañ "ar beleg-se, Mac Glynn, evit prezeg a-du gant an dispac'h en Iverzon". Ar pellizher a oa sinet gant ar c'hardinal Simeoni. Goude-se e voe eskumunget Mac Glynn en abeg d'e gelennadurioù dispac'hus war gudenn an douaroù. Un nebeut bloavezhioù goude ec'h anzavas ar Vatikano e oa bet ur fazi hag e voe torret ar varnadenn.

EN HOLL skouerioù roet en alberz berr ha diglok-tre a-us, e oa douget reizh an emsaverien hag an dispac'herien tra ma oa fall hep mar ebet kelennadurioù politikel ar Vatikano hag an Urzhaz katolik... Klask a raent gant o obererezh politikel servij Doue ha Mammon, kevredañ servij an Hini a yae uvel war gein an azen ha servij ar re a gerzhas gant o botoù houarnet war galonoù hag eneoù ha goanagoù an dud paour.

AR SAOZON a forbannas holl veleien gatolik Iverzon e 1623. E 1795 e kavjont e oa furoc'h aotren krouidigezh Skolaj Magh Nuat evit prientiñ ar veleien. E 1845 e voe roet skoazell-arc'hant gant ar Saozon d'ar skolaj hag e trugarekae ar prezeger R. L. Shiel anezho evel-henn :

" SETU ur c'hammed war an tu mat. Arbat deoc'h kemer ar gloer gatolik en ho kopr, bez'e c'hallit avat kaout damant dezho... Ha n'eo ket gwelloc'h marc'had kentelioù e Magh Nuat eget heskinerezh ar Stad ? Ha n'eo ket digoustusoc'h ar gelennerien eget alvokaded ar Gurunenn ? Ha n'eo ket keroc'h derc'hel un arme vras hag ur bern archerien eget ar polis speredel a c'hellit kaout, en un doare efedus hag arboellus, gant kloer Iverzon ? "

+++++

(*) rakuid "eviction"; rakuit : teurel er-maez eus e di.

*
*
*
*
*
*

SKRIDOÙ HON DIARA OGERION

Meur a wezh em eus merzet er bloavezhioù-mañ pegen dianav e chome evit !
 er re yaouank skridoù ar re o deus kreuet emsav Breizh. E-barzh pep niverenn eus ar
Stourmer enta e roimp ur skrid kozh pe goshoc'h. Amañ e vo kavet ur pennad bet embannet
 e-barzh Nn. 248 Dihunamb (C'Hwevrer 1932). D'an amzer-se e felle d'ar C'Hallaoued lidañ!
 pevar-c'hantvet deiz-ha-bloaz unanidigezh Breizh ha Bro-C'Hall; goût a ouzer penaos e
 voe respontet gant paotred Gwenn-ha-Du; n'end eo ket fall gouzout ivez penaos e voe dar-
 baret ober GhD er speredoù ha dibabet hon eus ar pennad-mañ eeun ha taer bet skrivet
 gant ar Gwenedour meur Loeiz Herrieu. E-sell ouzh ar skritur ez anzavin em eus lakaet
 da dalvezout diazezennoù ar gwenedeg unvan : aon am eus hepken e ve rebechet din bout
 chomet re "wenedegour". Hag eo ret din lavarout n'em eus keuz ebet bout zedachekaet ur
 pennad skrivet gant ijinour ar zh milliget ? (Nemet e ve bet Yeun ar Go ? s. Dihunamb,
 xi, 82 (1932)).

G.P.

DRE DEIR GWEIZH

EN "EM DAOL" BREIZH E DIVREC'H FRAÑS !

gant Loeiz HERRIEU .

... La Bretagne se jeta avec amour dans
 les bras de la France...

(Ar Gazetoù.)

AR RE ac'hanoc'h a anav istoer Breizh a oui emañ bet distag hor bro-ni,
 douzh Frañs gwezharall. Bout hor boa ni ivez ur gouarnamant hag ur mestr e penn ar vro;
 ha traoù Frañs ne sellent ket muioc'h deomp eget ne sell bremañ re Bro-Spagn.

GOVERNAMANT Frañs, ervat, en deus bepred esaeet bountiñ e fri e traoù
 hor bro. Gwazh en deus groeit : e-pad meur a gant vloaz en deus itouanez Frañs esaeet
 lakaat Breizh edan o damani, dre vrav, meur a weizh; dre vil al liesañ.

BREIZHIZ, int, n'o deus biskoazh sellet brav douzh mistr Frañs a pa ven-
 nent reiñ lezennoù dezhe ha, dreist pep tra, a pa glaskent sevel diar o c'houst taosoù
 ha deogoù.

DRE pep div weizh e teu Frañs get he soudarded, da esae lakaat hon tud
 kozh da blegiñ; ha plegiñ ne vement ket. Ha kann gote neuze.

DAOUSTO da Vreizh bout bihanoc'h eget Frañs, lies emañ bet lardet ar
 Frañsizion d'hon tud kozh. Meur a weizh ivez, siwazh ! e veze tu ar c'holl gete, dreist
 pep tra a pa n'em glevant ket etreze. Goude ur steniad brezelioù garv, er 15vet kant-
 vloaziad, ezh oa gwaneit mat hor bro. Tud a oa bet lazhet ha gwallaozet a yoc'h, enta-
 net ha dizalbadet e oa ar vro. Ne oa ket mui evit em zifenn. Ha ne oa da benn e Breizh
 ar prantad-se nemet ur c'hrenn blac'hig, an dugez Anna. Neoazh ma n'he devoa ket oad,
 furnezh ervat he devoa. O welet he bro en danjer a gouezh, un deiz pe un arall, edan
 krabanoù Breizh-Veur pe Frañs, hi groeit ar soñj da zimeziñ da vMaksimilian an Aotrich,
 hag en doa he c'hoanteit.

KLSET en doa henhon kannaded da Vreizh. Groeit e oa ar paperioù ha ke-
 ment tra a oa ret. Soñjet a oa Anna da vonet goude da gavet he fried evit ma vehent eu-
 redet en Iliz. An dimezenn-se, aes eo goût, ne blije ket kalz d'ar Frañsizion. Gwelet
 a raent o "zamm" e pellaat... Rerall ivez ne blije ket an dra-se dezhe : lod a noblañs
 ar vro, en o fenn re Roc'han. Galleget a c'houde gwerso, bouriñ a raent gwell oc'h ober
 c'hoari gaer e lez Roue Frañs, eget o vevañ didrouz en o manerioù e Breizh, get tud o

bro. D'ar merc'hed dreist-holl e plije ar vuhez a blijadur-se. Ouzhpenn kement-se, tost da roue Frañs e veze kavet "askorn da grignat" el ma vez laret.

HARPET get an noblañs galleget-se, setu Charl VIII, roue Frañs, o tonet da c'hronniñ Roazhon. N'helle ket an dugez Anna em zifenn, re wann e oa he bro. Ur feur a oa bet ret dezhi sin er bloaz 1491. Diferet e oa bet abarzh e c'helle monet da gavet he fried Maksimilian. Reiñ a rae roue Frañs aotre dezhi da dreuziñ e vro, seul ma ne ve he bet ar un dro geti nemet tud diarn.

E-PAD ar veaj-se ezh oa bet skrapet ar gaezh Anna da dud roue Frañs ha kaset da gastell Langeais, en Touraine. Eno ezh oa groeit dezhi dislaret Maksimilian ha kemer da vout pried Charl VIII, roue Frañs, d'an 6 a gerzu 1491. Pemzek vloaz he devoa. Redet en doa ar vrud n'he doa laret "ya" nemet goude bout bet kousiet da roue Frañs... Em glemet hi devoa trawalc'h atav goude, ha revendailh ezh oa bet un dra bennak, pan deo gwir an T. S. ar Pab, hag a oa goulennet getañ torriñ dimezenn Anna ha Maksimilian, a roas e aotre met o laret : Da modo tu dilecta in Christo fillia Anna propter hoc rapta non fueris (Ma n'end ous ket bet skrapet, te ma merc'h karet hervez ar C'Hrist).

HA SETU penaos en devoa "em daolet" eit ar weizh gentañ, Breizh hor bro e divrec'h Frañs !

*

ANNA n'en doa ket ankouezheit ar pezh a oa groeit dezhi. Gwelet a rae ivez splannoc'h pe splann petra a oa soñjet ar roue ober a Vreizh.

TRUG/REZ Doue, miret he devoa gwirioù he bro, en he faperioù eured get Charl VIII. Chomel a rae dugez ha mestrez da Vreizh goude marv he fried. Ha goude ar marv anezhi, ezh oa hec'h eil krouadur a zelie bout mestr ar Vreizh. Met diferet a oa ivez e telie hi dimeziñ en-dro goude marv Charl VIII d'an heni a oa dezhañ donet da vout roue e Frañs, mar plijhe dezhi elkent ha mar oa tu dezhe da zimeziñ.

NE chomas ket pell Anna ar un dro get he fried. Da 28 vloaz e varvas Charl VIII, en un taol. En e lec'h e teuas da vout roue e Frañs Loeiz XII, 36 vloaz en doa. Euredet e oa ouzhpenn ugent vloaz kent da Jeanne de France. Hag an heni a zelie donet da vout roue ar e lerc'h n'en doa c'hoazh met pevar bloaz. Ne oa ket tu d'an dugez Anna da zimeziñ da heni anzhe enta. A gredet c'hwi ! O welet ezh oa getañ lusk da goll Breizh, setu deit ur soñj diaoulek da Loeiz XII : a pa larhe ne oa bet biskoazh euredet get e vaouez Jeanne de France ? A pa gavhe tud da laret eltañ, eskobed dreist-holl ? An heni a fall dezhañ ober ur fall-daol a za perpet da benn a lakaat an tu laret douzh e veg. Negenniñ a ra kement Loeiz XII, a gleiz hag a zehoù, e-tal an eskobed hag e Rom, ma oa groeit un enklask ar e eured kentañ. Hag an eskobed karget da varniñ ha laret : ne talvez netra an euredenn gentañ; e c'helle ar roue bountiñ er-maez a e di ar pried divlam a oa a-c'houde ouzhpenn ugent vloaz o vevañ en ul lod getañ; hag e chelle kemer ur pried arall, mar groe plijadur dezhañ.

ELSE ezh oa bet ivez barnet an traoù e Rom. Ne oa ket bet neoazh an holl a-du get ar roue en degouezh-se : a-du get Jeanne e bried, hag a oa ur vaouez santel, daousto dezhi bout mac'hagnet, ne laran ket. Ha ret eo lenn ar bajenn-se a istoer Breizh eit gwelet pegen izel e c'hell diskenn mab-den, daousto dezhañ bout roue, pe eskob, a pan da dezhañ dilezel hent ar reizhded hag ar wirionez. Dieuredet e oa bet atav Loeiz XII ha eñ diouzhtu da esac kavet Anna Breizh, pe kentoc'h Breizh, rak aze e faote dezhañ kouezhel ! Ha deit e oa da benn.

HA SETU penaos en devoa "em daolet", eit an eil gweizh, Breizh hor bro e divrec'h Frañs !

*

O TIMEZIN da Loeiz XII, n'en devoa ket ankouezheit ar re hon dugez a zifenn gwirioù he bro douzh krabanou ar Frañsizion. Gwelet a rae splannoc'h c'hoazh petra a oa e soñj roue Frañs : Breizh a faote dezhañ kaout, Breizh a venne skrapañ, eit ober !

! anezhi ul lodenn disliv a vro Frañs. Hag Anna hag an dudjentil feizleum d'o bro, ne ven-
! nent ket a du erbet a gement-se. Kontant e oant da vevañ get ar Frañsizion el amezeion
! vat, met pep unan mestr en e vro el m'emañ jaojapl. Get ar soñj-se en he fenn e c'hrat-
! aas an dugez Anna da reiñ he merc'h Klaoda da Charl-Kint, mab-bihan Maksimilian. N'en
! doa ket servijet dezhi grataat. Loeiz XII a yeas ar he c'homz ha reget e oa bet ar pa-
! perioù groeit d'Anna.

! DA Fransez Iañ ezh oa bet dav da Glaoda dimeziñ diwezhatoc'h, a-gaoz ma
! vehe bet atav chomet Breizh edan beli Roue Frañs. Ret a oa bet da Glaoda ober ouzhpenn:
! reiñ dre skriv d'he mab koshañ, hag a zellie ivez bout roue Frañs arlerc'h e dad, razh
! an droadou he devoa hi ar Vreizh. Else ezh oa bet lamet get hec'h eil mab, Horri, ar
! pezh a oa deliet dezhañ hervez ar gwir. Neozh holl an troioù kann-se ne fondent ket ar
! feur groeit etre Anna hag he friedoù. Eil mab ar roue a chome atav da vout dug Breizh,
! mestr ar vro, hag heni ken. Penaos ober eit disoc'h ?

! PELL ezh oant bet o tastornat e lez ar roue e Paris evit gouiet penaos
! e vehe bet ar gwellañ em gemer evit luziñ Breizhiz. Ha n'end deuent da benn erbet. Ur
! Breizhad treitour d'e vro, Loeiz des Déserts, a oa bet ret dezhe kaout eit disoc'h. A-
! liñ a reas henhen ar roue da c'honit, unan arlerc'h an arall, tudjentil ar Stadoù, o
! reiñ dezhe enorioù, argant ha douar, douzh ret, ha d'o lakeat goude da c'houlenn sta-
! giñ Breizh douzh Frañs.

! EL-se ezh oa bet groeit. Hag e kaver merk e paperioù ar roue Fransez
! Iañ ag ar pezh en doa koustet dezhañ preniñ lod a gannaded Breizh; 375 lur (ar-dro
! 55 000 lur paper bremañ [1932]) a oa oeit dezhañ da vout rannet etre tudjentil ag ar
! Stadoù hag a oa difennet laret piv a oant. Louset ur marc'had !

! KAVET en devoa neozh ar roue kannaded ha n'o devoa ket vennet plegiñ.
! Nag enorioù, nag acour, netra n'helle donet da benn anezhe. Re e karent o bro. E sal
! vras an eskopti, e Gwened, ezh oa bet ar c'hrogad. Bec'h e oa bet. Daou gannad ag an
! Naoned a savas mem eit monet kuit, o laret ne hellent ket bouezhiñ eit un dra seurt-se
! hep monet da c'houlenn e-raok get Naonediz ha kontant e oant pe ne oant ket. Prest e oa
! lod kaer d'ober elte. Met n'o doa ket bet goar. Savet neuze Montejean, kannad ar roue,
! ha eñ dezhe en ur huchal, en ur gas trouz. Parraat a ra doute a vonet er-maez ha, dre
! forzh ober vil ha kinnig koll, dre forzh reiñ argant ha donezonou, setu ar Stadoù o
! plegiñ. Ezh oa ar roue o c'hortoz en ur gambr a-kostez... Setu enta ar c'hannaded, pre-
! net pe spontet, o c'houlenn get ar roue e vab koshañ da vout dug Breizh; o c'houlenn
! getañ stagiñ Breizh douzh Frañs da virviken en ul lezel geti neozh he frankizioù hag
! he gwirioù, el ma oant e-raok.

! DEIT a oa roue Frañs da benn ag ar pezh a glaske : lakeit a oa dezhañ
! hor bro edan beli Frañs. Dre vray a grede ar gaezh tud; goût a ramp-ni dre pe seurt
! lousleri.

! HA SETU penaos en devoa "em daolet" eit an deirvet ha diwezhañ gweizh,
! Breizh hor bro e divrec'h Frañs !

*

! SETU, e berr gerioù, penaos emañ bet staget Breizh hor bro-ni douzh
! Frañs. Gwelet a reer n'en deus ket bet kalz a "garantez" en tri degouezh-se em eus kom-
! zet anezhe. Douzh kement-se e komprenot perak ne venn ket gouarnamant Frañs ma ve des-
! ket istoer Breizh d'hor bugale er skol; douzh an dra-se ivez e komprenot perak ne ven-
! ner ket ma komzint brezhoneg ha ma ouiint mem emaint Breizhiz. Ha bremañ en hor c'hou-
! vier d'ober bourrapted ar un dro get gouarnamant Frañs evit diskoueziñ hor levenez hag
! hor grad bout bet groeit ker vil douzhimp ! Petra a gredet c'hwi a rahe ur minor hag a
! zo skrapet a-zoutañ razh ar pezh a zeu dezhañ ag e dud kozh, a pa vehe kouviet get en
! heni en deus eñ laeret, da vonet d'em rejoasiñ getañ ag al laeroñsi ? Ne fichhe ket er-
! vat. Frañsizion a hell bout laouen hag ober c'hoari-gaer : un tamm mat en deus skrapet
! aze o zud kozh ha talvet en deus e-leizh dezhe a c'houde 1532. Met ni, Breizhiz, a be-

! tra ezh omp bet ni well ag ar skraperezh-se ? !

! LARIN a reer deomp emañ gwell emañ bet staget an div vro else; rak a !
! hent arall e vehe bet gwasket c'hoazh Breizh d'ar brezelioù, ha oeit marse get ur vro !
! arall ? Diaes eo gouiet. Ne vern penaos ne gredan ket en dehe kollet Breizh, a-c'houde !
! muioc'h a vugale eget ne zo bet lazhet dezhi en dispac'hoù hag er brezelioù, ar un dro !
! get Frañs. Ken met er brezel diwezhañ, dalc'het mat soñj ezh eus chomet du-se tost da !
! 250 000 Breizhad... Eit ar pezh a sell an dra arall, e responñin ne heller mui mougiñ !
! ur vroadelezh el ma veze groeit en anzer gozh-gozh. Setu an Iverzon gwasket, diwadet, !
! rivinet d'ar Saozon, a-c'houde 600 vloaz zo, o sevel he fenn a pa grede ar bed ezh oa !
! tremenet. Setu ar Pologn, setu broioù arall bihanoc'h, e pep korn ag ar bed, hag a oa !
! ledet arnezhe mantell teñval an Ankoù, o sevel a varv da vev hag o lakaat broioù vras !
! da greniñ, hep armach, get komzoù. Sellet Gandhi... Buhez ar vroadelezhioù a zo etre !
! daouarn Doue el m'emañ buhez nab-den.

! DAOUSTO d'ar c'hoant bras hon eus da welet an holl pobloù ag an douar !
! o tehan get o brezelioù spontus, hag o vevañ el amizion, p'end eo gwir emañ ret dezhe !
! razh em gavet; daousto d'ar garantez e c'hellamp kaout evit an traoù kaer groeit get !
! Frañs; daousto d'an istim hon eus eit oberoù meur lod ag he bugale, n'hellamp ket an- !
! kouezhat hon istoer. Ha kent 1532 el a-c'houde e welamp ledet ar bep pajenn ag an is- !
! toer-se daroù ha gwad hon tud kozh lazhet da Frañs, rak ma tifennent o bro hag o gwirioù.

! A P'HOR c'houvier d'"em deurel" c'hoazh ur weizh en ho tivrec'h e teu !
! c'hoant deomp, o Frañs, da respont deoc'h :

"Sellet enta ho taouarn, ho tivrec'h : goleit int a wad !

"Gwad ar Balp hag ar gaezh peizanted krouget deoc'h er 17vet kantvloaziad;

"Gwad ar Pontkalleg hag e bevar kenseurt dibennet deoc'h en Naoned;

"Gwad an dud vat lazhet deoc'h e-pad an Dispac'h;

"Gwad hon tud kozh diskaret deoc'h, el loened, e Park ar Vartired;

"Gwad Breizhiz lazhet en Europ a-bezh da heul Napoleon bihan;

"Gwad hon tadoù lazhet, marv pe skornet e Kamp Konli;

"Gwad ar soudarded lazhet re er brezel diwezhañ evit armerzh tud ar c'hreisteiz

"Na buhez ar brezhoneg, taget bemdeiz get ho skolioù ha gwallgaset get ho tud-
jantil e karg.

"Na feur 1532, roget deoc'h hoc'h unan ?

"Nag argant hon taosoù a gaset da servij kornadoù diboblet ar c'hreisteiz ?...

"Nag e karhec'h ma em daolhemp-ni en divrec'h gwadek-se ?

"Bout a zo re hag er groey rak neret en deus bugale ar re ho poa prenet e 1532;
met ar rerall, ar gwir Vreizhiz n'o gwelot ket en ho kouelioù en hañv-mañ.

"Re a wad, re a zilelded a welamp staget douzhoc'h.

"Get un dorn e c'holc'her an arall, a lar ur c'hrennlavar ag hor bro; ama' gol-
c'het ho taouarn, Frañs, o tigoll hor bro ag ar gaou ac'h eus groeit hag
a ret bemdeiz douti ha goude ni welo. "

!*****!

! R A K me lar deoc'h, skuizh omp, skuizh !
! brein o klevet tud ha kevredigezhioù o tou- !
! iet, e galleg, e karant ar brezhoneg, hag !
! oc'h ober el a pa vehent o heuli e intermant !

! Loeiz HERRIEU.

! (Dihunamb, xi, (1932-33), 355)

! Kinniget ganeomp d'an tousegi, hag ivez da reoù all a oar yezh ar vro !
! hogen a gav furoc'h moulañ o c'helaouenn e galleg penn-da-benn war bouez ur ùhornadig.

M A R C ' H T R O I A .

gant Yann FELGER.

! MAR bez lakaet ar brezhoneg da yezh vroadel e Breizh a vo, diarvar eo !
 ! avat e chomo ar galleg, pell-ha-pell, yezh an niver brasañ, ha yezh a-berzh-stad e- !
 ! kichen ar brezhoneg. N'eus den da zislavarout an dra-se, ar pezh ne dalv ket kouls- !
 ! koude ma vefe evel Bro-Velgia pe Vro-Helvetia ur stad divyezhek rik-ha-rik. Ret eo !
 ! adal bremañ spisaat an traoù.

! BREIZH en he fezh a zo ur vroad geltiek anezhi, diskeltiekaet lod a- !
 ! nezhi, hogen na c'hello adkavout he c'hloker divoulc'h nemet goude ma vezo bet ad- !
 ! desket he yezh gant he fobl a-bezh. Ar galleg n'eo nemet un dro da c'hortoz, hag e !
 ! chom un arvar ma tleomp tremen hep ober gantañ bep gwech ma'z eus tu.

! ~~E-KENVER~~ se, hag ivez evit abegoù arboellerezhel hag embregerezhel e !
 ! vezo mat kemer ar saozneg rag-ecun ha war an hevelep pazenn hag ar galleg da yezh- !
 ! stad, e-kichen ar brezhoneg, yezh vroadel. Perak ?

! EVIT abegoù kadoniell (tactical), ar yezh saoznek a harpo ac'hanomp da !
 ! stourm a-enep ar galleg el lec'h m'en em ziskouezo re wan ar brezhoneg da zerc'hel !
 ! an dachenn e-unan-penn. El lec'h e c'hellomp tremen hep ar galleg ha na c'hellomp !
 ! ket c'hoazh ober gant ar brezhoneg, e c'hello ar saozneg bezañ implijet evit ar gwa- !
 ! shañ ! Netra n'hon eus da zoujañ diouzh ar saozneg; pep tra diouzh ar galleg.

! EVIT abegoù embregerezhel hag arboellerezhel e vezo ar stad vrezhon !
 ! troet war-du ar c'hornog, ar meurvor, "Europa ar Seizh" bremañ. Ul lodenn o kreskiñ !
 ! bepred eus he c'henwerzh a vezo graet gant Breizh-Veur. Kerkent ha ma reno adarre ar !
 ! Vrezhoned amzer-da-zont o bro, e c'hellimp arvestiñ ouzh krouidigezh ur Skol-Veur !
 ! keltiek e Breizh-Izel. E Roazon hag en Naoned, avat, en un amzer verr-tre, tost di- !
 ! ouzhtu, ar gelennerion c'hall a c'hello bezañ kemeret o flasoù gant kelennerion i- !
 ! verzonat, kembreat pe skosat, ar c'henteliou o vezañ roet e saozneg.

! PEP hini ac'hanomp, heuliet gantañ kenteliou er yezh-se pa ne ouie ket !
 ! kalz anezhi, a oar pegen aes e vo en em voazañ. Setu ar bennreolenn : lakaat ar gal- !
 ! leg da vezañ dirouet e spered an dud, hag e gwirionez. An deskadurezh uhel e Breizh, !
 ! el lec'h na c'hello ket bezañ ingalet e brezhoneg her bezo e saozneg. Ar reolennoù- !
 ! se a c'hello bezañ astennet diwezhatoc'h, met buan a-walc'h, d'an deskadurezh eil- !
 ! derez. Ar galleg a vezo kenteliet e Breizh-Uhel en derez kentañ a-unvan gant ar bre- !
 ! zhoneg. Keit na c'hello ket bezañ kavet kalvezourion vreizhat da gemer lec'h ar gal- !
 ! vezourion c'hall, e vezo galvet kalvezourion saozneger, Kelted eus an inizi pe Sao- !
 ! zon zoken, ar pezh a aotreo sevel e pep kêr a Vreizh kreizennoù sevenadurel a gevezo !
 ! gant kreizennoù gallekaet an hevelep kêrioù.

! ANNEZADEG vicherourion iverzonat niverus war ar maeziou didudet, ha, !
 ! dreist-holl er c'hendreviou a c'hellfe bezañ spletus ivez evit ar brezhoneg.

! DAOUST ha diskiant eo doare ar prederadennoù-mañ ?

! BEZ'ez eus traoù zo da spisaat, hag aesoc'h eo d'ur Breizhuhelad hen !
 ! ober, me gav din, eget d'ur paotr a Vreizh-Izel.

 UL LEVR DA LENN AKETUS : Ernesto Che GUEVARA, La guerra de guerrilla, La Habana, Kuba,
 1960. Troet eo bet e galleg nevez zo hag embannet e ti Maspero, 40, rue Saint-Séve-
 rin, Paris (5^e), 1962. Un dornlevr a-zivout lodenn arvellek ar brezel reverzhiel.
 Priz : 8,70 NF.

TEULIOU.UL LIZHER GWENEDEK A 1793.

! K/VET e vo amañ da heul skrid ul lizher bet kaset d' e vatezh o chom !
 ! e Muziliieg gant Fransez Guiot, bet person Ploueol arluet neuze é Bro-Spagn. Edkavet !
 ! hag eilskrivet eo bet evidomp gant hor c'henvreur gouiziek Marquer a Gestemberzh a dru- !
 ! garekaomp a galon laouen. Ur gelaouenn politikel eo ar Stourmer; ne gav ket deomp avat !
 ! e vo displijet hol lennerion gant al lizher-mañ a zo ken talvoudus evit ar yezhour hag !
 ! evit an tudoniour. Evel ma vo gwelet evitañ da vout ur "mavdoue" e chome denel a-walch !
 ! person Ploueol !

K/DV/N.-----
France

A citoyenne
 Citoyenne françoise Milles
 A Muzillac departement
 du morbihan district de la Roche-Ber-
 nard par Nantes poste restante
 à muzillac

VISCAYA
 14 mars 1793
 déboursé de Vannes

! Je suis toujours au même endroit, ma chère fille vous devez avoir reçu !
 ! de mes nouvelles, il y a quelques jours je n'ai rien aujourd'hui de nouveau à marquer !
 ! mais comme nous sommes menacé de sortir d'ici, je ne scáis quand ce sera je suis bien !
 ! aise de vous donner de mes nouvelles en ce moment et peut-être d'ici à longtemps. Cheleü- !
 ! et bermé querh hir ema en amzer goudé me mes quitet er vroh, me hea verh, me ne ouiant !
 ! quet pe gourz retourne, marse aben deux tri pe pear miss a vremen pe davantage, hanni ne !
 ! hoüer nameid doué, mes ne vern quet, mar ne mes er vonheur a retourne ur hüer me vou a- !
 ! tau joüus ha coutant a pe plegeou gued doué, me mes ur avis de rein deoh, èta enn armée !
 ! de commence, bet vou anquin ahio avait bloh en dut hag avait don mé, me hollou ahio. Cou- !
 ! achet mat atau en treu pare zou étre hou dorneu ha lared de mem brère obéer quement a- !
 ! veit ha douarin en treu capables devout douaret pé interet ha lared dere pare ou des un !
 ! drah benouach a vat avait ai hag avait on obeer miemb tra. bloh er Rouane an vou abimet. !
 ! Mar hou pehai guerhet er hoit bras ha menu, er fouin, er guin ha couachet mat me livreu, !
 ! hous houa mes mar qu tout en dra zé collet peh col ! Me mes oleüet en deli donet ur !
 ! blaï abar er parèse, lared atau den hanni en des en allüieus ag en ty en eu tra Doué cou- !
 ! achal bloh er haliceus nameid unan avait ou car ema ul ler ar hasou gueton peur ou veet !
 ! dehou. Lared d'en hanni en des ur bariquiade guin, Louer étal K/alieu d'en ivet, ne vou !
 ! quet re guir avat avaitou me diminueou dehou a brix guetou. Guel eu dehou pourfitein me !
 ! hourhiemeneu de bloh me amieu, quarent, amizion, fideles ha dut mat. miret ehouat en dut !
 ! ag er barèse a henteing er blaï, er bouiste abar a pehani me freu a même matiere el me !
 ! loyeux er en douar ha el licin en coffreus ha treu avat tout en douar. Me mes queh ahio !
 ! devout chomet ama, me vehay muy necessere er vroh hont, mes ehon ama ha me vou marse bet !
 ! guers a amzer. mes me trugareca bande en Etru doué. Mar Guïader Coq en des guét me gu- !
 ! iade me garche en dout hy ama, mais ema ur chonje, fal dein larein deoh er guerhein pe !
 ! couachal ermat mar collan bloh me lieneu avat me er havou guet plegeadur, me rochedeu a !
 ! zou guensin a zou rah foredet. mar retournan er vroh me bout obeer ha argant. Car me !

dispeign ahio ama hour obeer chervat. Ne talquet er guin, er bara mat, er heich na mat ! na fal, marahué lahet ha deibret er memes dé. Mar houe hui tenet hou pear huiguin es-couët houé atau greet mat, car n'hon-quet er vroh, mar gau me vou quite guenech aveit er bleyeus passet, mar ne me chet er vonheur hont me vou atau quite guenech. er guiader ! ne vou quet marteze fidel, ne deli quet larein nitra de neuin a pe vou gréet. mal vehai, er guerhein Kacher en argant petrement er hasein pel doh er vorh. Terneusin a ra sans doute soudardet ahio dre er barese muy a surete vehai kassein en treu tremaha Peaule pe ! Limerhel. bloh er parese a vou goash hag en dra zé. mes er guellan a vou marse de confient tout en providence den neutru doué salvet tout hous ineaneu. Chetui petra me goulein bandé guet on salver aveit on hag aveit oh bloh. me pede doué bandé aveit tout en dut hag er barese ha iehet mat. Ne me chet gouhiet mar qu terminet er huerh a me treu unan arnuguen de fevrier les tems sont ici très mauvais par les pluies presque continues. tous se portent assez bien et moi de même nos voisins et voisines sont en pareil état. Le chagrin en gagne beaucoup la misère où sont réduits plusieurs, l'incertitude de savoir quand ils seront soulagé les désole. Le tems me presse dans le moment à cause de l'heure de la poste

NOTENNOÛ

-- E-barzh ar gazetenn sizhuniek c'hall Minute (03:08:62), e kaved ul ludresadenn plijus a-walc'h gant an talbenn-mañ : "Touristed, gweladennit Bro-C'Hall hag he rannvroioù digevredus". Bez'e c'helled gwelout an Hegzagon sakr, nemet e oa eil-troet "Breizh dieub" war-du Paris o tiskouez he dent hag un teod binimus skeudennet gant trolinennoù ar Finistère (ni zo nec'het a-walc'h evit treiñ ar ger-se ijinet gant ar C'Hallaoued hag a yelo da get ganto, spi hon eus d'an nebeutañ !).

-- Plijet omp bet gant film diwezhañ Eddie Constantine, ar penn-broc'h e kartoñs, "Bonne chance Charlie", neket en abeg d'ar film e-unan hag a zo ken diot hag ar re all, met peogwir e c'heller klevout ouzh dibenn ar fiñvskeudennoù kanenn Horst Wessel; a-durall, ar Yuzevion o deus savet ar film n'o deus ket disoñjet reiñ da anaout d'an arvesterion ez omp miliadoù ha miliadoù strewet dre ar bed na c'hellint ket bout dizarmet gant an darvoudoù, er c'ontrol, rak paotred yaouank a zo kavet e pep lec'h hag a gompren mui-oc'h-mui ez int bet touellet gant an "demokrated" : dont a reont davedomp ! peogwir n'eus nemedomp a hell reiñ ur ster d'o buhez.

-- Barnet eo bet hor c'hile Colin Jordan hag e geneilod ha kondaonet da eizh miziad toull-bac'h evit bezañ savet an organadur damsoudard "Spearhead", bet savet evit stourm ouzh levezon ar Yuzevion e Breizh-Veur. Didamallet e oa bet ur weizh kentañ gant uhelañ lez-varn London pezh a lakaas Sionisted ar gelaouenn c'hallek (ha yuzev) La Terre Retrouvée da gunujemiñ ar Barnour Seaton en doa graet "ostizidi" eus ar Yuzevion o vevañ e Breizh-Veur : d'hor meno, kourtez meurbet e oa an anv-se, ha ne gomprenomp ket perak e voe ken fuloret tud a fell dezho bout Israelidi; nemet e rankfemp kompren e fell da vibion Yakoub kaout e pep bro dreistwir an div vroadelezh.

-- Lennet hon eus ivez e Nn. ar 15/06/62 eus La Terre Retrouvée ur pennad pilpous ha sadek war marv Adolf Eichmann. An holl a oar hiziv ez eo bet "barnet" Eichmann gant skoazell ur prokolor a zo bet arestet abaoe ha kondaonet eñ e-unan gant e vreur peogwir n'en doa testenn-reizh ebet ! Diaes e ve kavout ur brouenn anatoc'h eus an dispriz a zoug ar Yuzevion d'ar c'hGoyim. Lavaromp ivez e voe krougadenn Eichmann ken euzhus ha drouklazh Degueldre : aozet e oa bet ar fun en doare ma padas hiroc'h eget un eurvezh an abadenn. He feurheñvel outi hec'h unan eo ar bobl dibabet, abaoe al lazha-degoù a leugn an Testamant Kozh betek an abuzer kozh Ben Gourion ar marlonk gant e zaout lagad ken kuñv ha ma c'helljed soñjal ez int re un den, war bouez nebeut !

-- Bez'ez eus bremañ o chom e Paris tost da gant mil Yuzev bet "rapatriés" (o mammvro eo, keta ?) eus alJezair; badezet int bet "treid-du" eveljust. Selaouit ! hon eskeb, ha roit dezhe ur gwenneg, mar plij : Yahweh er restaolo deoc'h !

M. J.

 UR SELL OUZH BRO-SPAGN FRANCO.

gant Jon MIRANDE (Euskadi)

! SOUEZHUS eo gwelout tud zo, hag i kenelwerinelourion wirion, sellout !
 ! ouzh Bro-Spagn Franco gant kengarantez : ur seurt spagngarouriezh a hell bezañ kompre- !
 ! net pa zeu digant mirourion ha kilstourmerion an tu-dehoù klasel en em ziskouez er che- !
 ! laouennoù gall Rivarol pe Aspect de la France, da skouer; diaes eo, avat, meizout pe- !
 ! naos e c'hell diwanañ e speredoù kenelwerinelat kenlabourerion ur gelaouenn europat e- !
 ! vel L'Europe Réelle a fell dezhi adsevel un Europa genelaouek.

! PETRA eo Bro-Spagn a-vremañ ? Ar vro nemeti en Europa -- gant Republik !
 ! ar C'Hallaoued, eveljust, hag hi jakobinat betek ar mel, zoken e-touez ar Frañsizion-se !
 ! a glemm bezañ direpublikat ! -- m'emañ an dianavañ sellad kenelel ha gouennel ar vuhez !
 ! a zifennomp. Ar vro zoken m'emañ ar muiañ mac'hagnet gant ar pennadurezhiou, ha neket !
 ! hepken gant pennadurezhiou ofisiel ar "penngadour-meur", hogen ivez e-touez diskibion !
 ! wirion Primo de Rivera, a oa, eñ e-un, da gentañ-penn, ur broadelour spagnat kentralour !
 ! na petra bennak e ve ar gengarantez a zougomp dezhañ ha d'e venoziaoù.

! MET, evel na heller ket komz eus ur Frañs, pa seller ouzh ar genel evel !
 ! diazez ur vro, n'eus ket a Vro-Spagn kennebeut. Gwezhall e oa Spagnou, unanet dindan !
 ! ar gevun vazh-roue da heul aloubadegoù pe vrizhverzhaj, hogen ma chome da bep heni ane- !
 ! zho hec'h heniennelezh kenelel, he broadelezh hag he gwirioù ha ken diforc'h an eil ouzh !
 ! heben m'emañ en wir kenetrezo e-barzh Frañs, Breizhiz, Okitaniz, Norzhmaniz, Elzasiz, !
 ! Flandreziz, Euskiz ha Gallaoued, pe e-barzh Europa, Germaniz, Chec'hiz, Magiariz pe I- !
 ! taliz. Ar c'henelou-se, sujet d'ar Riez spagnat, a glaskas ivez, abaoe dibenn an XIXvet !
 ! adkavout o reized pe o emrenerezh, sevenadurel d'an nebeutañ. Naturel kenañ e oa en a- !
 ! beg da greizennegezh nevez Bro-Spagn (dindan levezon ar Frañsizion) a gase anezho da get !
 ! abretoc'h pe ziwezatoc'h. Heñvel e oa ouzh stourm Iverzoniz ha Suomiz, heñvel ivez, da- !
 ! oust da gav da vroadelourion Vro-C'Hall, ouzh stourm Breizhiz. Enebiñ a rejont ouzh ar !
 ! rouanez diwezhañ, ouzh diktatorelezh Primo de Rivera, ouzh ar Republik, hag enebañ a re- !
 ! ont bremañ ouzh Franco. Trec'het e voent gant hemañ ha neuze mac'hagnet hag heskinet !
 ! gentañ ken garv hag Iverzoniz gant Bro-Saoz pe Vreizhiz gant Bro-C'Hall da vare al "Li- !
 ! berasion". Merkomp diouzhtu ez eo an europeatañ pobloù eus ar Riez spagnat a zo gwasket !
 ! gant homañ bremañ : Euskadi, henañ kenel ar C'Hornogved, Galizia geltat, Katalunia la- !
 ! tinat ha gotat. N'eus nemet ar re nebeutañ europat, diskennidi Mozarabed alAndalous hag !
 ! ar C'Hreisteiz a c'honez un dra bennak en unanerezh-se : ret eo d'ar Sterenn atlantel !
 ! pe greizdouarel dilezel evito he gladou danvezel, bet gonezet dre hec'h ijinerezh hag !
 ! he c'henwerzh, tra m'emañ o kelliñ he madoù sevenadurel, yezh, diveotiad (kultur), le- !
 ! zennoù, hengounioù he gwir heniennel, ha se dre youll ar Riez vac'homer.

! EUSK/AT on; tamallet e vo din marteze bout diwirion e-keñver Bro-Spagn !
 ! ha diseblant e-keñver he meurbed. Gwir eo; n'on ket douget da vezañ madelezhus betek re !
 ! e-keñver tudou evel ur penngadour frankour a c'hrataas, e-doug "kroaziadeg" ar frankou- !
 ! rion, hag en anv hor mamm santel an Iliz, hor Salver Jezuz Krist, e vamm nevet hag an !
 ! holl sent, emichañs, kinnig da bep heni eus e soudarded vaorat ur plac'h euskat e-giz !
 ! sklavez; e-keñver ur Riez a wash va yezh, neket a-guzh hepken evel e prantad ar rouanez !
 ! pe ar Republik, hogen a-wel d'an holl, mar deo gwir e talvezas, da skouer, da nep tor- !
 ! fedour bennak a oa dezhañ an hardisegezh dichek a gomz euskeg, ur bazhataerezh hag un !
 ! dell-gastiz. Gouest on, evelato, da estlammiñ, evel n'eus forzh piv, dirak ur Vro-Spagn !
 ! a c'hanas don Pelayo, ar roue Alfonso, Fernando Gonzalez; dirak hen Spania ar C'Hoted, !
 ! Latined, Gwaskoniz, Keltibered, dezhi ur c'halvedigezh europat hag he diskouezas war an !
 ! aervaoù hengounel ma stourmas ouzh Afrika hag a glaskas diwriziennañ war he glenn ar se- !
 ! mitegezh bet ebarzhet enni gant an Arabed hag ar Yuzevion.

! M/RV eo ar Spania-se, dres evel m'eo marv hen Frañs ar C'Halianed hag !
 ! ar Franked; ar pezh a zo deut en he lec'h a zo ur Riez kreizenner, brizhvrogarour,

! mac'hagner, distrujer ar c'haneloù europat. Spi am eus e c'hello deiz pe zeiz Spagniz !
! wirion -- evel ar C'Hallaoued wirion --, neket an hironed arabat ha berberat, dont da !
! en em genstagañ d'hon Europa genelaouek. Met, kent din krediñ e lealded o menoz e vo !
! dav din, da gentañ, o gwelout reiñ o reizid d'ar c'haneloù europat all, Euskiz, Galiziz !
! Kataluniz, a waskont bremañ, evel ma ranko ar C'Hallaoued dieubiñ Breizhiz hag ar c'he- !
! neloù all a zo en o dalc'h.

! ENGORTOZ eus an deiz nevet-se, petra an diaoul a hellfemp-ni estlammiñ !
! dirazañ er vro vrizhfaskour-se, keneve ar paella hag ar cante jondo ? Ar gloerelezh -- !
! hag ar c'hloerrenerezh -- ar strishañ hag emc'hrauseñ, o kammoberiata neket war dachenn !
! ar riezrenerezh hepken, hogen dreist-holl war dachenn ar sevenadur (pezh n'eo ket kavet !
! -- trugarez d'an doueou -- ha na voe kavet biskoazh e Bro-C'Hall, zoken dindan veli ar !
! rouanez kristen-tre), ar gevalaouriezh (kapitalouriezh) emgarelañ ha dieunañ a ve en !
! Europa : setu kaout-ha-dleout an Emsav Broadel war lerc'h c'hwec'h vloaz warn-ugent !

! KEUZ am eus bezañ gwelet va c'henvroidi dont da vezañ, evit abegoù ka- !
! doniel, eilerion ar re Ruz o doa kinniget dezho ur reuzeudik a emrenerezh pa darzhas ar !
! brezel enbarzhel, tra ma vije bet gwelloc'h stourm ouzh nep Spagnad bennak evit reizid !
! Euskadi. Hogen, kompren a ran ar re en em gannas a-du gant ar gleizourion, na pegen gwa- !
! dek e voe o brezeliañ, hag ez aotreañ dezho perzhioù skañvaus-tre peogwir e tiouganent !
! e tiwanfe diouzh kroaziadeg ar frankourion buz an eskeb, ar goronaled hag ar vourc'hi- !
! zion varlonk a hellomp gwelout bremañ e zichegezh.

! H/L PETRA a chom eus hen enepsemitagezh ar rouanez katolik hiziv an deiz !
! m'emañ un diskennad eus ar varaned deut da vezañ adrenour ar rouantelezh ? N'eo ket e- !
! vit mann ha netra ma tiskoueze dezhañ e anaoudegezh-vat Kendalc'h Hollvedel ar Yuzevion !
! evit ar gwarez a roas d'ar Yuzevion e-pad ar brezel (Résolutions de la Conférence extra- !
! ordinaire du Congrès Juif Mondial, miz du 1944, Atlantic City, p. 9). Me gav din e ka- !
! ver amañ an diskleriadenn wellañ eus abegoù bratellerezh ar penngadour-meur e-keñver !
! Germania a voe ken drouk evit homañ, hag ivez ar c'houzañvusted hegarat a ziskouez an !
! drec'hourion yuzevdemokratek evit e ziktatorelezh, tra ma strivjont ken garv evit dis- !
! truj oberenn Hitler ha Mussolini.

! TIZHOUT a reas Bro-Spagn Franco distruj ar voutinegezh soviedat er vro, !
! eme an-unan, ha neuze e ve ret deomp sellout outi evel ur gengevredadez hag ur c'hoar !
! Evidon-me, e nac'han krenn e ve ret strishaat d'an enepvoutinelouriezh hor sellad ke- !
! nelwerinelat europat. Pe anez e kemerfen da bennskouer Riez ar Vaticano ! A-du all, pe- !
! tra eo enepvoutinelouriezh Franco hag e gendorfedourion ma n'eo ket spont divent an !
! dudjentil spagnat dirak kollidigezh o dreistwiriou ? Ha petra eo diazez o c'heleñn ma !
! n'eo ket difennerezh ur gatologiezh ken strizhsperedet ha diamzeriet ?

! N'EO ket gwirion ouzhpenn peogwir e huche pennadurezhioù ar groaziadeg !
! vroadel : "Antes España roja que España rota !" (Kentoc'h Bro-Spagn ruz eget Bro-Spagn !
! torret); n'eo ket efedus kennebeut, rak, pa grogas ar groaziadeg euzhus-mañ n'edoa bou- !
! tinelour ebet e Bro-Spagn e-touez ar werin, koulz lavarout, tra m'emaint bremañ ken ni- !
! verus all e-touez an arluidi hag e-touez ar werin o chemel e Bro-Spagn hag a c'hortoz !
! goanagleun dieubiezh ha bleuñvidigezh digant ar varksouriezh.

! GOÛT a ouzomp n'emañ ket ar gwir ganti. Digarezioù mat a zo dezhi, !
! avat...

K E L A O U E N N O Û

- ! -- THE BUGLER, kelaouenn vizek British National Youth (Brendan WILLMER, 26 Barby Rd, !
! SYSTON, Leicestershire (Bro-Saoz); Arthur SMITH, 141, George Street, !
! GLASGOW (Bro-Skos).).
- ! -- KAMPSTANDRTEN, kelaouenn vizek Runebevægelsen (Wagner CHRISTENSEN, Tjornegade 11, !
! København/N. Danmark).
- ! -- FOLK OG LING, kelaouenn vizek kevramm norgiat Nordiska Rikspartiet (H.N. PÅSCHE, !
! Langhellesvej 13, Bodö, Norgia.).

A N E I L E R V E N N

gant A. Le BRAZ ha B. Le BIHAN.

Du moment qu'on abandonne le problème idéologique pour se lancer dans l'action, on ne peut plus rester politiquement neutre.

Morvan DUHAMEL, 1931, Ar Vro, 5, 12.

EMAN an traoù o kemmañ e Breizh; a-wel d'an holl, a-wel da renourion Vro-C'Hall, da gentañ penn, ez eus "ur gudenn e Breizh". Echu eo ar prantad ma rankemp huchal a bouez hor penn evit ma vo anavezet gant un dornadig tud. Kement-se hol laka da atersiñ : daoust hag eñ e c'hellomp kenderc'hel gant an hent hon eus heuliet betek amañ, pe, daoust hag eñ ne rankfemp ket boulc'hañ un ervenn nevez, ken e-keñver diazezennoù hon emgann, ken e-keñver an hentenoù a raimp gante ?

I

BUGELEGEZH RIEZRENEREZHEL VREIZH

A-RAOK kinnig un hentenn nevez da genel Vreizh eo dav deomp sellout pishoc'h ouzh ar stad m'emañ bremañ hor gwerin hag ouzh an doare m'emañ urzhiet ar stourm evit ar vro.

DISEBLANT e chom c'hoazh gwerin Vreizh e-keñver kudennoù riezrenerezhel (politikel) ar vro. Setu an anadurezh kentañ. Gwelet hon eus nevez zo ur bern tud darev d'en em vodañ evit difenn o gwirioù, pe gentoc'h evit difenn gwirioù zo, divizet mat ha strizh o zachem. Heuliet o deus alioù pennoù o c'hevredigezhioù evit gonit diwar goust riezrenerezh (gouarnamant) ar C'Hallaoued ul lezenn eeunoc'h a-benn ma tougatafent gwelloc'h marc'had o frouezh dre an hent-houarn. Rouez eo bet, avat, ar re anezhe o em savas en abeg d'o breizhadelezh; peurliesañ o em gannzont ouzh ar riezrenerezh gall evel Gall laoued a vizie bet nac'het oute ar gwir a vez roet da bep Gall all da vevañ eürus, ar gwir aotreet da bep Gall da vezañ kevatal ouzh nep Gall all. Komzet ez eus bet eus "kudenn Vreizh" gant pennadurezhioù ar C'Hallaoued o-unan; arabat e ve deomp hon em douellañ gant impleiz ar gerioù-se; ur ster douaroniel o deus peurliesañ evit ar pennadurezhioù-se; ur ster douaroniel o deus, dreist-holl, evit hogoziñ an holl Vrezhoned, ha neket ur ster keneloniel pe dudoniel. Berroc'h eo eget lavarout "kudenn pemp (pe bevar!) departamant kornog ar venezieg arvorikat", netra ken (nos départements ouestons ! na petra 'ta). Hag en aner eo bet graet an emsavioù-se ? Tamm ebet, rak a-feur ma vez re d'hor gwerin hec'h em sevel evit gonit un tamm bennak eus he gwirioù -- ha beweizh, emañ-hi o welout e chom hec'h unan penn a-dal d'ar C'Hallaoued all --, e teu da vezañ ne hello bezañ dirouestlet he c'hudennoù nemet ganti hepken hag ez eus anezhi ur werin a-ziouti hec'h unan, muioc'h eget ur werin, un dud wirion, ha seul welloc'h er reizh eus e Breizh, hag e Breizh hepken, kevredigezhioù all o c'houl un dra bennak evit ar vro, ur ger na reer ket gantañ evit envel "la Touraine" pe "la Champagne"...

BEZ'EZ EUS da gentañ an "emsav sevenadurel", ger diresis meurbet a ya eus an "tutu-pañ-pañ" furlukinokañ, a dremen dre gorollerion ha sonerion Gendalc'h betek ar re a bled a-zevri kaer war ar yezh, ouzh he doueelaat hag oc'h ankounac'haat di-boell a-walc'h n'end eo ken ur benveg, hor benveg anienel evit daremprediñ ar bed hag hon amva, met tamm ebet ur pal emni hec'h-unan. Kentañ tra a heller merzout amañ eo stambouc'h amgevatal an emsav sevenadurel e-keñver an emsaviù breizhat all, ken evit niver e bleustrerion, ha ken evit o dreistelezh. Pezh a zo mantrusoc'h eo gwelout pacted eus an dibab strishaet o sellad ouzh ar sevenadurel nemetken, oc'h ober anezhañ un diwez a gav e walc'h ennañ e-un. Frouezh ar c'hamvenoz-mañ a welomp bemdeiz pa glas-komp muzulisañ levezon wirion ar c'helc'hioù hag hor c'helaouennoù sevenadurel war emar-

vez (Sz. behavior) ha tonkad hor gwerin. Dister eo levezon riezrenerezhel Kendalc'h pa soñjer er pezh a zo bet graet gant Jeugbeweging Flandreziz a ro al lañs d'ar stourm evit flandrezekadur Belgia. E don donañ ene renerion an emsav sevenadurel glan e vev ar spont, ur spont raze o-un ha rak o gwerin; paotred diamzeriet int re alies bet chomet sanket enne warlerc'hiadoù mougadeg 1944; aon o deus rak komz eeun ouzh an dud ha lavarout uhel o soñj. Gwir diskennidi ar rannvroelerion int, o c'hen youlek-mat, hag ivez, siwazh, o c'hen diefedus. Daoust hag e ve ret, a du arall, degas da goun amañ dael di-boell ar skrituriou ez eus bet dispignet en abeg dezhi kement a amzer, a nerzh hag a baper gant ar re wellañ o dizie, padal, gallet sevel al labouriou a bouez a ra ken diouer deomp hiziv an deiz ? An emsav sevenadurel, avat, a zo ur vammenn hag ur gouestl a vleuñvidigezh evit an dazont peogwir e verv amañ peurliesañ ur spered breizhat, breizhek zoken a-weizhiou : un dourenn-c'honit (Sz. culture fluid) eo ma stummer enni ar sternataerion hor bo ezhomm anezhe warc'hoazh evit hor stourm riezrenerezhel.

AN EMSAVIOU riezrenerezhel a heller, dre vras, rannañ e tri rummad : ar CELIB, ar MOB, hag unan all a raimp "Breizh Atao" anezhañ.

EVIT GWIR, n'end eo ket ar CELIB ur strollad riezrenerezhel : e anv a vevenn sklaer a-walc'h e stourmva : poellgor-studiañ hag -eren glad ar Vrezhoned. Pep ger, amañ, a zlefe en devout e dalvoudegezh leun. Sellomp a-dostoc'h evelato. Ur poellgor eo, lese ur bagadig tud bodet en ur gevredigezh bennak evit poellat, ur brain trust, ha sed eo ar CELIB; n'end eo ket graet evit an holl, evit ar re nemete ez eus enne danvez trevnourion (Kb. trefnwr, Sz. manager). Pouezus-dreist eo ar CELIB er feur-se, peogwir e ro tu da re zo da emellout e renerezh ha mererezh ar vro; anezhañ e tiwanas tud a vezo warc'hoazh ar sternataerion hag an drevnourion wirion p'hor bo tizhet hor reized. Studiañ a reer e-barzh ar CELIB, ha n'end eo ket diwir lavarout ez eus gant lizherenn E ar gevredigezh-se ul lañs-pouez war ar re all : aozet he deus raktresoù ha studiadennoù, niverus, anavezet gant an holl re gret evel ar re wellañ bet savet betek amañ e Breizh. Eren a rankfe ivez. Amañ, avat, e kav deomp he deus c'hwitet un tamm mat. Un ere eo, evit gwir, etre riezrenerezh ar C'Hallaoued hag ar Vrezhoned, pe gentoc'h, an dudjentil (Sz. notables) vrezhon. Petra a zo bet graet, avat, evit degas ar vicherourion, ar gouerion, ar besketaerion, d'o em unaniñ, evel Breizhiz, evit difenn o glad ? E-barzh ar CELIB ne vez kavet, koulouz lavarout, nemet pennadurezhioù an ijinerezh, juloded pe dieion; dilezet eo bet, war bouez nebeut, ar c'hwelgeveladourion (sindikadourion) ha neuze e pado hir a-walc'h, war a hañval, levezon distrujus c'hwelgeveladoù ar C'Hallaoued (CGT, FO, CFTC, CGC, ...). Ur breutaer eo bet ar CELIB, helavar zoken; harpet en deus ar c'hwelgeveladourion, hogen ne reas ken o heuliañ ha neket digeriñ an hent diraze. En abeg da se e voe dister a-walc'h e bouez war ar werin. /r glad ma pled gantañ a zo, siwazh, strishaet d'ar glad arboellerezhel, o peurzilezel ar glad kevredadel evel hon eus lavaret, hogen ivez, o chom hep prederiañ a-walc'h, d'hor meno, war ar gladoù kellidel (Sz. financial) pe sevenadurel : biskoazh betek amañ n'end eo deut da soñj ar gelibourion sevel ur studiadenn e brezhoneg, hag un arouez eo n'end eo ket ret, a gav deomp, hirbrederiañ diwar he fenn ! Graet e ve, en diwez, evit glad ar Vrezhoned. Peseurt Breiz pa vez spazhet eus he frouezhusañ, he finvidikañ, hec'h ijinerezhelañ pempvedenn ? Biken ne hellimp digarezhiñ ar barad euzhus-mañ a zarbar en hor bro un uladegezh gant he heuliad a zaeloù, a vrezelioù hag a zismantroù. Daoust hag e fell d'ar boellgoridi-se hadañ ennomp ar gonnar hag hol lakaat, war lerc'h hon dieubiezh, da ren ur brezel enbarzhel ken gwadek hag heni Iverzon ? Na lavaro den e voe graet evit derc'hel muioc'h a efedusted en darempredoù gant ar riezrenerezh gall : nevez zo hon eus gwelet pennadurezhioù ar C'Hallaoued komz eus "pemp departamant Breizh", hogen ar Pleven, eñ, en deus respontet war don "pevar de-artamant Breizh". Kilet o dizie ar C'Hallaoued war ar poent se dres evel ma'z int deut boas da gilañ war bep dachenn all, gant ma vizie chomet un tammig a vri hag a haelled e kalon ar Pleven hag e genseurted. I eo, ha neket ar C'Hallaoued o deus dasorc'het Breizh velostek, "idéale" e-giz ma leveront en o galleg flour.

DAOUST dezhañ mennat bout un emsav ha neket ur strollad, ez eus gant ar MOB holl sioù fall ar strolladoù riezrenerezhel, hep ma ve dezhañ o c'helennadurezh eun nag o efedusted. Heñvel ouzh ar CELIB, emañ ar MOB o vodañ, da gentañ penn, bourc'hiziou, ledanoc'h o engouestlva eget heni ar CELIB, avat, lese, kannaded, kuzulierion

! veur, maerioù, kuzulierion-geoded, breutaerion, noterion, kelennerion, tieion, h.a.. !
 ! Ouzhpenn ar re-se e kaver amañ ur bern tud yaouank, studierion dreist-holl, hogen miche-
 ! rourion, kouerion hag implijidi ivez, heuget peurliesañ gant al "labour" a vez roet de-
 ! zhe da ober -- pe da chom hep ober ! -- gant pennadurezhioù enorus ar MOB, hogen a chom!
 ! ennañ peogwir, "n'eus tra all ebet". Digevatal a-walc'h eo ar MOB : un emsav eo, na pe-
 ! tra 'ta ! hag arabat feukañ den ! Arabat dreist-holl, feukañ ar re wakañ, ar virourion
 ! amibennek, na fell ket dezhe mont pelloc'h eget ur rannvroelerezh seven ha fur, parchus!
 ! eme Gembreiz. Beweizh enta ma vo kinniget div ziskoulmadenn d'ur gudenn resis, an eil
 ! hervez ster ar vro hag heben hervez ster ar "vammegvro", anat eo e vo dibabet homañ, rak
 ! "arabat feukañ", ma zud ker ! Hogen, daoust hag o em c'houlenn oute o-un pennadurezhioù!
 ! an Eub ha n'end eo ket feuket int-i ivez ar vroadelourion dianket e-touesk ar stourme-
 ! rion eus an oristal a emsav-se, pe gentoc'h ha resisoc'h, ar vroadelourion daonet-mañ
 ! a zo oc'h ober holl stourmerion gwitibunan ar MOB ? Daoust d'ar pezh a vez embannet,
 ! n'end eo ket neptu ar MOB war dachenn ar c'hostezioù politikel : troet eo davet an tu
 ! dehoù, en abeg d'ar vourc'hizion a zo ouzh e benn ; dehaouel eo e zilenoù riezrenou-
 ! riel, arboellouriel, kevredadouriel : a-du emañ gant ar frankizouriezh war an holl da-
 ! chennoù-se ha tost-tre, enta, ouzh andibennourion Vro-C'Hall. Enraokadouriel eo avat e
 ! sell ouzh e gelennadurezh kevredelouriel ha levezonet gant Proudhon pa bouez war gwirioù
 ! ar c'heodedoù, da skouer. Arabat e ve disoñjal, neoazh, n'end eo ket ken ur spontailh
 ! ar gwerinelour kozh evit an dehaouidi ha pegen arc'hdehaouel hag O/Sgarour eo "federa-
 ! lourion" straed Auber Paris a fell dezhe ivez bout diskennidi ha diskibion wirion Prou-
 ! dhon, gant ma kav dezhe e c'hellint evel-henn stourm aesoc'h ouzh ar varksouriezh en ur
 ! ober van bout "kleizidik" ! Spi hon eus bezañ chomet hep bout re griz na diwirion e-keñ-
 ! ver ar MOB. Rebechoù hon eus graet outañ, rak ur goanag bras en doa lakaet enomp pa voe
 ! savet. Manet omp war hor c'hoant un tammig. Hogen reizh eo lavarout e voe bet graet ul
 ! labour efedus gantañ. Da gantañ en deus troet kalz a dudjentil da sellout ouzh Breizh
 ! evel o bro; d'an eil, ha n'end eo ket an nebeutañ pouezus, eo deut gantañ gwerin Vreizh
 ! da sellout gant nebeutoc'h a zisfiziañs ouzh ar gevredadouriezh ha da gregiñ da gompren!
 ! e c'hellent ober Brezhoned anezhe o-unan hep bout tud fallakr dellezek da vezañ krouget;
 ! En diwez, ar C'Hallaoued o deus aon razañ hag o deus roet deomp meur a dra n'o dizie ket
 ! aotreet pa ne ve bet ar MOB.

! CHOM a ra deomp bremañ da sellout ouzh ar re hon eus graet "Breizh Atao"
 ! anezhe. Arabat e ve reiñ ur ster re spis d'ar gerioù-se hon eus graet gante hepken evit
 ! eeunaat an traoù : n'eus ket a strollad, a-wel d'an holl d'an nebeutañ, a ve anvet evel-
 ! henn bremañ, hogen ar gerioù-se karget don a eñvor, a zo ar boutinelañ re e-touesk hor
 ! gwerin evit envel an "otonomisted", lese, e spered an dud, ar re fallakr-se, diseven a-
 ! walc'h evit embann divezh n'end int ket gall evit ur blank hag e fell dezhe sevel Breizh
 ! ouzh renk ar broioù all, lese, krouiñ ur riez vrezhon unanet war rampo gant riezoù all
 ! Europa, dezhi an holl wirioù grataet d'ar re all, emrenerezh ar Riez, luoz, kellidoù
 ! (Sz. Treasury), kannadouriezh, kement ha ma ve dereat ouzh urzherezh kevredadel Europa.
 ! Ar savboent-mañ a gaver bremañ gant kenlabourerion ar Stourmer, evel just, e-giz dia-
 ! zezenn d'hor c'hredenn vroadel, hogen ivez gant kenlabourerion zo eus Ar Vro, Preder,
 ! Barr-Heol, Sturier, alies a-walc'h, ha mui pe vaez, betek e-barzh L'Avenir zoken, be-
 ! weizh n'end eo ket raklennet ar gelaouenn-se gant he renerion, ha dreist-holl er penna-
 ! doù brezhonek o vezañ n'eus, a hañval, skrivagner ofisiel ebet eus ar gelaouenn-se a
 ! ve gouest da rannañ grik en hor yezh... E-touesk paotred "Vreizh Atao" e kaver tud
 ! "kozh", doare an "digadourion" gante re alies, siwazh, o randonachiñ kenetreze kuriou
 ! hep o far Shayaned ar Bezen... N'end eo ket amañ e vo droukkomzet diwar-benn ar re a-
 ! c'hanomp bet briek ha kadarn a-walc'h evit dougen Kroaz Du Breizh war aervaoù ar bed-
 ! vrezel diwezhañ, pell ac'han. Hogen da get eo aet ur bed ha na zeuy biken en-dro; ar re!
 ! ac'hanomp a zo kenelwerinat er goar ken mat hag ar re all : ne fell ket deomp bout pao-
 ! tred hiraezhus oc'h adsevel un naziezh folklorel e-giz ma ra Gallaoued zo; kemer a fell
 ! deomp ar pezh a hañval deomp bout bevus en hitlerouriezh, netra ken. Mantrus eo gwelout!
 ! tud o deus stourmet evit Breizh, a zo bet ouzh penn an emsav pe ur gevran anezhañ, ka-
 ! vout o gwalc'h o randoneal gant kileion gozh pe o chom pell diouzh ar re a vev hag a
 ! stourm bremañ. Evit lod anezhe, marteze, ez eo efedusoc'h chom er skeud rak pep kasoni !
 ! n'end eo ket tavet c'hoazh; hogen dezhe e chom ur gefridi : aozañ hentoù strolladoù

! kuzh evit ur stourm ha na ve ket renet hervez lezenn evel ma vo gwelet izeloc'h. N'eus !
 ! ket a strollad "Breizh Atao" hon eus lavaret. Ne dalv ket avat ne vefe den ebet o ven- !
 ! nat sevel Breizh hervez an darlun-mañ; er c'hontrol : hogos an holl re yaouank emoues- !
 ! tlet e-barzh ar MOB a zo c'hoant dezhe ma ve savet un hevelep strollad, hag a beban ben- !
 ! nak e vizient deut d'an emsav breizhat. Brasoc'h eget na greder eo levezon Breizh Atao !
 ! ha Stur : hoalet eo ar re yaouank gant tonkad hor reourion (harozed) hag hon arluidi, !
 ! an aergelc'h a valc'hded hag a gadarnded a sav dioute : na pet heni a welomp o sevel !
 ! delwenoù e-barzh o c'halon da vMordrel, Guieysse, Debeauvais, Lainé ? o kevarc'hiñ !
 ! deol Brikler, Perrot, Vissault Coetlogon, Jasson, Laizet hag ar re all kouezhet war an !
 ! dachenn-emgann evit Breizh en anv ar gredenn roet dezhe gant Breizh Atao ha Stur ? Tra !
 ! n'eus nemet Yann Fouéré ha Poupinot a vefe degemeret da vat gante e-touesk pennadurezh- !
 ! ioù ar MOB. Aze emañ an dalc'h, avat. Romantel kenañ eo. Gaou e ve komz eus ur c'hwita- !
 ! denn a-zivout Strollad Broadel Breizh kentvrezel hag enbrezel, peogwir ne vizie Ken- !
 ! dalc'h na CELIB na MOB ebet pa ne ve bet paotred Vreizh Atao, pezh a zo disoñjet un tamm !
 ! mat betek re gant an aotrouion ken fur ha nevez. Met dileal e vefemp e-keñver hon dia- !
 ! raogerion mar ne vennfemp ken o marmouzañ. Diwir eo ivez lavarout pe lezel lavarout ez !
 ! oa gant re Vreizh Atao dispriz ar werin. A-weizhioù n'o deus ket tizhet hent he c'halon, !
 ! farioù o deus graet, anat eo, met n'end eo ket d'hor senedourion a-vremañ, chomet ken !
 ! dizoberiant gwezhall da leuskel mein ouzh ar re o deus graet un dra bennak, a zo aet be- !
 ! tek lakaat en arvar o buhez evit ar werin-se daoust pezh ken digar e voemp meizet ganti, !
 ! en abeg dreist-holl, ret eo el lavarout, d'ar bruderezh divent graet gant ar C'Hallaoued !
 ! ha, gwashoc'h c'hoazh, gant ar Frañskilhoned. Ur skouerenn : an holl a oar penaos e voe !
 ! Debeauvais gloazet garv gant ar roueelerion e S. Gwazeg e 1933, pezh na viras ket ur !
 ! Gwazegad a lavarout deomp nevez zo edoa Debeauvais e S. Gwazeg war bedenn ar roueelerion !
 ! hag a-enep d'ar bobl ! Ha setu an abeg kaer a roe evit nac'hañ B.A. ha tout an otono- !
 ! misted !

! ANV ar pennad-mañ a zo "bugelegezh riezrenerezhel Vreizh". Diabeg n'end !
 ! eo ket rak ar riezrenouriezh a rank plediñ gant traoù ar riezrenerezh ha n'end eo tamm !
 ! ebet kenster gant "politikerezh" ar C'Hallaoued. He c'hefridi eo renerezh ur genel, ha !
 ! gwelet hon eus n'eus bet strollad ebet betek amañ a vizie aet, nemet Breizh Atao araok !
 ! ha da vare 1940, betek soñjal n'end eo ket hepken e stourm ur "rannvro", met dreist-holl !
 ! e savidigezh ur Riez vrezhon hag en doareoù d'he gonit, ha n'eus heni en dizie tizhet !
 ! tolpad hor gwerin daoust da strivoù diniver ha dellezus meurbet.

! PERAK ar wallblanedenn-se ?

! II

! ABEGOÙ AR VUGELEGEZH RIEZRENEREZH

! MEUR a abeg ez eus, re anezhe kozh ha re all nevesoc'h, o deus miret hon !
 ! emsav breizhat a vout riezrenerezhel er ster leun a roomp d'ar ger-se. Ne vezo ket fall !
 ! marteze klask o gwelout gant ma c'hellimp da c'houde tennañ ur gentel kevadek anezhe.

! HEP monet re uhel en amzer hag en hanez e c'heller menegiñ pevar abeg !
 ! kozh a-walc'h evit ma vezo graet "henvammenoù" anezhe, hag o tiwanañ an eil diouzh e- !
 ! gile.

! DA GENTAN, e deroù an XIXvet kantved, ne oa galloudekted (Sz. potentia- !
 ! lity) ebet en hor bro a vizie bet gouest d'he lakaat da ober he mad eus ar reverzhi i- !
 ! jinerezhel kentañ : n'edoa ket e Breizh a-walc'h a houarn hag a c'hlaou evit ma voe !
 ! spleitus o zennañ diouzh hor glenn. Stradet e oa bet, a du arall, listri Breizh da heul !
 ! dispac'h ha brezeliou ar C'Hallaoued na hello den ebet sifrañ an digoll hag ar gwall e !
 ! voent evidomp betek an deiz a hiziv. Chemel a reas hor bro, enta, er-maez eus an arao- !
 ! kaat hag er paeañ a reomp bremañ.

! D'AN EIL, dre ne ziskouezemp ket bezañ gonidus evite, ne reas tra ebet !
 ! pennadurezhioù ar C'Hallaoued evit astenn talvoudegezh-ved Vreizh. Lezet e voe hor bro !
 ! er stad vantrus a anavezomp re vat : hent ledan ebet, hent-houarn kevadek ebet, ha da !

! c'houde tredanelaat mordoket, lese ez eo diaes spontus deomp bremañ ijinerezhelañ ar vro !
! a chom ken warlerc'hiet ha Portugal.

! C'HALL e c'hoarvezas d'hor c'heneel bezañ sellet outi evel nep kenel an !
! trevadennoù gall. Nebeutoc'h a dalvoudegezh hor boa eget morianed Afrika Zu, peogwir e !
! teuas d'hor re o devout nebeutoc'h a emouezoni (Sz. self-consciousness) vroadel eget an !
! debrerion-dud. Feal e chomas ar Vrezhoned d'o mistr, tra ne voe ket e welet zoken digant !
! sklaved an henamzervezh a gilhourze, d'an nebeutañ, ouzh o aotrounez pa veze ar re-mañ !
! re c'harv oute : bez'e c'helled kas ar Vrezhoned e-giz chatal d'ar voserez hep ma vizie !
! klevet klemm ebet digante : "Hiziv em eus bevezet dek mil Breizhad hag ar re all a gan !
! ar Varseilhez e-barzh al linenn-fezier kentañ" eme ur penngadour gall e-pad lazhadeg 14- !
! 18 hep bout krouget war an taol gant e zeñved. Gant ne hellent ket labourat evite o-un !
! e teuas ar Vrezhoned boas da labourat evit an estrenion ha se, pergen, dre ne oa dibabour !
! gwirion ebet d'hor c'haezh gwerin : ar re o dizie gallet he sternata a oa deut da C'Hall- !
! laoued i o-unan. Un anadenn a aralladur (Sz. alienation) a gejomp ganti amañ hag a bado !
! er dre vezo Bro-C'Hall ar "vammvro" evit lod muiañ hon tud. Kompren a reer perak e voe !
! degemeret ken fall paotred Breizh Atao : torfedourion disakr e oant a daole d'an diaz !
! an nevetañ idolenn, heni ar Mestr hag an Tad diuzet gant Urzh ar Bed evit ren war ar Vre- !
! zhonek adalek ribl ar stêr Seine.


! GALLEKAET e oa an dibabourion rak aesoc'h e oa dezhe kavout e Bro- !
! C'Hall ar boued speredel a rae diouer dezhe, koulz lavarout, en o bro. Sklêrijennus eo !
! er feur-se skouer hor barzh awenelañ en XIXvet kantvet, Hersarzh Kêrvarker, a savas Bar- !
! zhaz Breizh, gant doujañs evit e genel, erzerc'h eo, hogen evit reiñ da anaout d'ar !
! C'Hallaoued n'end eo ket e vro Breizh kevadek, met ur Breizh kollet e skeud don an am- !
! zeriou kent; ur vro vezet ha neket ur vro vezek, o vout, a daolenne. Pa darzhas e 1848 !
! emsaviou meur dieubiñ keneloù Europa, ne fiñvas ket hon heni. Piv en defe klemmet a-zi- !
! vout Breizh ? Daoust hag e klemmas Aljeriz pe Senegaled ? A-renk gante edoa hon tadoù !
! paneve un denjentil bennak kollet e-barzh e gastell pe ul lenneg oc'h huñvreal e Paris !
! klod Keltia dremenet.

! ABEGOU nevesoc'h d'hor bugalegezh riezrenerezhel a heller kavout en orin, !
! an emsav breizhat a vremañ. Diwanet eo eus Kevredigezh Vroadus markiz L'Estourbeillon, !
! lese ur gevredigezh dehaouel ha kloerel a reas kalz evit dihuniñ koun Breizh. Met ne di- !
! zhas ket ar werin evit gwir : aozañ a reas gouelioù "pobl", lese gouelioù evit ar werin, !
! neket eus ar werin. Mirourel e oa, roueourel zoken, ken na voe abred a-walc'h kavet re !
! warlerc'hiet gant bourc'hizion emouez evel Yann Choleau. Bez'e voe ivez Goursez an Drou- !
! ized : hanter-kant vloaz en a-raok ~~ez~~ dizie gallet ober berzh evel ma reas heni Gembre. !
! Deut e oa re ziwezat, ha daoust da oberiantiz Kaledvoulc'h ha re all ne oa ket evit de- !
! gas an dud da Breizh; re heñvel ouzh an termaji e veze, ivez, hervez ali arvesterion he !
! goursezioù digor ne oant ket evit kompren perak en em wiske ken drol tud speredek a hent !
! all. Dalc'homp soñj ivez e voe prezeget a-enep dezhi e-barzh an ilizoù gant aon rak "ne- !
! vez baganiezh", sañset, an drouized, pezh a voe nozas kenañ e Bro-Leon hag e Gorre Breiz !
! d'an nebeutañ. Liv ar gilstourmouriezh a zeuas abred enta war an emsav dreist-holl pa em, !
! droe ar "republikaned" davet Paris ha strolladoù radikal ha sokialour Paris.

! UN TROC'H a voe er speredoù hag en emzalc'h an dud brezel 1914-1918. !
! Galvet a vil vern e reter Bro-C'Hall e em gavas hor c'henvroidi gant tud a oa chomet es- !
! trenion evite betek eno. Brezeliañ a rezont gante, o hentiñ a rezont hag evit o darem- !
! prediñ aesoc'h e teskzont o yezh. Gant o yezh e tegemerzont ivez o menozioù politikel; !
! dont a rezont da anaout gwelloc'h ar sokialouriezh giz ar C'Hallaoued, ar varksouriezh !
! evit lod. E-pad pevar bloaz e voe garmet warnezhe ez oant Gallaoued, ha Gallaoued vat !
! na petra 'ta, peogwir, muic'h a wad eget ar re all o doa "roet" (!) egete evit difenn !
! "o" mammvro (Kentelius e ve gouzout peur e voe implijet ar gallekadur-se e brezhoneg e- !
! vit ar weizh kentañ). Digengreizenniñ a reas neuze an emsav broadel -- ha Breizh Atao !
! zoken en he deroù -- chomet mirourel hag ar werin digoroc'h d'ar bed nevez. Enebet e !
! voe ouzh azgoulennoù ar werin gant an "dibabourion", tudjentil, beleion, h.a., a oa ni- !
! verus a-walc'h en emsav breizhat. Ha daoust ma voe rebechet gante ouzh Breizh Atao be- !
! zañ a-du gant ar voutinelourion, dre ziouer a arc'hant evit ar bruderezh, e chomas e !
! spered an dud vunut ar c'hevataladur faos-mañ : Breizh Atao = kilstourmer.

NE VEZO ket ret hirbrederiañ war darvoudoù ar bedvrezel diwezhañ a zo a+
 navezet mat gant an holl. Lavaromp hepken ez eus bet graet e-doug ar pevar bloavezh-se
 ul labour divent evit brezhonekaat ha breizhataat hon tud. Kollet n'end eo ket bet al
 labour graet evel-henn daoust d'an disevended diskouezet hiziv gant ar re amibennel ouzh
 stourmerion an amzer diaes-hont, ken re an emsav sevenadurel evel an Ao. R. Hemon, ken
 re an emsav riezrenerezhel evel an Ao/Ao. Mordrel ha Glemarec, ken re al luoz evel an Ao.
 Henaff. Ur c'hwitadenn eo bet, trec'het ^{VOE} /nerzhioù Europa gant ar re unanet. Hogen petra a!
 rae neuze an damallerion a hiziv ? Rezistañserion e oant ? Perak ne rezont netra neuze
 evit lakaat o stourm da dalvezout evit o bro ? Kac'het eo ar "vreizhataoied" gant ar
 bobl, emeze. Perak n'o deus ket i, "ar re veniget gant ar bobl" sañset, degaset "o" fobl
 davet Breizh ? Diaes n'end eo ket, e-giz ma lavare Iverzoniz gwezhall ! ni ansa ! Peo-
 gwir ez oa ken arvarus all stourm e-barzh ar Rezistañs hag e-barzh ar Waffen-SS, ha mar-
 teze ne blije ket kalz dezhe lakaat o c'hroc'hen ken prizius e mar da vezañ toull-didoul-
 let ! Hogen ar werin a zo a-du dalc'hmat gant an drec'hourion, pe, a-weizhioù gant ar
 gedern bet trec'het en emgannoù hael, biken gant an tousegi nag an amibennoù divellkei-
 nek. Ha petra a ginniger hiziv dezhi ? Ur soubenn divlas evel ar re a oa lezet gweizh-
 all d'ar vevelion e tiez ar vourc'hizion n'end eo ket an tamm kig gwadek a c'houl ar
 paotr bagol kent mont war e labour.

KAVOUT a ra deomp ez eo mall bras kinnig d'an dud estr eget dañsoù, stu-
 diadennoù arboellerezhel, ha prederiadennoù goular diwar benn sanailh brezhon an ti-gu-
 tez gall dindan doenn Kêr-Julod. Er studiañ a raimp er pennadoù a zeu.



DIGAREZIOÙ : Goulven PENNLOD a zo kret eus stensilerezh AR STOURMER a zo bet
 klañv ha n'end eo ket bet evit kas e gefridi da benn da vare embannidigezh an Nn 4.
 Pediañ a ra kenlabourerion ha lennerion hor c'helaouenn d'e zigareziñ. Emañ ar spi gan-
 tañ ne chomint ket war o c'hoant rak an niverenn 4/5 amañ a zo enni div weizh muioc'h
 a zanvez eget e-barzh un niverenn ecun.

G.P.

DA VEZAN EMBANNET EN NIVERENN 6 :

Hor c'hredenn gant Rigākos, Goulven Pennaod, Jon Mirande, Mikael Josom.

An eil ervenn, § 3 : Davet ur strollad kenelel ha gwerinel; § 4 : Dar-

bar ar brezel reverzhiel, gant A. Le Braz ha B. Le Bihan.

Hent ar Ouenn, hent an Natur, (heuliad) gant Rigākos.

An doueoù morianek, gant Roland Cavallier (Westhoek / Vlanderen).

M E R E R E Z H .

Renerezh : Mikael JOSSE/UME.

Priz ar c'homanant : Breizh : 7,50 LN; Bro-C'Hall : 8 LN. ; Studierion : 3 LN.

Keltva tramor : 12/- Bro-Saoz : 15/- Germania : 7,5 DM,

Kas an arc'hant hag al lizhiri d'an Int. JOSSE/UME, 12 rue du Mail, SAVIGNY-s/ Orge,

S-8-O., France, K.R.P. 13.949.23 Paris.


Moulet gant Ti-moulerezh AR STOURMER.

*
* *
* * *

Ar Merour : M. Josseaume

BREIZH
ATAO

EUROPA
UNANET





GOUENN HA GLENN, GWAD HA GLAD

Niverenn 6

Du-Kevarzu 1962

Die Überlebenden sollen mehr sein als die Schatten Ihrer Lieben,
Ein Schatten erlischt, wenn ein aufrechter Mann zu Boden stürzt.
Ihr sollt nicht Schatten sein Bäume sollt Ihr sein
Die über Gräber blühen und Früchte tragen !



Tra estreget skeud o c'harantez e vo ar re a vev war-lerc'h,
Rak bez'e steuz ur skeud pa gouezh ur gour gwirion.
Skeudoù ne vezot ket avat, gwez ne lavaran ket,
O vleuniañ war bep bez hag o tougen o frouezh !

DA YANN-VARI PERROT
HA D'AN HOLL RE A ROAS O BUHEZ
EVIT DIEUBIDIGEZH AR VRO.

DA NEB A GARO

gant an HINI KOZH.

SABATUET on a-weizhioù o welout an diouer a skiant-prenet a ziskouez !
an dud deut d'an emsav war-lerc'h ar brezel, hag a goll bloavezhioù o klask aozañ un de-
orienn, pe well c'hoazh ur filozofiezh d'an obererezh ha d'ar politikerezh breizhek, e-
lec'h ober da gentañ pe da nebeutañ war un dro. Kelaouennoù ez eus. Strolladoù politikel!
n'eus hini ebet avat ha n'eus diougan a nep hini. N'eus na kevrennoù, na kendalc'hioù na
bodadegoù poblek. Nemet paper duet. Saourus-dreist eo se a-berzh paotred a damall d'ar
Breiz Atao kozh bout tremenet hep delc'her darempred gant ar bobl ha gwirionderioù ar vro.

KONTROL eo ar wirionez. Abaoe deizioù kentañ ganedigezh emsav 1919 ez !
omp aet war-eeun d'ar bobl. Prederiet e oamp kent pep tra gant an "action bretonne". Di-
baot-a-weizh e vo bet gwelet un emsav politikel ken dibourvez diouzh embannadurioù kelen-
nadurezhel. Pep tamm paper moulet ganimp a oa rann an obererezh-brudañ pe vroudañ. Tri-
vliadoù Breiz Atao a oa re a strinke diouzh e embregerezhioù, hag e venozioù a zivere di-
ouzh e bolitikerezh. Ker gwir all e vije lavaret e oa e embregerezhioù renet gant e lus-
koù hag e bolitikerezh gant e sturiennoù. Prederiañ ha kregiñ-ebarzh a yae en un douez. !
Pa ranke tuadur ar politikerezh degemmañ, e tegemme keit-all war bouezig hini ar gelenna-
durezh. Ned oamp ket par d'ar Soviedoù o deus alies menozioù o folitikerezh, na d'an A-
merikaned o deus atav politikerezh o menozioù. Ni a glaske an demeziñ disi etrezo. Diaes!

! e oa meur a weizh, pegwir e talc'h an dud d'o c'hredennoù. Padal e welor tro-ha-tro ur 1
! Breiz Atao peuzrannvroeler, p'edoa c'hoazh ar speredoù re entanet gant trec'h meur 1918,
! ur B.A. en ur vandenn gant ar socialisted hag o vousec'hoarzhin d'ar Reter da vare ar Fron-
! popu, ur B.A. oc'h aozañ e kuzh an "Talbenn Vreizhat" da c'honit ledanañ selaouidigezh,
! ur B.A. erfin o wiskañ heuzoù korkent ma spurmantas un enebour da Vro-C'Hall. Ur wiblem,
! hor ron, a lavare ur re. Ma, doare ar gomunisted a zo gwashoc'h ha berzh a ra.

! DA GREDIN eo e fell d'hor filobismigerien tec'hout diouzh "faziou" B.A.
! ha mont eeun d'ar bobl. Mar deo hennezh o c'hoant e rankint stagañ Yann Gouer ouzh an
! daol d'e rediañ da lenn o skridoù. N'on ket barrek ma-unan da zont a-benn eus hir-zibu-
! nadennoù Youenn Olier, a studi an emsav evel ma studias ar skrivagnerien, hep anaout ane-
! zho. Me ra ganto e rezh barbitaleg. Prezeg er c'houmoul n'eo ken. Ar bev a dremen hebiou.
! Ar bev ? Kounañ ran an eilgeriadennoù feuls a zistage Morvan Marchal d'an diskredeien a
! droc'he dezhañ ar gomz, hag a lake kantonerien, moused, micherourien a bep seurt, koue-
! rien a bep oad, da vlejal gant ar joa. Paket e oa ar bobl. Un dro bennak, un tieg a vro-
! Roazon a ziveg din : "La Bretagne seule, elle ne chierait point greus ! " Ha me : "P'têt,
! ben, mais elle chierait dans son pot !" An holl a stlakas o daouarn, an troc'her-sarmoun
! ganto.

! PELLOC'H an teod a ray lec'h d'an dorn. Etre an tec'hadennoù filozofiel
! an huñvreoù akademiezhel ha taol ar 7 a viz eost 1932, ez eus ganimp an hed a rann al
! lentegezh diouzh an herr, an aon diouzh ar gadarnned. An den yaouank-flamm a bignas ouzh!
! kentañ gouloù an deiz war monumant ar vezh, gantañ en e zorn e voest laezh fetisaet, d'he
! c'hlenkañ a-dreñv ar rouanez a Vro-C'Hall, hag a bountas an tan er boulc'henn gant alu-
! metez na garent ket kregiñ -- pa'n em gave ti ar polis kant kammed alese -- a zo bet ar-
! vestet gant tri den a dreizhas ar blasenn e-keit-se. Hini ebet ne rannas grik, daoust
! d'ar boteier-bras mont ha goulenmata kement den a oa e kreiz kêr. Ne heller faltazienniñ
! hiziv ar fourgas a savas er vro a-bezh, "cet acte aussi insensé que criminel, châtié par
! la peine capitale" hervez ar c'hazetennoù. Dibaot a Vreizhiz a vije bet gouest eus heve-
! lep gra saouzanus. N'anavezis nemet daou all neuze. Hogen n'o doa ket degemeret an awen.
! (O lod o deus bet en taolioù da heul). Ne goustas ket ar voestig hag an dra velen a oa
! e-barzh ar c'hantved eus un taol skritelladur-brudañ (campagne d'affiches) war mogerioù
! ar vro. Un efedusted kant gweizh brasoc'h he devoe. Nebeut goude e tispakas dirak disman-
! trou an delwenn ur Roazonad anavezet ha seniñ a-bouez-penn an diskolpadeg gant e gorn-
! bras, ouzh kenyouc'hadeg an dremenidi hag ar c'hoarierien-damoù er c'hCafé Glacier. Bidou-
! fet evel just. Ar jestr-mañ a laka ervat al liv dereat war trid an darnvuiañ eus ar Vre-
! zhonez a neuze.

! AN "TORFEDOUR" koulskoude n'oa tamm un "neuñ-pe-veuziñ". Netra dezhañ
! eus ar parachutist. Ur "pennpoazh" (Kb. penboeth, Sz. hot-headed, fanatical), un dreist-
! welour e oa kentoc'h. "Gwelet" a rae e vije ar bobl diouzh e du, pa n'oa doktrinour ebet
! en dije henn goulakaet. Hep kemer nec'h eus c'hoarioù ar reizhpoell, hep ober stad ag an
! abeg-mañ-abeg, e sentas ouzh un diskuliadur kevrinek hag e skoulmas gant donañ ene e
! ouenn liammoù diwel ha burzhudus. Ez eas e-unan-penn davet e bal huñvaleerheñvel, met di-
! gor-frank gantañ e zaoulagad. Se n'eo ket "psikologiezh kevredigezhel", giz ma lar egile,
! met ur varregezh d'em ginnig dizamant -- ha da "c'honit" dres evit se -- na gaver ken hi-
! ziv evit doare.

! E 1932 EZ edoamp kalz en araok da Aljeriz. Anaout a raen unan bennak a-
! nezho, er c'harter latin. N'oant eoriet e nep kredenn start ha n'ouient ket ervat da ven-
! ez afent na penaos. Reoù all, mennet reutoc'h, a oa pennoù al labourerien gabil hag ebar-
! zhet e kostezennoù gall ma kavent o nerzh hag o emfiziañs. Abaoe, o deus baleet poll tra
! ma oamp o straniñ... pe o vrezeliñ a-onep dezho evit brasañ gloar ar c'hagn. Baleet o
! dous, clese diwasket poanioù diniver ha kollet gwad ha buhez. Kalz anezho ne ouient na
! lenn na skrivañ. Lod all, Fehrat Abbas ha Ben Bella en o fenn, ne gomzent ket arabeg.
! Keit all ni hon eus embannet studiadennoù uhel. Petra int e gwirionez anez divizoù diwar
! evañ ? E kreiz tud lennek ha desavet-kaer, divarrek da lazhañ ul logodenn, anat eo. Ne-
! tra ken avat. Da vezañ talvoudek e rankje hevelep studiadennoù bezañ peget ouzh ober hag
! embreg. Evel-henn e vefe dezho ur fraezhter, un nerzh-kendrec'hiñ n'o deus ket. Lenn a
! ran gant ar brasañ plijadur pennadoù zo, hogen o c'houzout ne ran ket un dra peurzishen-
! vel diouzh mont d'ar sine pe selaou ar radio. E-barzh ar stourm da zieubiñ ar vro, eo an

! deorienn un ishiliant (Kb. is-gynnyrch, Sz. by-product) eus ar pennobererezh a zo an em-
! gamm e-unan. E c'heller ober hepzi pa vez dihorell ar galon.

! RENERIEN an emsav kozh e oa ganto un deskamant breizhek ha keltiek dis-
! ter ha ne oant ket dellezek a-se eus o lec'h, eme ur genaoueg na anavez ket hep mar doa-
! re ar renerien aljeriat. Hervezañ e tlie pep rener a'n emsav bout barrek war an Trec'h !
! Meur. Kement-se a zo kemer un emsav politikel evit ur skol-veur hag a zo diskiant. N'eus
! ahendall nemet unan a-douez ar renerien gozh a oa dister e vrezhoneg, Maurice Duhamel an
! hini eo. Dleour ez omp dezhañ eus adc'hinivelezh ar sonerezh keltiek. Hepken. Debauvais,
! anezhañ ur Gallo eus an harzoù, a oa e vicher aozañ louzoù e-barzh ur stal-adreñv, en doa
! paket dezhañ muioc'h a ziorroidigezh keltiek eget ur bern eus ar vrezhonegerien lorc'hus
! a vremañ hag a drailh o yezh beweizh ma embannont evit ar remziadoù da zont ur bajennad !
! pe ziv. N'oa ket nemetañ, pell ac'han. Ne vije ket bet miret en hor metou, evel ma c'hoar-
! vez an deiz-mañ, ur rener en em ziskleir hep-tu e-keñver ar brezhoneg. Hañvalout a ra ma
! vefe aotreet pep tra adalek ar Spont Bras. N'eus mui na stur, na lezenn, na kastiz. E
! gre Breiz Atao ne helle gour ebet d'evit diwan-kaer ar feiz breizhat. Bremañ en em gaver
! e-touez tud a zoare, a denn o zok d'an droitourien a weler o vragal e renk kentañ festoù
! ar vro. An dud noazhus, an disivouderien a chakod barnadennoù seven hag a gendalc'h e
! peoc'h-doue da nozhañ ha da zisivoudiñ. E-barzh ur c'hollaj merc'hedigoù en em gavomp ?
! Nag an dra-mañ, o vezañ ma ren urzh ha kenreizhadur eno. Goude bout kelemmet dic'hoarzh
! e-pad pevarzek vloaz ne oa ket brezhon nep a rae gant ar galleg, me da skouer, e tizolo
! trumm ur genaoueg all n'eus bruderezh ebet panevet e galleg. Pezh a ouimp ken abred ha
! 1920, daoust ma safare c'hoazh an holl dud neuze, koulz lavaret, ur brezhoneg pinvidik
! ha c'hwek. Bez'e kelemm hemañ ex-cathedra, evel ma vije frouezh nozvezhioù a brederiaden-
! noù don koulz hag arnodadoù war an dachenn vev, traoùigoù a zisklerie pep hini eus hon
! uvelañ izili en tavarnioù, war al leur-gêrioù, tregont vloaz zo. Divac'her dorioù digor,
! hon den, hag amzer kollet, diremed.

! PA NE GARER ket heuliañ skouerioù zo, e tismeger. "Ces raisins sont trop
! verts". Unan bennak a glemme an deiz all, hon doa diskaret ar pont etre ar rummad ante
! bellum 1914 ha Breiz Atao. (Pec'hed a-enep ar gendalc'hegezh, goût a rit.) Padal, ret-
! holl e oa chom hep sevel pont ebet (er penn-kentañ n'oa nikun), rak ar pezh a oa da ober
! neuze a oa ur reverzhi. Hag ur reverzhi a rejomp. Anez e vijemp bet beuzet, ar pemp paotr
! yaouank bennak a oa ac'hanomp gant engroez an holl voulomed didalvoud, dizesk, mat-da-ne-
! tra-se, a oa o fal nemetañ diduiñ o amzer ouzh son ar biniou pe n'eus forzh petra, ha
! kargañ o c'hof. Distaget kement-se, anat eo hon eus enstrollet laouen un dornad anezho a
! dalveze ouzhpenn ar bara a zebrent : Vallée, Herrieu, Duhamel, Loyant, ar Rouz ha re all
! a zo o anvioù war bajenn gentañ B.A.. Be'voent karet ha meulet. Int-i eo o deus hon heu-
! liet, o lezel anoazet o c'henseurted kozh a-dreñv, didalvoudeien, brizhc'hallaoued, rann-
! vroelerien a galon, pennoù-droch, lonkerien-touet ha bourc'hizien-vihan vrein, gant o a-
! peritioù hag e-barzh o c'hendalc'hiou didud. Fazi et hon eus hep mar ? Peadra da choarzin.

! AN NOVEZVREZHONGERIEN en em stroll etrezo, a ra un toullad bugale d'o !
! gwraez, skrivañ-diskrivañ a reont, ya. Ha goude ? Skol Sant Erwan a zo bet divodet : a-
! rouez helavar. Bodadegoù Pondivi hag an Oriant, kendalc'h Landreger a zo bet kaer ha fre-
! alzus. Ha pelloc'h ? Evit tizhout ar bobl e ranker kemer penn . hentoù all. Arabat ober
! fae war ar c'henkizañ (Gl. noyauter), ar c'habaduilhoù er ruiou. Ar gomunisted, hor mis-
! tri, a oar embreger ha mezellat an engroezioù. Ret-mat en em gannañ. "Sifflet-sirène" va-
! mignon Kamilh n'eo ket ar respont. Un toullad kouerien, bep ar mare, kement-all a labou-
! rieren kostez Sant-Nazer, a sav un dispac'h hag a laka ar gouarnamant da zanglegañ un tam-
! mig. Hogen n'int ket broadelourien na zoken brogarourien an darnvuiañ anezho. N'eus ket
! amañ da denañ lorc'h diouzh o c'huriou. Ouzhpenn-se ned aint ket gwall-bell ha ne vo ket
! liñvet hor prad gant an dour a zegasont dezhañ. Pa oamp o tizeriañ kent ar brezel dre zi-
! enez a arc'hant, Deb, a oa gant Brikler ha Gudren, dizaonañ den a anavis em buhez, en
! doa graet e venoz lekañ ar skars war ur yalc'had bras eus ar stad a vije evit beajiñ, an
! deiz-mañ-deiz, e-barzh tren Paris-Brest. Titour en doa bet; digant piv ? N'ouzoñ ket.
! Ragaozet en doa pep tra dre ar munud. Pa welas avat n'helle ket, en hag e gile*, dont
! a-benn eus e daol hep pilat ar gward a oa armet, pezh n'ouie ket da gentañ, e kilas. Ouz-
! penn ugent vloaz zo. Ned omp ket aet war-raok abaoe. Nemet evit kaozeal, keda ?

! (*) Pedit a ran an Hini Kozh d'am digareziñ : kiriek on eus ar ger-se. Skrivet en doa :
! ketpar hervez Kn. kespar; met hKn. chespar a zo spisc'heriadennet gant coniu... G.P.

KREDET e vo din gant unan bennak ma lavaran eo tremen-mare kemm penn d'ar vazh ? N'on ket a-du penn-da-benn gant Ar Stourmer. Ne garen ket Hitler nag e goskor. Hogen ez eus ennañ balc'hder, tan, karded, yaouankiz, levez-vevañ na gaver e nep lec'h all, ha c'hwezh un diougan dic'hortozet. Ul lip-e-bav eo ar C'Hilhog Gall, a lenner e Breizh, war a glevan, betek ma kouezho pep niverenn e tammou. Gwelet a rit, ar Brezhon n'eo ket ken anevalet en e galon evel ma lavarer. Ne soñj ket din e vije eus he-velep rannidigezh etre un dibab emskiantek hag an engroez pout. An dra eo m'eo bet ankouaet an tu d'o broudañ. Goueled ar ouenn a zo unan. Adgwelet a ran c'hoazh dre'm eñvor micherourien Rostrenen o sevel war o diskoaz prezeger Breizh Atao, goude bout selaouet e gomzou diwezhañ ! (Gwir eo e voe mouzet outañ e Groñvel. Ret eo anzav ar wirionez.)

GALLET em bije roneotipañ kement-mañ e galleg hag e gas da gant den di-lennet a-zevri. Mogerioù Landernev o dije klevet moarvat. N'eo ket hemañ ma fal. Me garfe lakat ar girieien da boelladiñ. Ar frouezh, sed an dra a gerc'hemp atav gweizhall, pa oa mintinvezhioù o kanañ evidomp, naren ar blijadur izel da lakat hemañ-henn da skrijañ. Micherourien, micherourien Vreizh e oamp, e Stur zoken. Kompren a ran an dra-se bremañ. Setu avat seitek vloaz ma klasker sankañ brud hon oberoù dindan dek troatad douar, pe disneuziañ anezho. Taolioùgou morc'hed ur weizh an amzer, na badont ket pell. Droug an digousk am eus paket. A-walc'h, a gav din. Emañ o vervel da vat, o steuziañ a-grenn pep elfenn eus hor broadelezh, daoust d'an dihun galloudus a embann L'Avenir. Grit a girit. A hell bezañ ma fazian. N'eo ket ma mennad aotrouniañ den ebet. Tevel avat a vije bet reiñ da grediñ ez on a-du gant traoù zo. N'on ket. Divec'hiet eo ma askre. Kousket a rin hiviziken va eizh eurvezh bemnoz.

AR STOURMER, kelaouenn daouvizek kenelwerinelourion Vreizh, a zo dizalc'h diouzh pep strollad politikel breizhat pe europat betek amañ. Pezh ne dalv ket e chom diseblant dirak strivoù ar vroadelourion vrezhon hag ar gevredelourion europat a fell dezhe sevel Europa war ar c'henelou; o skoazellat a ray eus e wellañ ha setu perak e kaver war bajenn gentañ pep niverenn Breizh Atao hag Europa Unanet peogwir ez omp Breizhiz da gentañ hag Europiz da c'houde ha ne fell ket deomp dieren an eil diouzh heben. Etre Breizh hag Europa ne anzavomp nemet un hanterourez : ar genvreurelded hol liamm ouzh Kelted tramor. A-du omp enta gant raklenn ar CELTIC LEAGUE hag e kevarc'homp amañ he renourion Gwynfor Evans, R. MacIntyre, Yann Fouéré, Noelle Davies, Alan Heussaff ha Ceinwen Thomas.

POELGOR RENEREZH AR STOURMER

R. GLEMAREC, M. JOSOM, J. MIRANDE, G. PENNAOD, R. RIEG.

Priz ar c'homanant : Breizh : 10,00 L ; Bro-C'Hall : 11,00 L ; Studierion : 8,00 L
Keltva tramor : 16/- ; Bro-Saoz : 18/- ; Germania : 10 DM .
USA : \$ 3.

Teñzorier : Mme Josseaume, 12, rue du Mail, SAVIGNY-sur-Orge (S&O), France, CCP.
13.949.23 Paris.

Kas al lizhiri da : Jord PINAULT, c/o Mme M. FERRY, E.75, "Les Sorbiers", CHEVILLY-LARUE, Seine, France.

Pediñ a reomp hor c'hileion da gas o adkomanant an abretañ ar gwellañ. Trugarez.

A - Z I V O U T A R V E L E I E Ngant Friedrich NIETZSCHE.

TROET eo bet gant Alan Heussaff pennadoù zo div rann Also sprach Zaratrustra Friedrich Nietzsche; embannet eo bet e droidigezh gant Preder (Nn. 35/36) chwech !
 ! miz zo. Mankout a rae ur pennad bennak, hag e kavas deomp e plijfe d'hol lennerion o de-
 ! vout en hor yezh troidigezh A-zivout ar veleien. Pa gasas e skrid deomp e lavaras an Ao.
 ! Heussaff : "D'am meno, Nietzsche n'en deus ket meizet pe disklêriet-reizh kement a denn !
 ! d'ar gristeniezh evel ma vez pleustret en hor broioù kornok. Ar pennad-mañ a oa mat kant,
 ! vloaz zo, met diamzeriet eo un tamm, a lavarfen. Da skouer, pa gomz eus ilizoù. Ha mar
 ! deo gwir e vez gwelet kalz beleien velkonius, evit lavarout ar wirionez, amañ en Iverzon!
 ! e kaver anezho ken laouen ha n'eus forzh pe rummad all. Marteze abalamour d'o galloud er
 ! gevredigezh ! ". N'end eo ket e berr gerioù e fellfe deomp barn Iliz Ruven; hir a studi-
 ! adenoù a ve ret, a vo savet deiz pe zeiz, marteze, gant tud a vicher : ar brezhoneg a !
 ! zo yezh nemeti ar c'hornogved marteze na gaver ket enni un istor ar gristeniezh savet a-
 ! zoare (lese o terc'hel kont eus kavadennoù nevesañ an devarnouriezh, an hendraouriezh,
 ! ar yezhouriezh, rolloù Qûmran ha Khenoboskion, h.a., ha neket un "istor santel" bennaket!
 ! evit bugale ar c'hatekiz) gant gourdonerion, kristenion pe get. Fellout a ra deomp hep-
 ! ken reiñ ar pennad-mañ dre ma vez arouezius-tre eus emzalc'h hag emarvez Nietzsche -- hag
 ! eñ gouron mui eget Jezuz evit lod ac'hanomp -- a chomfe diveizadus heptañ. Spi hon eus e!
 ! c'hello Alan Heussaff reiñ hep re a zale dibenn e gaer a droidigezh.

G.P.

A - Z I V O U T A R V E L E I E N

UR WEIZH e roas Zarathoustra un arouez d'e ziskibien hag e komzas outo evelhen:
 ! "Setu amañ beleien. Evito da vout enebourien din, kit sioul hebiou dezho gant !
 ! ho kleze en e c'houin !
 ! En o zouez ivez ez eus harozed; kalz anezho a c'houzañvas re -- setu perak e !
 ! fell dezho lakaat ar re all da c'houzañv.
 ! Gwall enebourien zo anezho : n'eus netra gourvennekoc'h eget o izelegezh. Ha !
 ! buan e saotrer e zaouarn m'o argader.
 ! Kar eo ma gwad d'o hini avat; ha me a fell din e vefe douget bri d'am gwad dre !
 ! o hini".
 ! Pa voent tremenet, e voe taget Zarathoustra gant ar boan; ha ne oa ket bet pell !
 ! o herzel outi pa stagas da gomz evelhen :
 ! Kerse eo ganin ar veleien-se. Un erez int din ivez; hogen an disterañ eo an dra !
 ! se din, abaoe m'emaon e-touez an dud.
 ! Gouzañv a ran avat hag a ris war un dro ganto : tud vac'het int ha tud verket. !
 ! An hini a reont an Dasprener dioutañ en deus o lakaet en naskoù.
 ! En naskoù fals talvoudoù ha gerioù touell ! Siwazh ! Ma karfe unan bennak o !
 ! daspren digant o dasprener ivez !
 ! War un enezenn e kredent bout douaret gweizhall pa cant kaset-digaset gant ar !
 ! mor; padal, war un euzhvil kousk an hini e oa !
 ! Fals talvoudoù ha gerioù touell : sed ar gwashañ euzhviled d'an dud, pell e hun !
 ! hag e c'horto an ankoel enno.
 ! En diwez e tihun avat, hag e teu hag e plaou hag e kondon kement den ha kement !
 ! tra a savas lochoù warnañ.

! O sellit 'ta ouzh al lochoù a savas ar veleien-se ! Ilizoù a reont eus o c'he-
! vioù frondus-c'hwek !

! O na falset ar sklerijeh, na luget an aer ! Amañ eo difenn d'an ene -- nijal
! d'e lein !

! En enep e c'hourc'hemenn o c'hredenn : "War ho taoulin, pec'hourien da bignat
! gant an diri !" !

! E gwirionez, gwell eo ganin c'hoazh gwelout an den divezh eget o daoulagad di-
! sozet gant ar vezh hag an deoliezh !

! Piv a ijinat seurt kevioù ha dirioù-pinienn ? Ha n'eo ket ar re a felle dezho,
! o em guzhat hag o doa mezh rak an oabl glas ?

! Pa sell an oabl glas adarre dre an toennoù dismantret ouzh ar geot hag ar roz-
! aer harz er mogerioù disac'het -- neuze hepken e tomm ma c'halon adarre ouzh nevedoù an
! doue-se.

! Doue a rejont eus ar pezh o gloaze hag o dislavare : ha gwir eo, doare-harozed
! a oa un tamm mat gant o c'hehelañ.

! Hag an doare nemetañ da garout o doue a oa d'o menoz stagañ an den ouzh ar
! groaz !

! Evel korfoù-marv e rejont o menoz bevañ, dilhad du a wiskjont d'o c'horf-marv;
! o frezegemoù zoken a glevan diganto c'hwezh-fall evel ma vez en-dro d'ar marskiñvier.

! Hag an neb a vev en o c'hichen a vev e-tal lennoù du a sav diouto kanenn hira-
! zhus c'hwek an tousegi penn-toull. (*)

! Gwelloc'h kanaouenn a rankfen klevout diganto kent ma kredfen en o dasprener;
! dasprenetoc'h neuz a vije ret d'e ziskibien !

! En noazh e katfen o gwelout : rak ar gened hepken a dlefe prezeg pinienn. Piv
! a vefe kendrec'het avat gant ar melre dic'hizet-se !

! E gwirionez, o dasprenerien ne zeuent ket diouzh bed ar reized na seizhvet neñv
! ar reized ! E gwirionez, int o-unan ne gerzhjont kammed war ballennoù an anaoudegezh !

! Ur spered toull-didoull a oa d'an dasprenerien-se; e pep toull e lakajont o zou-
! elladur, o fenedour stanker-toullou, an hini a rejont Doue anezhañ.

! En o zruez e oa beuzet o spered; pa goeñve, ha pa zic'hlanne o zruez e teue a-
! tav diskiantegezh vras war c'horre.

! Gant gred ha garm e kasent o gre gant o gwenodenn, koulz ha pa ne vije nemet
! Ur wenodenn davet an dazont ! E gwirionez, ar vesaerien-se a oa deñved anezho ivez !

! Speredoù bac'h hag eneoù ec'hon a oa d'ar vesaerien-se; bihanet broioù avat e
! voe betekhen an ec'honañ eneoù zoken !

! Arouezioù gwad a skrivent war an hent a bleustrent, hag hervez o diskiantegezh
! ec'h anataed ar wirionez gant ar gwad.

! Padal, ar fallañ test d'ar wirionez eo ar gwad, kontammañ a ra ar gelennadurezh
! c'hланаñ hag he zreiñ da douell ha kasoni er c'halonoù.

! Ha pa'z a an den dre an tan en abeg d'e gelennadurezh, petra vez anataet gant
! se ? Muioc'h eo e gwirionez pa zastum an den e gelennadur dre e entan e-unan !

! Kalon vouk ha penn didan : e-lec'h ma vez kevredet an daou-se e vez ganet ar
! fougaser, an "dasprener".

! Tud vui (**) zo bet e gwirionez ha re uheloc'h a ouenn eget ar re a vez anvet
! gant ar bobl "dasprenerien", ar fougaserien drelatus-se !

! Ha re vui eget an holl zasprenerien-se a ranko dont d'ho taspren c'hoazh, ma
! breudeur, ma vern deoc'h kavout an hent d'ar reized.

Biskoazh n'eus bet dreistden ebet. En noazh em eus o gwelet o-daou, an den muiañ hag an den bihanañ : gwall-heñvel int c'hoazh an eil ouzh e-gile. E gwirionez, an hini muiañ zoken am eus kavet gwall-zenel !

Evelse e komze Zarathoustra.

Notennoù : (*) Touseg penn-toull a reer eus un touseg hag a vez klevet o kanañ diouzh ar serr-noz en hañv. N'on ket sur mar deo an hevelep aneval ha "die Unke" en destenn a-lamanek. (A.H.).

(**) Alan Heussaff en doa implijet meuroc'h ha meurañ evel doareoù-keverata meur pa gomzer eus tud veur. Arabat e vefe rebechiñ dezhañ enta an implij graet amañ, eus mui ha muiañ a zo diwar va dorn. Kentoc'h eget sevel doarcoù-keverata nevez war an adanv-mañ, em eus kavet gwell heuliañ skouer ar c'hrennvrezhoneg ma kaver, da skouer :

Iesu map roe ster ma querhaf

Ma spy ma deduy an muyhaf

(J. 73-74 emb. 1530)

Hac è gwelet louen en faç,

So yoa muihaff, à caffaf aç :

(M. 2743-44)

Joa dich ha muy seul maz vihet

(B. 238,6)

Muy eguidoff a pep rouez

Vezo an buhez anezaff

(N. 711-12)

Sellit ouzh Ernault, DEBM. 339-340, Lewis, LLLC. 14; an un doare da ober a zo graet gantañ e Kb. (Simon Evans, GCC. 10, 25), e Kn. (LlCC. 19, OM. 218-19, h.a.) hag en hIv. (GOI. 235; RIA Dict. M-166). (GP.)

ankoel "Verhängnis", "diouer a chañs vat, gwallblanedenn" a zo bet savet! hervez an hBr. coel (evit *coelioc) sp. aruspicem, Loth VVB. 76, hBr. colioc sp. fascinauit, VVB. 78, hBr. etncoilhaam (= evngoelaat) sp. aspicio, auspex, VVB. 124.

ENEP D'AR FRAÑS ?

AR-LERC'H bout hor gwelet o vrezelat a c'houde c'hwec'h vloaz ha tregont bout a zo tud hag en em c'houlenn atav hag enebourion omp d'ar Frañs pe petra.

C'Hwi hag a lenn Dihunamb, pe ur paper brezhonek bennak; c'hwi beleg hag a brezeg, a ra katekiz e brezhoneg; c'hwi mestr pe mestrez-skol hag a ra skol-brezhonek; c'hwi hag a gomz brezhoneg; c'hwi hag a ra anv ur sant a Vreizh d'ur c'hrouadur; c'hwi hag a gan ur sonenn vrezhonek, pe zoken ur sonenn gallek karantezus douzh Breizh; c'hwi hag a ra un anv brezhonek d'ho ti, d'ho ki pe d'ho kazh; c'hwi hag a zo brezhonek hoc'h anv; c'hwi holl hag a laosk hepken ur soñj, ul lusk da c'hounit ho kalon ha d'ho tougiñ trema Breizh hag an traoù keltiek; holl, klevit mat, e savit enep d'ar Frañs-se hag e klaskit, hep gout deoc'h, reiñ lamm dezhi.

EN UR GER, bemdeiz e tegouezh da bep unan ac'hanomp sevel enep d'ar Frañs-se hag ober gaou douti; rak ar Frañs a anavamp a-c'houde meur a gantved a zo ur Stad oazus ha brellus, dre m'end eo groeit a dammou dishañval tre ha paket diblaen, en-dro d'ur sorc'henn. Ne hell chom en e sav nemet o tiskar, en-dro dezhoñ, kement gwezenn, kement barr n'end eo ket "gallek"; o tizourienniñ kement plantenn chomet bev etre an tammoù, hag a zeuhe da benn, en ur greskat, a ziskar a-blat ar Stad fall baket-se.

TONKET omp enta, ni brogarourion ha c'hwi ivez lennerion ambac'h, da vout da viken enebourion ar Frañs gwaskerez-se hon eus anavet hag a anavamp atav.

Met n'end eo ket ar hor gwall-ni eo; ar he heni ne laran ket.

Loeiz HERRIEU

(Dihunamb, xiv (1941), 254-55)

K A N A N T R E C ' HWar don Hen Wlad fy Nhadau.gant Roparz HEMON.

1. Ni Breizhiz a fell deomp digabestran hor bro !
Brudet oa he mibien dre ar bed tro-dro,
Dre vrec'h hor yaouankiz ha dre youl hon Doue
Brudet vo Breizhiz adarre.
- Diskan : Breizh ! Breizh ! Atav me az karo Breizh !
Dit-te va nerzh, va gwad va feiz,
Da c'honit an trec'h dit, va Breizh !
2. Siwazh d'ar vro drec'het hag a bleg d'an trec'h,
Siwazh d'ar bobl flastret hag a samm he bec'h.
Re gaer ez eo hor bro, ha re uhel hor gouenn,
Da zougen er vezh ur chadenn !
3. Klevit 'ta garmadeg ha youc'h a bep tu,
Gwenn-kann eo ar mor hag an oabl a zo du,
Koumoulek ar menez ha braouac'hus ar c'hoad,
An diougan zo kaer, deomp d'ar gad !
4. An tevenn a drouz hag an avel a yud :
Levenez ha goanag en askre hon tud.
Ur gour war bep dorgenn, en e zorn lufr an dir,
Da gas ar Gall d'ar c'housesed hir !
5. A-dreuz an emgannoù e tiguzh an tir,
Enezenn c'hlas, seder, Manannan ha Lir,
Eil vro ar Vrezhoned na deont biken da gozh,
Gwir vibien ar ramz Hanternoz.

B R E Z H O N E D S O N N .War don kanenn Horst Wessel.gant Goulven PENNAOD.

1. Brezhoned sonn, kalonek, balc'h 'vel Konan,
Savomp hor penn araok mont d'an emgann.
Hon tadoù a skuilhas o gwad war c'hleñn ar vro,
Ni o mibion a raio egisto.
2. Kloc'h bras an tour, evel ul lourenn c'hourel,
Mouezh veur ar maez, a embann ar brezel.
An taboulin 'vorzhol kammed ar Vrezhoned,
D'ar gad hep aon, 'mañ Arzhur o tonet !
3. Ene ar ouenn a zasson 'n hor c'halonoù,
Ar spered kelt ne hall deomp bezañ gaou :
Hen Nevenoù, Kadoudal, hor galv war al lann,
Ar Gall a glemm, p'hor gwel mont d'an emgann !
4. Labourer sonn eus kêr, a'r maez, a'n donvor,
War-sav ! va breur, ha stourmomp holl a-gor
'Vit hor buhez, hor bara, hor frankiz, ar peoc'h,
Evit desevel framm ur bed gwelloc'h.
5. Deomp vo an trec'h el lec'h ma chomomp bec'hiet,
'N enebour kozh, abred 'c'houzañvo'n nec'h.
Gouloù santel an heol a sklerijenno'n deiz
Ma vo gonezet reizet Riez Vreizh !

 **
 **
 **
 **

H O R C ' H R E D E N N

I

R I G Ā K O S

DIAES eo termeniñ ur gredenn pa ne selaouer nemet ouzh ar vouezh donoñh eget ar Me a zo heklev ar Rin meur. Dre vras, evidon, diskuliadur ar "C'Hwec'hvet skiant" se, ha ne da ket pell pa chom dic'honzus evit ar reiz, a zo hini ar mont-dreist e div stumm : da gentañ, an diazez a zo an doare emskiant, dreist ar spered-poellatañ, a laka da vezañ dic'hallus troc'hañ ar vuhez etre ganedigezh ha marv, an emskiant a droe Spinoza gant ar c'homzoù sentimus experimurque nos aeternos esse ha Williams James gant : "Seul vui ma koshaan, seul vui e kredan en diamzerelezh, rak seul vui ma koshaan, seul vui en em santan dare da vevañ." Emskiant ivez froud an Natur, lusk ar youll-emledañ didermen a-unson gant anien pep boud etrezek an Nerzh, ar Gened, al Leunder a vuhez klok, hael, frouezhus. Ha pep tra a zeu war wel a ra e dennad-vale, a goaz, a samm tu pennañ e arnodenn evit diazezañ ar stumm nevez a heulio an hevelep hent, darnig eus an Distro peurbadus a ren betek ar stered. Ar "c'hwec'hvet skiant" n'eo ket bev e pep den, zoken e tud a spered galloudus : ar re-mañ n'int ket deut c'hoazh war ar bazenn m'emañ ar gouloù o c'hortoz anezho; da dremen ha da adtremen o deus c'hoazh da ober, en emdroadur hep de-roù na ziwez. Emskiant an "Tu all" pa vez glan ha gwirion ne c'hell bezañ na roet na kollet. Savadurioù prederouriezhel ha kravezel avat ne lavaran ket. An "Tu all", ar C'Hlamm eus ar Vuhez diziraezus d'hor reiz hor sach koulskoude davetañ kreñvoc'h eget forzh pe-seurt lusk all er spered. "Ar filozofiezh n'eo ket ur prederiadur war ar marv, hogen ur prederiadur war ar Vuhez".

AN "TU ALL" a zo ar c'henarroud-rin m'en em skriv ennañ an "emskiant mont-e-bir", gant ar galv dreist-meiz-se eo bet fromet an donañ ar brasañ prederourien, bez'ez eo diazez "arguzenn voudoniel" illur sant Anselmo a adkaver dindan stummoù nebeut disheñvel e Descartes, Hegel, zoken Pascal ("Nous avons une idée de la vérité invincible à tout le pyrrhonisme, nous avons une impossibilité de prouver invincible à tout le dogmatisme"), diazez ivez emzalc'h speredel ar Buddha a nac'has galloud ar reiz da dizhout Rin-meur an Nirvana.

EN E LEVR "Le problème de Dieu" e nac'he ivez -- hep mont ken pell, a dra sur, hag eñ katolik -- ar prederour Édouard Le Roy pep talvoudegezh da "brouennoù" bezañ Doue, nemet an arguzenn voudoniel degemeret mat. Soñj am eus ivez bezañ klevet unan eus va c'helennerien brederouriezh er Sorbonne o lavarout ne anzave evel tu da gaout un darempred bennak gant ar Peurvoud nemet an doare lamm dreist-meiz-se a gaver e-touez ar gevrineleien (mystici) vras. Gwir eo evidon ivez gant ma n'ez aer ket pelloc'h. Rak mar deo troet didrec'hus ar brederourien da reiñ ur stumm d'ar Galv, da sevel warnañ kenreizhadurioù usvedoniezhel bras (ne lavaran ket e vijent didalvoud, atav on chomet bamet! dirak hini Hegel, da skouer), mar deo ken techet ar gevrineleien da lakaat ar Galv da grouiñ en domani ar from un aergelc'h a drivliadoù kalz re zenel, e c'heller chom hep henn ober ha santout ez eo ar vuhez veur gwirionoc'h eget an hini a vremañ. Hērakleitos en doa an hevelep emzalc'h ha Diogenēs e-keñver rinoù Eleusis hag all : prederour ar Beradur peurbadus hag ar C'Hi goapaer a selle outo evel ouzh touellerezhioù.

AN ENGROEZ, avat, ne hell ket tremen gant an Uhelc'halvadur c'hlan hag idolennoù a rank kaout, idolennoù a bep seurt, kravezel, politikel ha gizioù-bevañ, en em wiskañ, ha me oar. D'ar gour ganet mat da lakaat da vleuniañ ha da splannañ ennañ holl nerzhioù ha galloudezhioù e Donkadur, da dennañ eus frouezh e vuhezioù kent danvez meur buhezioù kaeroc'h ha kreñvoc'h e froud didermen ar Vuhez a zo ar stourm he ster a gomprenas mat ar Giniked o kemerout Hēraklēs evel patrom. Ar striv ivez a zo pinvidikoc'h en e efedoù, reishoc'h ha galloudusoc'h ma rener anezhañ e framm ar Ouenn ma tremen hag ad-tremen dre he c'hrouadurioù lodenn pennañ an den. Diazez emdroadur an den eo ar Ouenn, kresk an den a dalvez da hini ur Ouenn hag hini ar Ouenn da hini an den.

II

J O N M I R A N D E

KREDIÑ a ran en ene -- evit reiñ dezhañ e anv boutin -- lese ez on ken-
drec'het ez eus e pep boud ur perzh bredel (psychical) ha n'eo ket ar psukhē-se, e-giz
ma lavar an hollzanvezourien mekanikelour, un addarvoudenn nemetken eus an danvez (eus
an empenn evit an den hag al loened all), met, er c'hontrol, ez eo-eñ distag, en e zoare
bezañ donañ, diouzh an darvoudennoù strilhouriezhel ha naturoniel boutin (d'am meno-me,
eo bet anataet an dra-se, e doare pe zoare, gant an ambourc'herezh dreisteneconiel), ken
e c'hellfed lavarout ez eo an ene, en ur ster strizh, ar gwirvoud n'eus nemetañ. Ya, mont
a rin betek lavarout ez on techet da grediñ, a-weizhioù, ez eo va ene-me ar gwirvoud n'
eus nemetañ...

EN ENEP d'ar pezh a gelenn kenreizhadurioù usvedoniel zo (re India da
skouer) e kredan-me ez eo personel an ene-se, en un doare bennak da nebeutañ, rak ne na-
c'han ket ez eus ivez un neuz etrevredel dezhañ, hogen, en enep d'ar pezh a gelenn ar
gristeniezh, e kredan e oa anezhañ kent ma voemp ganet er bed-mañ, hag ez oa en-oberiant,
-- evel ma vo anezhañ goude ma vimp marvet er bed-mañ. Ne fell ket din lavarout avat e
kredan en treuzannezerezh-ene, lese e vefe ret da bep ene tremen dre un dreistniver a
gorfoù er bed-mañ, lerc'h-ouzh-lerc'h, o vezañ divizet pep enkorfadur gant hon dellidoù
buhezgezhel er vuhez a-raok (kelennadurezh ar chKarma). Me a gred kentoc'h -- evel m'o
doa meizet marteze an Drouized kelt kozh -- e vef hon ene personel un dreistniver a vu-
heziou war vedoù disheñvel o danvez, war blaenenoù disheñvel ar gwirvoud, ha, marteze,
ma n'eus ket a amzer enni hec'h unan, kempred eo an holl vuheziou-se, met ur gudenn all
eo kement se...

MET war bep plaenenn, war bep hini eus ar "bedoù"-se, e vez ret bezañ
ur c'horf danvezel d'an ene, peogwir e c'heller lavarout n'eo, pep tro, ar c'horf-se tra
estr eget emskiant an ene; an un doare en deus hemañ d'en em anavezout ("Furv ar c'horf
eo an ene" eme Aristotelēs). Abalamour da se, daoust d'ar c'horf bezañ un dra dibad hag
a eil rank, mar menner, e-keñver an ene -- tonket da "vervel" ma'z eo, hervez ma tremen
an ene d'ur blaenenn all -- n'eo ket da zisprizout e-giz ma ra tud kravezel zo, met, er
c'hontrol, e tle bezañ anavezet evel diazevad ret hor personelezh emskiantek, hag alese,
en desped da brezegenoù an dreistvedelourien ("die Hinterweltler") e rankomp dougen bri
d'e berzhioù anienel, hag i arouez hag ardamez anien an Ene -- zoken ar re zisterañ hag
izelañ, met da gentañ holl ar re zonañ ha pouezusañ : fellout a ra din lavarout skiant
ar rev (Kb. rhyw, Sz. sexus, s. Kruptádia II, 1883, 265 : Or voéz a pe uè mèù / Golla
en alhué ag i reu...) ha skiant ar Ouenn. Nac'h talvoudegezh ar skiantoù-se e sigur dreis-
telezh ar "spered", ne vefe nemet un dreisoni hag ur sottoni, rak "nep piv a venn drevezañ
an ael a zrevez ar mil".

DRE MA kredan en ene, ha ret e vo din krediñ e Doue ? Ur gudenn all eo,
peurzisheñvel d'am meno. Evidon-me, va ene a zo a-walc'h dezhañ e unan. Koulskoude, pa
vez poan e unanidigezh o pouezañ varnañ, e vez techet neuze da enoriñ an doueed, ne vern!
hag i a vefe frouezh un hiraezh nemetken, pe koun hag hekleve eneou harozed ar meuriad, o
kenderc'hel da vezañ war blaenenoù all ar Boud.

Paris, 25/12/1962

III

G O U L V E N P E N N A O D

Vilkat goë geyja ; grey pykkjunk Freyja

Ne vennan ket touiñ an doueou, met ur chast eo

Freyja, d'am meno. ARI ÞORGILSSON (1067-1148)

VA SONJ kravezel am eus displeget nevez zo e-barzh Ar Vro, 16, 46-52, hag!
e pedan lennerion Ar Stourmer da sellout ouzh ar gelaouenn-se, ha neket ouzh va fennad

! hepken. En heni Maodez Glanndour e kavot peadra da veizañ gwelloc'h ster ho stourm, evel!
! en heni J. Kanaber en Ar Vro 15, ma'z eus kristenion ac'hanoc'h. Hogen er pennad-se e
! felle din, dreist-holl, resizañ emzalc'h ar vroadelourion andoue, pe, ez-ledanoc'h, an-
! kristen, dirak emarvez urzhaz Iliz Ruven e Breizh.

! LAVAROUT a ran an-doue, an-kristen, ha neket di-zoue, di-gristen peogwir
! ez eus peurliesañ gant ar rakger di-, e brezhoneg kevadek da nebeutañ, un arliv dibrizi-
! us na glevan ket ennon pa lavaran n'on ket kristen ha ne gredan e doue ebet. A-ratoz em
! eus lakaet amañ uheloc'h, avat, ur werzenn tennet eus Ari Þorgilsson, unan eus gwellañ
! c'hweldisplegourion ar grennamzer sterennek, ur sagnamaðr eus ar c'hentañ, tad gwirion
! sagnaskemtan Ísland : tennet eo eus e Libellus Islandorum (Íslendingabók) hag emañ ar
! pennad-mañ o tanevelliñ donedigezh ar gristeniezh en e vro : emañ e reour (haroz), ur
! c'hristen anezhañ, dirak tud chomet feizleun da hengredenn o zadou, ha setu dres ar pezh,
! a lavar dezhe. Hiziv an deiz em gavan me ivez dirak keneiled kozh hag i chomet feizleun
! d'ar gristeniezh, pe deut da vout troet en-dro davet ur baganiezh nevesaet, un doueelezh!
! pe un eneelezh bennak : spi am eus e pardonint, an eil re hag ar re all, d'ar c'hañfard
! ez on chomet, bout un tammig goapaus en o c'heñver; arabat e ve dezhe krediñ e tismegañ-
! san o c'hredennou.

! A-DU ARALL, ur c'hast wirion e oa ar Freyja-hont ! Evel hor Medb iver-
! zonat, a ve bet Mezv, "ar vezvrierezh", hec'h anv en hor yezh. Hag a-weizhiou e teu genen
! un hiraezh davet an amzer-hont m'edoa an doueou ken tost ouzh ar vediz, o nevetaat per-
! zhiou kent an anien hag an den, skiant ar Rev, skiant ar Ouenn, evel ma lavar Jon, met
! ivez skiant an Nerzh, an Halded, ar Gened diouzh klevidigezh Rieg. Gweizh ez on gour-
! vennek diraze p'o gwelan o kerzhet ken diougel war hor c'hozh glenn, hon tir sec'h, levi-
! et gant koun bev un "tu all" pe ur "c'henved" a ro ur ster trevedel d'o buhez : hemañ
! n'end on ket gouest da sevel evidon; ha re gozh e ven ? re euvret gant kouronkenn an am-
! va hollboellourieñ ? pe re izil e ve va bred (Kb. bryd) evit meur va ene ?

! FORZH penaos ez adkavan ur glevidigezh kenedoniel dirak kaerder yen ha
! strizh ur reolenn boelloniel (Sz. logical), un damkaniezh (teorienn) riñvelloniel pe
! c'hremmoniel (dinamikel). Atav on chomet abaf ha diseblant dirak ar vevoniezh, ar plant,
! ar bleuñv, an evned hag arouez un dizeneladur ez eus amañ moarvat; ar mor am hoalas e-
! velreizh, ha me Malaouad, met neket mor sioul ha seder endervezhiou gor an hañv; donvor
! meurdezhus ha tonnou konnarek ar gedez ne laran ket, ma sav uhel an tarzhiou a-us d'an
! Talar war ar c'hreizhent a ere Porzh-Malou en Enezenn gant fabourz Parav. An den ne ad-
! kavan ken nemet pa gejan gant e lavar hag an dud (*teutā !) gant he yezh, forzh pe heni
! e ve-hi, hag e vaman dirak henvojennou Sumer, kanennoù ar Rg Veda ha lidlevrou hetitek
! Xatusa (Boğazköy hiziv), koulz ha dirak Inram Brain hag E Gododin, tra ma choman dibled
! dirak murlivadurioù ar grec'hier, delwennou kenedleun arz ar stepennoù ha spilhennoù-al-
! c'houez kizellet mistr La Tène.

! DRE HE YEZH em eus adkavet va c'henel, a drugarez d'ur beleg kozh, ar
! chaloni Jord Havard, a ouezas silañ ennon binim dibareüs ar "vreizhataviegezh" p'edoan
! ur mousig lemm e spered (a lavared neuze !) hag un tamm skañbenn, douget endeo da lonkañ!
! mesk-ha-mesk latin, gregach, hebreeg ha me oar ! "Perak'ta e kollez da amzer o teskiñ ye-
! zhou ken pell diouzhimp ? emezañ. Hag e ouzout da yezh-te ? Hag ez anavezet da vro ? "Ha
! da gregiñ raktal en ur gentel vrezhonek, da reiñ din levr Vallée ha d'am lakaat da c'hou-
! de da heuliañ Skol Ober. Ne voe ket ken aes ha se, ha Marc'harid Gourlaouen, "santez Mar-
! c'harid ar brezhoneg eeun" evel ma lavar Youenn Drezen, a rankas dastum teñzorioù a ba-
! sianted genen, me'm eus aon. Hogen ne grogis ket evit gwir er brezhoneg kent ma kejis
! gant dornlevr kembraek Abeozen, a ziskouezas anat din ne oa ket hor yezh un deodyezh van-
! touek, diwrizienn, dihanes (hep istor), hogen ur skourr strizhereet ouzh ar c'heltved,
! heklev un diorroidigezh ken uhel ha gwerzhveur (Kb. gwerthfawr, Sz. valuable) hag heni
! ar C'Hallaoued : ra vo gwenn da viken bed an tad Havard e paradoz e Zoue !

! DA C'HOUEDE e kavis Zaratustra o tiskenn eus e vro ha loc'h e vro ha di-
! wezhatoc'h e sioulded Freiburg im Brisgau e selaouis mouezh abaf ha don Martin Heidegger
! hag abaoe e kerzhan war va hent, va unan-penn, hep doue, hep lezenn usvedel, renet gant
! bondoug (Gm. Naturtrieb) va gouenn ha preder va c'henel; kantren a ran, ha faziañ dirak
! perennegoù (hBr. petrendec "kroaz-hent") zo, hogen va c'hantreerezhioù-me ha'm fazioù-me
! eo a varnan me va-unan...

war-dro d'an emsav sevenadurel a zo didalvoud, a zo bout un treitour. Ret eo deomp holl !
kemer hiziv hent hor silvidigezh, ha neket hini ar werinoniezh pe ar yezhoniezh : an hent
nemetañ en deus saveteet Iverzon hag Izrael, Ifriqia hag alJezair, ne lavaran ket. !

SPLANN a-walc'h eo ar pezh a fell deomp lavarout amañ. Pa vez grevus ar
c'hleñved, ret eo d'al louzoù bezañ kreñv. In emsav sevenadurel, n'eus ket a-walc'h a-
nezhañ evit saveteiñ ar vroad euskat; peurret eo an nerzhioù gwastet ennañ evit savete-
iñ ar vroad euskat; hag ar peurrest n'end eo nemet digarezioù aner, nemet emzallidigezh. !

ECHUIÑ a raimp gant ar ger-stur hor boa kroget gantañ : PE DREITOUR PE
VROADELOUR. !

Troidigezh gant Jon MIRANDE eus ur pennad euskek embannet e Zutik (Var-sav),
kelaouenn an emsav broadelour ETA (Euskadi ta azkatasuna) = Broad euskat ha frankiz,
Nn. 6, p.1. !

***** !

K E L A O U E N N O Û

AR VRO, 16. (J. DESBORDES, Bât. H4, Kêr Andon, Concarneau, Finistère; 15 F,
CCP. 1493-79 Nantes). Lennet e vo enni pennad-stur Per Denez ken tost e vroadelouriezh
ouzh hon heni. Ur frealz eo klevout hevelep komzoù war-lerc'h yod divlas L'AVENIR DES
QUESTONS. Lennet e vo aketus ivez pennad Veillard ha Pennek war gudenn ar Gurded. A-zi-
vout Mustafa Barzani, arabat e ve ankouezhat e ereoù gant ar Soviedunvaniezh. Trugareka-
at a ran va c'heneil abanna evit e gomzoù dreist hegarat em c'heñver. Cheu ! Tuet e vin
da gerzhout hiviziken hep teurel ur sellig ouzh bediz va c'horn-bro ! Meur a dra a ve da
lakaat da dalvezout en e varnadenn war A.S.; re enket omp marteze etre hor preder broa-
del hag hon diuz gwerinel. Spi am eus dont en-dro war ar gudenn-mañ en niverenn a zeu.
Ur pennad hepken e brezhoneg, gant Y. Olier a ro amañ diskleriadurioù a-zivout savidigezh!
e bennadoù politikel kozh. Daoust hag e teuy a-benn da habaskaat AN HINI KOZH ? Me a ve
tuet da vezañ a-du gant hemañ daoust da vezañ kenoad gant Olier. !

AL LIAMM, 95 (P. LE BIHAN, 6 Domaine des Hocquettes, SURESNES, Seine, 15 F, CCP!
5349-06 Paris). Div varzhoneg kaer gant Sten Kidna; ur pennad plijus eus levr Youenn Dre-
zen; kendalc'h studiadem Olier war C'Halia romanekaet; resisadurioù fur Teo Jousset war
an anvioù-lec'hioù Breizh-Uhel. Dre vras, uheloc'h eo derez ar gelaouenn, ha gwell a se. !

AN TRIBANN, 30 (70 Av. du Plessis-Tison, Nantes, 10 F, "Gorsedd" CCP. 1907-81,
Nantes). Daoust hag e teufe, erfin, ar vBoñbarded da vout broadelour ? Gourc'hemennoù
kalonek d'am c'henvreur A. Russon, enta. Keuz am eus avat lavarout d'ar Stourmerion n'eus
nemetañ hag ho kwaz a hañval gouzout ar yezh, e-touesk ar varzhed. Ne fell ket din komz
diwar-benn da bennad, keneil Kalondan, me gav din ne ven ket a-du genez !

CAHIERS DE L'IROISE, Nn 4, 1962 : mar fell deoc'h ho tiduiñ lennit ta pennad hor
chaloni rannvroel : dont a ra en-dro d'e vardozerzh evel ar c'hi d'e zislonkadenn. Ab-
anna, va c'heneil ker, sede dres ur studiadem a hellfe da skoazellat evit lakaat da vont
war-raok da vicher. Bez'hor boa tousegi dilost. Sed m'hon eus kavadenmet un touseg mar-
dozus. Ha binimus ouzhpenn. Ha raktal goude pennad 'Falhun setu ur gac'hadenn foerellek
ad maiorem Euzhvil gloriam. Mankout a ra anvioù Sèité ha Merser : leun kouch e ve bet
toull ar raned. !

TER WAARHEID (Staf Vermeire, Staatsbaan 22, Zulte-aan-de-Leie, 100 FB, postre-
kening 46-78-17). Plijet on bet gant kelaouenn hor c'hileion dudek (diets) eus ar strol-
lad "Nederland-Één". E-barzh an Nn.6 e kaver ur pennad gant Roeland Raes "Interkeltisch
Kongres" a lakay hor bro da vout anavezet gwelloc'h e Nederland. Ur pennad mat gant Staf
Vermeire, "Nieuw Europa" a-zivout levr H.J.G. Waltmans, "Het Europa der volkeren". !

JEUGDERIEF (Postbus 432, Antwerpen I, België), kelaouenn nederlandek Kameraad-
schapsring der nationale Jeugd van Europa. Ur pennad mat en Nn.2 diwar-benn Joris van
Severen. !

ZUTIK!, kelaouenn ar strollad ETA; e-barzh an Nn. 8 e lennor ur pennad war "la
situación de Euzkadi", ur pennad sinet Zabala a-zivout "La nueva Europa y los estados
europeos actuales" a hellfemp moulañ ger evit ger e-barzh Ar Stourmer. !

G.P.

HENT AR OUENN, HENT AN NATUR

gant RIGAKOS.

-IV-

UNAN eus an diforc'hiou pennañ a veneger d'ar boaz etre spered ar Gris-teniezh hag hini kelenn an "den mat" eo kudenn ar "pec'hed orinel". N'eo ket e gwirionez ken eneptuek hag e seblantfe an daou venoz-se : en anv un Doue pe en anv ur Stad, ken ferv enepiniennel en em ziskouez bezañ an aozerien idolennoù.

HINIENNEL spered an Dispac'h gall ! Peadra da vougañ dre c'hoarzhin ! Dispac'herien an holl amzerioù hag an holl vroioù n'o deus morse gouzañvet ec'h en em renje an hiniennoù e-keñver ar Stad evel ma troje en o fenn, nebeutoc'h eget e forzh peseurt doare ren all. Distrujet e vez an holl dud a seblant bezañ ar c'hourdrouzerien ! evit un urzh diazezet ha mar kaver uhelvennad ar meiz dieub en un tu bennak, n'eo ket er c'h-"comitard" skort Robespierre, pe ar paltoked Xruščev, hogen en ur Spinoza pe ur Hobbes, meizourien an diharzveli speredek, en ur Gatarina Rusia pe ur Jozeb II Aostria ! hag en o raok en ur Marcus Aurelius, evel e tud veur an Azginivelezh. Hag atav dre ma oa evit ar re-mañ er gevredigezh tud a zegas er bed un dra bennak ha na vije ket bet hep-zo, ha tud all, kalz ha kalz niverusoc'h, a hell bevañ pe chom hep bevañ hep ma kemmje ! netra en-dro dezho; tud hag a breder hag a adsked o c'hreizenn.

UN DRA a dalv unan all evit kristenien ha dispac'herien, idoloù a zo evito ma rank plegañ dirazo an holl gwitibunan; saveteet ar re gentañ eus ar "pec'hed marvel" dre ziskuliadur hag aberzh ar C'Hrist; saveteet ar re all eus stad vantrus an tiranelezh dre ziskuliadur Meurzud an Dispac'h hag aberzh o merzherien. An hevelep doare manezegzh : araok ur Burzhud, goude ur Burzhud, a ren war gristenien ha dispac'herien. Amañ en ur dremen, e c'heller merkout gaouierezh lu ar skol lik, "neptu". Ken un-uek eo eget an hini all ha n'eus nemet gwelout penaos e talc'h -- seul sotoc'h ha boutinoc'h, seul vuic'h -- ar re maget o spered er skol frankizidegus kempleg ar vanezegzh dispac'hel.

A DRA sur, dilignezet e oa noblañs Vro-C'Hall, lamet diganti hogos holl ! he abeg da vezañ, dre striv didorr ar rouantelezh evit kreizennañ mui-oc'h-mui hag ober eus pennoù-brezel arvarus a-weizhioù tud a lez breinet ha mat da seurt en eur an arvar. Atav e kouezher war gudenn veur an diaester da gaveut an aristokratelezh wirion; forzh ! penaos avat e kenglote gwelloc'h o'hoazh frammadur urzhazel ar gevredigezh kent dispac'h, ouzh lezenn an natur eget meskaj "demokratel" an amzer vremañ ma n'eus a zieubded wirion ennañ nemet d'an arc'hant da ren, d'ar sotoni da zic'hlannañ a bep tu ha d'ar bolitikerien da verañ diwarni. Fear ez eo bet muioc'h a bolised ? Piv a yaje d'an "Elysée e Bro-C'Hall evel ma'z ae gweizhall an neb a gare da di ar roue ? Ha kemeret e vije bac'h La Santé evel ma kemerjod La Bastille ? Peseurt derez a zalc'h bremañ an dud ur ster gant ! o zonkadur, tud veur an nerzh, ar galonegezh, ar ouiziegezh hag an arz e-kichen amzer an Azginivelezh ? Sellit ouzh USA. Ur gouloù speredel er bed n'eo ket hag unan eus brasañ mallozhioù diskoulm brezel 1939-1945 eo an dra-mañ : riezrenerezh ar bed etre daouarn kouilheien evel ar Yankied ha kevezourien an hollzanvezouriezh istorel, kenstrob holl sioù hag holl vilderioù an dropellouriezh hag ar muzul boutin. Renet eo ar gevredigezh amerikan gant galloudegezhioù an arc'hant, levezonet don er vuhezegzh gant ar maouezed, arouez difazius a zistervezh spered, rak n'eo ket muioc'h empenn ar vaouez par da hini ar gwaz eget hini ar morian, da skouer, par da hini an den gwenn.

DRE VR/S e teuer d'ar pennwiriadur-mañ : pe e kemerer ar bed evel m'e-mañ pe ne reer ket : dirak ar bed kalet, renet gant ar striv peurbadus hag hollek, e ranker kaout spered ar stourm hag ar youll drec'hiñ, diouzh un tu, emskiant kaerderdreist an natur ha krouidigezhiañ ar spered e kengan ganti, diouzh an tu all gant ur galon da sellout ouzh buhezioù all da zont hag ar c'hoant da aozañ anezho dre en em greñvaat ha kaeraat e pep doare : Meine Lehre sagt : so leben dass du wünschen müsstet, wie-

der zu leben, ist die Aufgabe -- du wisst es jedenfalls ! Wem das Streben das höchste Gefühl gibt, der strebe; wem Einordnung, Folgen, Gehorsam, das höchste Gefühl gibt, der gehorche." Heklev peurbadus kentel Friedrich NIETZSCHE. Ar re a nac'h kemerout ar bed evel m'emañ, a dec'h dioutañ, a glask Ruhe, Inordnung ha Gehorsam e stern un doare uhelvennad ! diouzh o spered a rank eta, evel m'hon eus gwelet endeo, klask en tu bennak un digoll hag ur repu; stummañ an tu-hont ha faltaziañ paradoziou ennañ pe glask adstummañ ar bed ha kemmañ e lezennoù evit treuzfurmiñ anezhañ en ur baradoz gant tud deut da vezañ aeled de-mokratel o kanañ klod penngorollereien o saturnalenn. Siwazh ! Bresk hag arvarus eo ar paradoziou ha ne zedennont ket ar re greñv na skuizhint ket gant o embregerezh; evit ar paradoziou war an douar, lavarout a raen e lakaont da soñjal e kentel Maneš : dalc'hmat e chomont da zont-da-wir, dalc'hmat e sav dispac'herien dispac'husoc'h eget ar re a gav mat, ar stumm-gevredigezh nevez savet ganto. Ha koulz ar gristenien hag an dispac'herien a striv da aozañ hent o faradoziou amañ pe ahont, da reiñ d'ar bed un dremm a blij dezho. Ha siwazh d'ar paour kaezh boudoù denel e seblant dezho bezañ skoilhoù evit o labour. Ar voudaidi, i, da vihanañ, pa ne glaskont nevet tec'hout da vat eus ar bed ha kelc'h an ad-korfadurioù (*), a chom hep klask kemmañ tra pe dra dre rediañ unan bennak war an douar.

/R RE GREÑV ha balc'h eo ar re a ra gant ar bed ar pezh a zo da ober gantañ pa gemeront anezhañ evit c'hoariva ar stourm dizivez en diabarzh hag en diavaez, o vennat avat reiñ d'ar stourm ur ster hag ur gened na hell bezañ nemet an denelezh. Ne neskinont ket ar dud voutin dre glask rediañ anezho da vezañ ar pezh ne hellont ket bezañ pe ober kizhier mezv diouto. Ra heuilhint o zonkadur ken a zeuio o zro en ur vuhez bennak, da vezañ kreñv ivez. Mestroniet hag uhelawenet eo ar re greñv gant santout talvoudegezh o unvoud hag hini o unouenn, hemañ o tougen egile. Ar re all a rastell ar bed holl, a zatum hep diforc'hidigezh, an niver eo a gont; na perzh na gouenn, kevatalded ! Ar re-mañ a oar ez eus er gevredigezh "tud fur" ha "tud foll" evel ma lavar ar Groniked, kenelioù kaez hag uhel, kenelioù divalav hag izel, an divalavañ an izelañ rak ar Gened a c'houlou kerz ar C'Heal en Diskouezetact.

CHAL meur kristenien, dispac'herien, ha marksourien eo stummañ personelezhioù an dud, breviñ pep striv hiniennel dindan pouez divent ar gredenn -- graui sub religione --, ur gredenn evit an holl (pegen lemmesperedel ha hacl e oa Nietzsche ivez o tiarbenn pennster Kant ma tleje unan sellout ouzh e reolennoù buhezgezhel evel ouzh reolennoù ar Silvidigezh hollvedel). Ober robotoù ha perokedoù. Ha kaout, war ziazez an hollgevatalded, an emzalc'h-mañ : emskiant ar "pec'hed" (e-keñver Doue o faradoz pe hini o diskuliadur politikel; gwelit ar benedourien o skeiñ war o bruched, e-touez an eil re hag ar re all !) na talvoudus eo evit an ilizoù hag ar Stadoù pleg-ene ar sklaved a youll hag a natur. Neuze e c'hellont diskouez en eskemm ar gendruvez diganto en doare dereat. Pe tra talvoudusoc'h ivez evito eget an tech en tropelloù d'en em dreiñ dalc'hmat daveto da c'houlenn o harp war an dachenn-mañ-tachenn ? Liammañ a reer ar paourañ chatal o vozañ anezho mui-oc'h-mui da chom hep gallout meizañ ar vuhez ma rankjent tremen hep harp dieh-an ar savadurioù kevredigezhel. Peseurt lorc'h hiniennel ha gouennel, peseurt dizalc'hded ha balc'hded ene a hell mont a-gevret gant ar meskaj ingalderouriezhel ?

POENT eo bremañ dont da heuliadoù an darvoudennoù bras sellet outo betek amañ war ar bed arnevez.

- V -

Yl, SELLOMP ouzh an heuliadoù : brav ha frealzus n'int ket. Doare-echuñ ar brezel 1939-45 a zo bet unan eus brasañ gwalleurioù en istor ar bed : Kornogiz Europa -- ar re zellezek anezho, da vihanañ, ret eo pouezañ war an dra-se -- a zalc'he gant reiñ,

(*). Ar ger ne glot ket, e gwirionez, rak un diforc'h don a zo etre menoziad an hindaouadegezh (en un den e teu diouzhtu pe a-benn ur pennad, da enaouiñ ur benvegadur all, hini un den pe ul loen) hag hini ar voudadegezh (n'eus ene gwirion ebet, hogen ur strolladegezh amzeriel a elfennoù speredel liesdoare. En em stummañ a ra a nebeudoù, a-hed ar vuhez, a dro da dech, da lusk pennañ ar bersonelezh, skeudenn ar strolladegezh nevez a en em ziskaro war lerc'h steuzidigezh homañ, savet gant harp elfennoù nevez).

!goulaouer kultur ha meurder an Den gwenn, a zo bet diframmet diganto galloud, enor ha !
!lorc'h, ha gwashoc'h c'hoazh, breinet pe beurevret eo bet o askre troet dezho da fall !
!ha kablus. A ! emskiant ar "pec'hed" ! Ganti e voe sebeliet bravañ ha kreñvañ gouenn an !
!denelezh, holl zemokrated ha ploutokrated ar bed o seveniñ warno, dre o sotoni, evit lod, !
!o hironegezh korfel ha speredel evit lod all, o mad dianzavus evit an holl hag en diwez, !
!droukrañs peurbadus, noazusted a-ziabarzh ha diroll speredel ar Yuzevion a zalc'h anezho !
!dre levezon drastus ar gristeniezh awenet gant tu fall o spered : hini an tec'h dirak !
!lusk ar vuhez war-du an Nerzh hag ar Gened.

!AR C'HORNNOG a zo bremañ dileuriet gant broioù pe war o diskar pe goue- !
!zhet er c'hleñved spered hag en emzinac'h hag o tiskouez arouez difazius ar gwander hag !
!ar faezhidigezh : an tec'h war-du an emstrollañ, pep hini o klask bezañ muioc'h da en em !
!harpañ war re all ha bezañ harpet ganto, an tec'h war-du ar veuzidigezh en ur c'henstroll !
!dieun, disneuz, diene. War betra ec'h en em ziazezje ? Marv pep brogarantez wirion a !
!vije, n'eo ket gladoù (Sz. interests) arboellerezhel a liammo estr eget loened tropell. !
!Arabat komz eus ar rannvroioù deut da vezañ ur vroad, ur seurt skouer ne dalv mann, rak a !
!zaou dra unan : pe ar rannvro a zo ur rannvro wirion ha n'eo ket da geñveriañ gant ur vro- !
!ad gant hec'h holl berzhioù istorel, yezhel, hengounel, h.a., pe ez eo e gwirionez ur !
!strollad denel dezhañ spisverkoù ar broadoù; an hini gentañ a deuzo en ur stad, an eil en !
!em zalc'ho, o winkal keit ha ma pado yac'h ouzh he c'habestrierien.

!NA. KLER avat e vije Europa a glasker aozañ : ur vro hironet muioc'h !
!c'hoazh en he spered eget en he c'horf, ken kollet ganti an dellezegezh an eeunañ betek !
!gouzañv, hep gourlamm ar speredoù uhelventet ha kadarn, e vefe skubet mezhus eus ul lec'h !
!graet ganto, darn eus he bugale gant tadoù izeloc'h e pep keñver, ur vro all kouezhet e !
!dour himiget ar morc'hed, ar binijenn hag ar mazoc'herezh, oc'h en em atahinañ abaoe u- !
!gent vloaz war an "dorfedourien vrezel" (pa n'ez eus bet noarvat hini all ebet e lec'h all !
!ebet, hogen er broioù all an hevelep tud a zo bet lakaet a-zioc'h ar re all alies), o koll !
!war a seblant, ken buan ha na teuz un tamm soavon en dour klouar, hent bleuñvidigezh he !
!gouenn, dre levezon puritaned diot USA (Hermann von Keyserling en doa lavaret nat e tal- !
!vezfe da daol ar marv speredel, amerikanuster e vro), un trede bro a nebeut a dalvoudegezh !
!evit Hanternoziz ha Kelted, hag en diwez broadoùigoù danvreinet ivez gant an displedadur !
!demokratek. Ret eo anzav en ur dremen, evelato, ez eo diskennidi an Izelvroiz a salv, int !
!o unan, brud, enor ha talvoudegezh ar Ouenn wenn en Afrika. Setu eta un Europa a zoare !
!Hag ouzhpenn se, iriennoù politikel lous pe lousoc'h rumerion broadoù pennañ ar c'haer a !
!stroll-se, pep hini anezho o klask bezañ ar nestr war ar c'hoari.

!AN HEVELEP arouez a goazhadur, a zisleberezh, gant an hevelep tech d'an !
!unaniñ a zo diskouezhet gant ar gristeniezh hiziv. O koll o galloud war an dud mui-oc'h- !
!mui, o koll war an dro o stourusted, e klask an Ilizoù kristen en em harpañ ivez en eil !
!war heben evit gallout derc'hel penn gwelloc'h ha padout pelloc'h. Setu ar pezh a c'hoar- !
!vez gant an traoù a ya gant an herr akuizitet hag a vev diwar an doare aura krouet gant !
!pep kredenn deut da gemerout fetister, nerzh ha levezon, an aura deut da vezañ buhezekaet !
!kalz muioc'h gant oberoù ar pennañ eus an difennourien, meizourien, "merzherien" hag hes- !
!kinerien ar gravez a zo anv anezhi eget dre elfennoù orinel homañ. Pa soñjer e dic'houzañ !
!vder dibar ar gatoligiezh, e weler e talv hec'h habaskadur da genragarouez gant marv an !
!arz kristen gwirion, hini ar pennilizoù.

!SKUIZH, klañv, faezh zoken, e klask broadoù Kornog Europa hag ar c'hra- !
!veziou kristen adkavout, e lezenn ar re wan, ar strollañ, ul lusk nevez hep kavout ar blan- !
!kenn-kamm ret. Evit ar gristeniezh, lavaret em eus endeo e oa deut a nebeudoù, a-dreuz ar !
!c'hantvedoù, he spered da drec'hiñ er gevredigezh dre ma koazhe ar feiz, d'ur framm dog- !
!mennel. Hag ar spered-se a zo estren dre e orin da gaerañ, kadarnañ hag ampartañ gouenn !
!ar bed. Ne zalc'h ket dre an diabarzh. Evit Europa, daoust ha n'eus ket tu da hetañ e teu- !
!fe d'en em unaniñ ? Eo. Hogen war an dachenn ha dre an nerzh nemeto a hell reiñ dremm, !
!dazont, sked ha skin : re ar Ouenn.

!AL LIAMM-se a zo glan ha ken padus dre ret hag ar gevredidi o-unan. N'eo !
!ket iriennoù, n'eo ket gladoù, n'eo ket troidelloù politikerien, embregerezhioù ploutokra- !
!ted pe loaverien livastred, nann, hent, menez, heol, gwad an Natur eo.

(da genderc'hel.)

PAJENN AR YEZH

gant Goulven PENNAOD.

P'HON eus savet Ar Stourmer e felle deomp, evelreizh, displegañ hor me-noziou politikel, kevredigezhel ha prederouriezhel; met e felle deomp henn ober, dreist-holl, e brezhoneg. Soñjet hon eus e ve un tammig lu evit tud a fell dezhe lakaat hor bro-er-maez kelc'h ar Stad C'Hall ren hor stourm gant skoazell yezh hon enebourion : da vihanañ ne ve ket rebechet deomp mallozhiñ e galleg sevenadurezh ar C'Hallaoued... Un hevelep soñjezon ne halle diwanañ nemet/empennou tud na oant ket brezhonegerion "a-vihanik" koulz lavarout : ar vrezhonegerion "a-vihanik" a zo tudjentil re uhel o emskiant c'hall, peurliesañ, siwazh, evit damantiñ da ober gant ar brezhoneg o-maez o ziez-ferm pe dibenn banveziou Ponpon pa ganont yec'hed da Vro-C'HALL... Eus strollad kentañ A.S. ne oa nemet hor c'hile Rigakos a oa eus Breizh-Izel : eus Euskadi e teue Jon Mirande, eus Bro-Rodou R. Glemarec, hag eus Poù-Aled e oa kerent Mikael Josom koulz ha va re. Ac'han marteze liy ar roazoneg gant hor skridoù... Ne vern : an eil re evel ar re all e felle deomp skrivañ en ur yezh "klasel", lese evit tud a oar lenn ha skrivañ en hor yezh hep chom abaf dirak un dro-lavar pe ur ger bet graet gantañ e krennvrezhoneg pe kemeret nevez-flamm digant ar c'hembraeg. Peurliesañ hon eus lakaet etre klochedoù ur spisc'heriad e saozneg, alamaneg kembraeg, ha zoken -- rouesoc'h -- e galleg, war-lerc'h ar gerioù "diaes". Goulennet eo bet ouzhimp evelato resizañ ster gerioù zo ha setu a rin amañ hag en niverennoù a zeu eus ar Stourmer. War-lerc'h ar ger e lakaen ar bajenn ma voe graet gantañ evit ar weizh kentañ, hag e ran reizhadurioù pa vez ret. Trugarekaat a ran al lennerion o deus kaset deomp evezhiadennoù diwar-benn hor yezh : deut mat int atav.

glad g. -où : enebañ a reomp glad ouzh bro, o reiñ dezhañ ar ster a gaver e krBr., d.sk. er werzenn : Miret he stat he gloat hac he madou (B.28); s. p. 54 : Poëllgor-studiañ hag -eren glad ar Vrezhoneg = CELIB. Ac'hano ster ar ger-mañ :

gledig g. gledion (10) : penn ar Stad. Impleizet e oa bet e krBr. gloedic evit envel kont Kernev; d'am meno e klot mat gant hengoun ar Gelted : ho pet koun eus "deverioù ar roue" hag eus mojenn Bres en Iverzon na larde ket kontilli e sujidi...

kenel b. -ioù (1) : ha ret eo menegiñ hIv. cenél, Kb. cenedl, h.a. ? Kerverziou en doa dasorc'het ar ger. Enebiñ a reomp ar genel ouzh ar werin tra ma ra ar C'Hallaoued gant peuple evit an eil hag heben. An eil a denn d'ar ouenn (s. Gm. Volk) hag heben d'ar renkad kevredigezhel.

riez b. -ioù (1) : s. hIv. rige, hKt. *rigion a roas Gm. Reich. S. ouzh pennad Kerverziou e-barzh Galv.

kravez b. -ioù (8) : heugus a hañvalas deomp ar ger religion ha gwell ganeomp ober gant ar ger-se adstummet hervez Kb. crefydd hag anavezet endeo gant Kravez Kelt Henaff...

reour g. -ion (8) : haroz; eus Kt. *ro-wiros "dreist-gour"; evit a ouzon e voen an heni kentañ oc'h ober gant ar ger-mañ em c'hentañ pennad brezhonek Reourion ha Sent bet savet evit Kad war-dro 1948 (va digarezit : 1516 amzervezh Ledav !).

gweriniezh b. -où (8) : republik; s. Kb. gweriniaeth.

gwerinelour g. -ion (11) : sokialour.

gwerinadegzh b. -ioù (24) : demokratiezh.

lu g. -ioù "arme"; anavezet mat eo ar ger, met el liester e reomp a-weizhiou (12) gant

luoz o talvezout da Gl. Armée gant ur bennlizherenn, ha neket luoer evel ma reas Mevn Mordiern; Kb. -oedd, krBr. -oer (cafuoez P.5 a zo ul liester daoust da argrederezh R.Hemon, TPMB. 103) a zo aet da -oz e nBr. (s. krBr. malloer, ratouez, h.a.).

heni ra. Gwell eo ganen ober gant heni eget gant hini rak ar stumm krBr. koshañ eo; s.

a du arall ouzh ar stummoù gwenedek / hāni / h.a. Ober a reomp ivez gant youll, glenn, diwez (hep zh) evit abegoù heñvel. Dre vras e fell deomp derc'hel start ouzh doare-

skrivañ 1941, a zo, daoust da skignadegoù an tousegi ar gwellañ heni hon eus bet betek amañ, ha dreist-holl, ne fell da heni ebet ac'hanomp sevel kudenn un doare-skrivañ

nevez; hogen er skritur-mañ ez eus traoù diret hag e c'heller, d.sk. ober gant -ien pe -ion, -hen pe -fen, h.a.. Ne fell ket deomp ledanaat tachenn an troadurioù betek re

met oberenn ebet n'end eo disi ha war vunudoù zo e kavomp gwell pellaat diouzh reizh-skrivadur geriadurioù an Ao. R. Hemon : eñ e unan, d.sk. a skrivas aberz en emb. ken-

! tañ e c'heriadur, hogen, reishoc'h, aberzh er re all. Aes e ve kavout skouñoù all : s. !
 ! àr er Geriadur Istorel, h.a.
 ! evit me (24). Paour kaezh M. ! Evit ur weizh ma raen gant un dro-lavar poblek ! A-du on !
 ! gantañ avat : n'eo ket brav tre hag o kounaat ar pezh a c'hoarvezas e kerneveg an ei- !
 ! tekvet (ya : ober a ran gant eitekv... evel Collocou Quiquer !) kantved e vizie bet !
 ! gwell din derc'hel evidon...
 ! uhelgimigadezh b. (26) "mision bras" mar fell deoc'h, pe "la grande voix de la France": !
 ! meurdeus e sonas ar ger-mañ d'am diskouarn ha dereat evit komz eus uhelvenoz ar C'Hal- !
 ! laoued; n'em eus ket e ijinet : sellit kentoc'h ouzh ar chCatholicon hag e kavot qui- !
 ! mingadez "message".
 ! kerzh b. -où (27) : "arz". Ne ouzon ket piv al leue a ijinat arz. Ne hañval ket bezañ !
 ! koshoc'h met an NOTK. (s. GIB. A-165). E krBr. ne gaver nemet ar, art diwar ar Gl. !
 ! Gwell eo ganen enta ober gant kerzh war skouer Kb. cerdd, hlv. cert. !
 ! kevarc'h g. -ioù (32) "salud", s. Kb. cyfarch, Br. arc'hiñ. !
 ! kadoniell agw. (48) "taktikel" enebet ouzh brezeloniell "strategikel". !
 ! diveotiad (51) : "kultur" : n'eo ket brav ar ger-mañ, hervez Kb. diwylliant hag e raimp !
 ! gant diorroidigezh hervez ali an Ao. Mordrel. !
 ! kevalouriezh b. -où "kapitalouriezh"; impleizet e oa bet kevalavouriezh gant Y. Olier, !
 ! met, d'am meno e ve kouezhet ar -v- e Br. S. Kb. cyfalafiaeth ha Br. alañ. !
 ! trevnour g. -ion (54) a zo bet savet war skouer Kb. trefnwr evit treiñ Sz. manager. Her- !
 ! vez soniadouriezh ar Br. e ve bet gwell skrivañ treinour pe trenour. !

 ! BLEIMOR HAG URZH SKAOUTED EUROPA !

! GOURC'HEMENNIN a reomp hór c'heneil Perig KERAOD bezañ lakaet da dalve- !
 ! zout ur c'heal eus Mikael JOSOM ha bezañ tizhet sevel un urzh a skaouted vrezhon distag !
 ! diouzh heni ar C'Hallaoued. Ne oufed prizañ re an dra-se. Ar weizh kentañ eo, abaoe ar !
 ! faezhidigezh, ez eo anzavet ur strollad breizhat gant pennadurezhioù europat dezhe ur !
 ! stumm damriezel. Gant plijadur enta hon eus lennet war Barr-Heol 33, 50-53, lizher Perig !
 ! Keraod d'an Ao. Kleiz o tiskleriañ dezhañ penaos e oa deut a-benn da drec'hiñ war entre- !
 ! mar ar gomiserion europat : "Kaset ez eus bet ul lizher skrivet gant an Ao. Guieysse, en !
 ! anv Kuzul Broadel Breizh, o tegas koun eus ar gwirioù-stad a voe anavezet d'hor banniel- !
 ! mor betek 1790." Ma ! Banniel-mor pe banniel-brezel, heni ar vozenn eo ha pa ve bet un !
 ! heni all ne arguzfen ket ouzh Perig ! Met ar pep pouezusañ -- ha fentusañ war un dro -- !
 ! eo e voe ret da Berig goulemm skoazell ouzh... un hugunod (an Ao. Guieysse), un nevez-pa- !
 ! gan/ touet (an Ao. Henaff), ha, spi am eus n'en deus ket disoñjet an Ao. Mordrel a ve bet !
 ! tostoc'h ouzh e gredenn-eñ, hep bout ken "kovanourel" (krBr. coffan "integra & casta") !
 ! hag eñ... Ha kement-se evit lakaat "Doue da gentañ" e Breizh ! Feiz, setu kenlabourerezh !
 ! efedus, ha ne fell ket deomp chom war-lerc'h : Buz ha buhez enta da Urzh europat skaou- !
 ! ted Vreizh ! Yorig. !

 ! DA VEZAÑ EMBANNET EN NIVERENN 7 : !

! Hor c'hredenn gant R. GLÉMAREC, MIKAEL JOSOM.

! An eil ervenn, § 3 : Davet ur strollad kenelel ha gwerinel;

! § 4 : Darbar ar brezel reverzhiel

! gant A. Le BRAS ha B. Le BIHAN.

! Hent ar Ouenn, hent an Natur, gant RIGAKOS § VI.

! An doueou morianek, gant Roeland CAVALLIER (Vlenderen).

! Hon Europa, gant Goulven PENNAOD (prezegenn displeget e MOB Paris).

! h.a., h.a.

! * * *
 ! * * *
 ! * * *
 ! * * *